

BARR-HEOL

WAR FEIZ HA BREIZH



AN DUGEZ ANNA

NIV. 89

MIZ GOURE 1976

PRIZ : 8 LUR

TAOLENN

1 - Klerg. Anna Vreizh	1
2 - A. Duval, Dirak da skeudenn Dieub Pedenn evit ur bloaz nevez	4
3 - Ingeborg Bachmann. Al Lestrad ponner (troet gant L. ANDOUARD)	5
4 - Klerg. Prosez ha Burzhudoù Sant Erwan : <i>Avispice-Tregordel</i>	5
5 - Eujen ar Rouz (F. Danno, Klerg)	11
6 - E. Rouz. Bro Va C'havell	14
7 - L. Andouard. Ar Romanched	15
8 - Buhez Santez Gwennvrewi	18
9 - <i>Levrioù. L. Kahr. Une Bretagne libre est-elle viable</i> Anna Youennou, F. Debeauvais A. Deniel, Le Mouvement breton J. Gros, Le Trésor du breton parlé E. Le Barzig, Mur de Bretagne et sa région B. Tanguy, Les noms de lieux bretons	22
10 - <i>Keleouennoù. Brud</i>	28
11 - <i>Per ar Maenour. Breizh, Bro Gras</i>	30
12 - <i>Un nebeut keleier</i>	33
13 - <i>Klerg. Liderrez ha Menozioù Nevez</i>	34
14 - <i>Lizheroù (Y.D., L.A. P. ar Gall)</i>	38
15 - <i>Soaz an Tieg. Keginerezh</i>	40
16 - <i>Klerg. Garienoù ha Troioù-lavar</i>	40

ANNA VREIZH (1476-1976)



Prefed an Naoned (o pellgomz) :
Allo ! Allo ! An Aotrou Pontiniasko,
n'estr-an-diabarzh ? Amañ prefed an
Naoned... Soñjit deoc'h, Aotrou Ministr, ez
emañ, em burev, ur vaouez bet tapet
gant va folis hag a lavar bezañ an Dugez
PREFED...

PONTINIASKO : *N'emaoc'h ket oc'h
ober goap, Aotrou Prefed ? Ha kredih
a-hu e teu ar re-varv en-dro war an douar ?
Pelec'h emañ ho penn evit va direk
e-kreiz va c'hefiredioù ?*

AR PREFED : N'eo ket o farsal nag
oc'h ober goap an hini emañ, Aotrou
Ministr. Ar vaouez a zo amañ a zo ur
vaouez seven, kaer, eviti da vezañ bihan
a-walc'h. Galleg a gomz, met galleg kozh
hag a zo poan oc'h intent ; brezhoneg kozh
a zeu ganti ivez ha poan o deus va
foliserien, ar re oar brezhoneg, oc'h intent
ivez. Latin mat a oar ivez. Ur vantell
erminget a zo ganti war he divskoaz.

AR MINISTR (en umor vat !) : *Ma
biskoazh kement all ! Ur marvailh dispar !
Met gout a ouzoc'h, un Dugez Anna a ra
bep bloaz Bretoned Pariz, unan bennak
evel-se e tle bezañ ! Eus ar fentusañ hoc'h
istor ! Sellit eta hag-ehñ na vefe ket
botoù-koad ivez ganti, evel ma lavar ar
son : Dugez he botoù-koad... Ma ! Peogwir
ez eus poliserien ganeoc'h, bezit gant ho
jeu, rak gant ar Vretoned-se ne ouzer
morse. Kenavo.*

AR PREFED (oc'h adistribihañ ardi-
vink ar pellgomz). Ma !

Ur sell a reas war ar vaouez hag hep
gout dezhañ e reas ur sell da gê he zreid.
Skrijañ a reas : botoù-koad melen bihan
brav rikamanet dispar, gant choukennoù
voulouz prizius ; ma vefent bet kemeret
kentoc'h evit skarpinoù-saloñs eget evit
botoù-koad.

AR PREFED : Piw ez oc'h-c'hwi ?

AN DUGEZ (respont a ra e galleg
kozh, e brezhoneg kozh, pe e latin pa ne
vez ket intentet mat. Ni evel just, ne lakomp
amañ nemet he brezhoneg modernaet).

Ma ! Me eo an Dugez Anna, deuet
ez on da adwelout va Breizh milgaret
evit gouzout penaos emañ kont ganti.
Va Breizh din-me. Amañ emañ er gêr
moarvat, em c'hêr a Naoned e-lec'h
emañ bepred va c'halon en he lestrig-
aour fin.

AR PREFED (sec'hik) Er gêr ? En
Naoned, evel just.

DUGEZ : E Breizh, a lavaran.

PREFED : Itron Dugez, c'hwi 'zo kozh...
Va digarezit... C'hwi 'zo eus an amzer gozh,
rak yaouank ez eo bepred ho tremm, met ni
'zo en XX^{vet} kantved, hag evit ezhommoù ar
Frañs hon eus ranket troc'hañ an Naoned
eus ar peurrest eus Breizh evit ober ur vro,
ur rannvro ledanoc'h gant rannvroioù all :
Broioù all. Liger a reomp anezho.

DUGEZ (he daoulagad o virviñ en he
fenn) : Piv en deus biskoazh roet ar
gwir-se deoc'h da droc'hañ va Breizh
en daou ? N'eo ket me, sur ha n'eo ket
marteze. Breizh en he fezh a oa din,
Breizh en he fezh, p'am boa ranket
plegañ da zimeziñ da roue ar Frañsizien
ha rediet ivez d'he c'harout evel ma tle
ur wreg vat hag onest karout he fried,
met biskoazh n'am boa soñjet daou-
hanterañ va Bro.

PREFED : Kaozioù, Itron.

DUGEZ : Met fellout a ra din
adwelout va Bro en-dro, bezañ enoret
ur wech c'hoazh ken kaer evel ma oan
bet pa oan bet oc'h ober tro Vreizh e
1505...

PREFED : Va digarezit, Itron, ret eo
din ho perzañ... Diwallit. Echu eo an amzer
an Duged, an Dugezed. Ni 'zo e Republik
hag ur Prezidant ar Republik an hini a zo en
hor penn. Mar doc'h deuet da lakaat
strafuilh ha reveulzi amañ, kaer hoc'h eus
bezañ Dugez e-giz ma lavarit, e rankin
lakaat ar polis da deurel evezh ouzhoc'h da
virout na zegasfec'h da soñj d'ar Vretoned
eus ar pezh a oant gwechall.

DUGEZ (dichek) : Hag a c'hellfent
hag a zlefent bezañ c'hoazh, moarvat.

PREFED : Ar gwir a roan deoc'h
d'ober tro ho tugelezh kozh, met dav e vo
din dibab ambrougerien diouzh va dorn,
d'ho tiwall ha d'hoc'h heñchañ. Kit eta, mar
plij ganeoc'h, d'ober tro an Naoned.

Sebezet e chomas an Dugez o welout
ar ruioù ledan, an tiez bras, ar pontoù kaer
taolet dreist ar stêr... Met goude an em

DUGEZ ANNA (kendalc'h)

soñjal, e kavas e oa mat kement-se, rak anaout a rae intrudu ha chemed Naonediz, paotred hardizh, paotred kas war-raok.

Nebet-tre a dud avat, a rae van outi. Klevout a reas koulskoude ur bugel bennak o lavarout d'e vamm, war ar ru : « Sell 'ta, mammig, an Itron gaer-mañ, Homañ a zo hañval ouzh Dugez Bretoned Pariz a oa he foltred war ar c'hazetennou, en deiz all... ».

Pa droas he fenn da sellout, e oa set an Dugez diwar-wel ambrouget gant un armead polised.

Santout a reas an Dugez, evit ar wech kentañ, e oa ankounac'haet pe dost. Souezhet-marv e oa gant kement-se. Ne ouie ket moarvat ne veze ger ebet anezhi, pe dost, el levrioù a servij er skolioù da gelenn an Istor d'ar vugale... Re zahjerus e vefe bet, a-hervez, ha Prezidant ar Republik koulz hag e vinitred a gave dezho e oa kalz gwelloc'h sparañ dorioù ha prenestroù ar skolioù ouzh kement a selle ouzh Istor Breizh.

AN DUGEZ (goude he zro dre gêr an Naoned) : Me a garfe adwelout ivez va c'hêr garet a Roazhon. Eno ez on bet meur a wech e penn ar Stadoù, nemet ar wech diwezhañ ma oan bet oc'h ober tro Vreizh, n'am boa ket gallet mont da saludiñ va Roazhoniz. Ranket am boa zoken hastañ buan mont betek Gwitreg da gimidiñ diouzh Breizh, dre ma kave ar roue, va fried, e pade hir va beaj...

AR POLIS (goude bezañ pellgomzet da Breded an Naoned) : Ya ! Mat eo d'an Aotrou Prefed ho kwelout o vont du-hont. Kas a ray kemenn zoken d'ar Prefed-Rannvro ma viot degemeret, evel ma tere, ahont.

AN DUGEZ ANNA (dirak toull goullou ar Monument bet taolet en aer e 1932) : War am eus klevet ez eus bet aze ur Monument hag a rae va sujidi vat « Monument ar Vezh » anezhañ, dre ma oan bet poitredet war bennoù va daoulin dirak roue Frañs. War bennoù va daoulin, me, Priñsez Roueel ha Souveren ? Biskoazh n'am eus sachet mezh na dizenor war va anv-ma, na war lignez illur Rouaned ha Duged Vreizh, na war va fobl. Meuleudi d'ar re a danfoeltras ar Monument-se !

An Dugez (oc'h ober ur sell war Balez Breudou-Breizh, ar Parlaman). Na kaerat ti, na kaerat palez, na kaerat salioù

e-lec'h ma stourmas keit all ar gwir Vretoned evit mirout gwirioù ha frankizioù va Bro Breizh. Mil bennozh Doue warno ! Potius mori quam foedari ! Mallozh war an dreitourien, gwerzherien Vreizh ! Allaz ! Krog oa da gompren ez eus bet graet distruj ha dismantr dre amañ.

AN DUGEZ : Dont a ra c'hoent din da vont da aveliñ va fenn smezek Kornog va Bro, etrezek ar Mor Ims, etrezek Gwengamp 'lec'h emañ bez an den Santel Charlez Bleiz, Lazareg, war bez. Dom Erwan ar beleg, ar Montroulez, va forzh-mor, Gwengamp. Gwelout va mor o c'hoent ar dantelezh gwenn ha glas tre ar mor Breizh... Va Follgoad ! Ya ! va Follgoad marzhus 'lec'h ma stonkas va c'hoent gant an esmae hag an dud, va wech degemeret e-kreiz enorioù ha zoken nemet ar Baradoz a gement a gaver o c'hement all...

(En dro-mañ avat, a voe ret pellgomz da Breded Kemper, hag emañ tapet ber-ha-ber a bellgomz da Viniestr-an-Diabarzh da glevout an urzhioù...)

AR MINISTR (hag a o paouez kantañ e Kuzuladeg ar Gouarnamant Istor an taol-pellgomz en devoa bet digant Prefed an Naoned, a zeuas da respont) :

Ma ! Biskoazh kement all ! N'eo ket echu c'hoazh an afer istrogelleg-se ? Nann ? N'eo ket dahjerus ? Nann ? Polised a-walc'h hoc'h eus ? Ya ? Ma ! Baleit anezhi, ar foeltr a garo ! Grit un tamm folkloraj ganti. Grit dihued ganti hardizh, gant diwall evelkent da feukañ ar bobl, rak n'ouzer kammed, gant ar Vretoned-se...

AN DUGEZ (o welout ar Follgoad en-dro a voe darbet dezhi fatikañ). O, va Follgoad !

(Amzer e oa bet da gas keloù dre ar vro hag e oa bet amzer da zastum un toullad pennoù-bras d'ober un degemer dereat d'an hini a oa bet div wech Rouanez Frañs ha chomet bepred Dugez ar Vretoned).

UR PLAC'HIG (12 vloaz bennak dezhi, karget d'ober ar c'hompilant d'an Dugez) :

Madame La Duchesse...

AN DUGEZ (sebedennet o komz outi hec'h-unan) : Homañ vihan ne oar ket brezhoneg, pe betra ? Amañ, e Breizh-tel ?...

... ur wech echu an hini vihan da lenn he c'hompilant e pokas an Dugez dezhi hag e tegemeras diganti ar gurunenn-lili kinniget dezhi.

AN DUGEZ : Trugarez dit, va flac'h bihan. Gallet az pefe komz ouzhin e brezhoneg, kaerañ yezh a zo er ber-kemañ.

AN HINI VIHAN (nec'het un tamm, met ha daoulagad o viriñ dre ma komze kinnigour an Itron Dugez outi) : Ya, Itron Dugez, met n'eus ket bet desket din brezhoneg er gêr, hag er skol ne glevan netter galleg e-pad an deiz... Me 'm eus netter deskit...

AN DUGEZ (o sevel he mouezh da bezañ klevet gant an holl). Dalc'hit soñj, va sujidi garet, e vleunie ar brezhoneg er vuzelloù hor Sent, dalc'hit soñj e vevre dousoc'h eget mel diwar vuzelloù an noblañsoù, diwar vuzelloù an tronezed uhel ! Mar deo gwir hoc'h eus nac'het ho yezh, pelec'h emañ eta er bluenn-sour am boa sinet va c'hontrad-uread ganti, ma torriñ, ma vruzhunin anezhi ha ma rogin ar c'hontrad-se.

Krog a oa ar Bolised da gompren edo an traoù o vont da drenkañ. Sellout a raent nec'het an eil ouzh egile.

Un tamm mesk a voe e-touez ar bobl. Bez'e oa daou zen o tonet war-raok, unan ur beleg, hag egile un den nann-beleg : Breton a oa anv ar beleg, ha Fouere anv an aotrou all.

AR BELEG (en a anv dezhañ e-unan hag en anv an Aotrou Fouere). Meuleudi deoc'h, Itron Dugez ! Mil meuleudi deoc'h ! Ar pezh a livirit aze a zo ken gwir all, war veur a dachenn. Gwerzhet eo bet ho Breizh, ho Pro, ho Breizh, ho Bro. Ni 'zo o tonet eus an toullbac'h, dre m'hon eus klasket difenn kaoz ar Vretoned. Pemp miz omp bet en toull, ha c'hoazh emaoomp o paouez bezañ bet laosket da vont hep na vefe bet prosez ebet, na prouet seurt ebet a-enep deomp. Ha ken abof, ken aonik, ken spontik, eo douet an dud a-liz da vezañ, ma'z eus bet a-boan unan bennak eus va superioed o skrivañ ur ger bennak din.

AN DUGEZ (trefuet, oc'h astenn he daouarn d'an daou zen bet toullbac'het) : Ma ! Keit ha ma vo Bretoned evelloc'h a-du gant gwirioù va fobl, ne vo lec'h ebet da zizeperañ... C'hwil 'zo tud dispar. Gras ma vo kalz evelloc'h.

Bennozh Doue e-greiz va c'halon deoc'h ho-taou ha d'ho kevelerien !

En dro-mañ avat, e oa krog ar bolised da santout c'hwen en o loeroù.

AN OFISER : Poent eo echuñ gant ar sirk-mañ... (d'an Dugez). Itron, skuizh e tleit bezañ goude bezañ bet un devezh start evel he-mañ. Peogwir hon eus bet ar garg ac'hanoc'h digant Prefed an Naoned, a rankomp ho kas en-dro davetañ.

Diouzh an noz, diwezhat a-walc'h evelato en em gavas an Dugez Anna e burev ar Prefed, en Naoned. Sioul ha didrouz avat, e chomas hep rannañ ger ebet, evel unan leun he spered gant ar pezh he devoa gwelet ha klevet. Ar prefed a reas gervel ar re o devoa kavet an Dugez diouzh ar mintin hag a lavaras dezho he c'has en-dro d'al lec'h m'o doa he c'haet. En em zibab a raje. A voe graet.

AR PREFED (da Viniestr-an-Diabarzh). Allo ! Allo ! An Aotrou Pontiniasko, Ministr an-Diabarzh ?

AR MINISTR : Ya ! Eñ e-unan. Petra 'zo ?

AR PREFED : Echu ar sirk ! Pesaurt sirk ?... Istor an Dugez Anna ! Ne ouzon ket kaer petra da soñjal ?... Bec'h ? Un tamm bihan ; atav e vez gant aferioù evel-se. Met bremañ ez eo tremenet. Sioul eo pep tra. Lavaret ez eus bet din ez eus klevet evel un tarzh-kurun o tonet eus al lestrig-aour 'lec'h m'emañ kalon an Dugez, met gout a ouzoc'h n'eus ket en tu-hont d'ar Vretoned da huñvreal ha da glevout traoù !...

AR MINISTR : Ya ! Ya ! Ni 'gavo an tu d'o damasaat...

AR PREFED : D'an eur-mañ ne glevan mui nemet mouezh ar gaouenn o klemm hag o hirvoudiñ war dour bras Kastell an Duged. Erru eo an noz du-dall. Poent mont da glask warc'hoazh vintin. Kenavo.

AR MINISTR : Marv eo Anna hag he suit. Ni eo ar justis ! Met piv 'oar ? Me n'ou ket superstitius, met ne blij ket din klevout komz eus kaouenned ha loened-noz evel-se. Laboused gwall-zouganus.

KLERG

DIRAK DA SKEUDENN

DA VIVIANA G...

Noz Gouel ar Chandeleur eo
Gouel ar Gouloù.
A-hed an deiz 'm eus soñjet ennout...
Ha soñj ac'h eus, Viviana, eus va zi paour ?
Emañ azezet fenoz : amañ
'Lec'h ma oas azezet p'out deut d'om zi
Ar memes tan en oaled, sioul pep tra
Nemet an oralañ o vuzuliañ an amzer.
Bloavezhioù 'zo tremenet abaoe
Gant o samm a breder. Gant o fouez a enkrez
A striv hag a stourm evit ar Yuhez
Ha Buhez har Bro, Buhez ar Ouenn.
... Panner eo bet da groas, Viviana
Ha teñval da Hent er Bed-mañ.
Hentoù don ha strizh ar Gelled !
Kildroennek ha skosellek, treuzet alies
Gant drez ha spenn o drein garo.
Padal o tiboukañ war ur blaenenn c'hlas
Marellet a vleunv gwelevus
O lintrañ dindan an Heol.
Pe war ur parkad Ed-bara
O wageniñ en aezhenn flour Gouere.
- A ! Lavar dimp Viviana, bleuvann Keltia
E vleugnez bremañ da viken
E Liarzh-hud Tir-na-N'og.
- Lavar dimp ac'h eus kavet
E penn da Hent-don
Ar Sklerijenn-se hirc hortozet
An Heol a Garantez-se ma huanade dezhañ
Da Galon-don. Da Ene naaniek.
- A ! Lavar dimp ac'h eus kavet Du-hont
Hon Harozed hag har Sent
Hon Merzher Brogarour ar beleg santel
Marvet evit Breizh.
Hag an holl re all kouezhet
Evit ma vevo Keltia evel Pobl
A drez ar C'hantvedoù.
- Lavar dimp ac'h eus kavet aze
Hon Handadoù a deus difraostet Bro-Arvar
Hag ar re a deus graet hec'h Istor
O deus komzet ha komzet er Yezh
Emañ enni Ijin ha Spered ar Ouenn.
Hon Dukez vat m'out ken heñvel outi.
Nevenod, Arzhur, Alan, Marvan,
Kadoudal, hag holl servijerien Keltia
Aet d'ober a feoc'h dirak Doue.

Viviana, Viviana, Bleuffenn c'hlas tener
N'ankounac'ha ket da Vro, Har Bro.
Ped Doue ar Sklerijenn hag an Nerzh
Da ziskouez Hent an Trec'h
D'ar re a gendalc'h gant ar Stourmad,
Ha bez e Peoc'h ar Wenvidigezh

Da Viken.
Amen.

Anjela DUVAL
Gouel Chandeleur 1976

DIEUB ?

Ur c'hi kallharet ha skoell e selh a drez ar
porzh, a stlejañ d'e heul arouezioù e
sklavelezh : ur c'holler hag un tamm pennad
stogellenn.

Ki doñv, kousker ha liper-batoù
Evit 'n em ziduiñ eo e krignez
Da stagellenn-ganab ?
Betek he zroc'hañ !
... Daoust hag un dra bennak
A glaskez kemmañ ez tamm buhez-ki ?
Daoust ha te ouezfe an Implij
Eus ar Frankiz ?

N'eo ket gant an Den bepred, ki paour
E c'hellfes dont d'ar skol !...

Marteze eo te Ki a rafe skol dezhañ
Piv oar ?

Anjela DUVAL
21-3-76

Evit ho pagale :

WANIG HA WENIG

kelaouenn skeudennet

Pez an niverenn : 1,50 lur

Koumanant : 10 lur

KERALORET - 29249 GWISERU

C.C.F. Roudouz 2 943 51 U Rennes

PEDENN EVIT UR BLOAZ NEVEZ

Doue ! Tad an Hollved
Ha Tad an holl Vouedoù
Spered ha Materi
Hiziv selaouit m'ho ped
An disterañ eus ho pugale
A gan deoc'h e don he c'halon
He levezed da vout bev bepred...
Dirazoc'h 'vel ur bugel dirak e dad
Hep anken na distiz
E krogan gant ur Bloaz nevez
E deroù-mañ an nevez-hañv.
Petra 'va ?... Etre ho taouarn emañ.
Daoust ?... Ya, Sentus ? Naren...
Hogen ra vezo graet Ha Youl !
Ha ra ziskenno war va c'hozhni ur begad Furnez
Evit ma ne vazo ket goull : hag oner va amzer
Roit din Karantez ha Sklerijenn
Awalc'h da lodenniñ etre ar re a zo
O strebijiñ hag o tastornat war an Hent.
An Hent-se ken strizh a gas d'ar Peurbad...

Amen

Anjela DUVAL
3-4-76

An 7^{vet}

KLERG

PROSEZ HA BURZHODOU ST ERWAN

Levrlennadurezh :

Glossarium Ducange
ACTA SANTORUM 17,
MAIL TOMUS QUARTUS
Parisii et Romae, 1866

Evezhiadenn

Anavezet mat ez eo dra ar munud an
danevelloù a adkantomp amañ hag a
c'havout a reer el levrioù diwar-benn
Sant-Erwan. Ar pezh a zo nevez en hal
labour, ez eo an disklennadurioù a glaskomp
reiñ eus an anvioù dreist-holl, hag a c'hello
marteze sikour meizañ gwelloc'h an
taolennañ doareoù-bevañ ar bobl en
amzer-se.

AL LESTRAD POUNNER

«Die große Fracht des Sommers ist verladen»

Lestrad pounner an hañv a zo bet peurgarget,
Emañ lestr an heol o kregiñ da vonet.
War e lerc'h, avat, e skrij ur skrev 'n ur splujañ
Lestrad pounner an hañv a zo bet peurgarget.

P'edo lestr an heol o lakaat da ouel
E vousec'hoarzh e gozik maouez koad an araoz.
Kinnig 'rae-hi gant lerc'h he divronn d'an avel
P'edo lestr an heol o lakaat da ouel.

Pa spluj 'n ur c'harmiñ ar skrev war da lerc'h,
Ur garventenn a gas soudan al lestrad d'ar
gaveled.
Beuziñ 'raz, avat, sebezet gant kevrin ar mor
glas
Pa spluj 'n ur c'harmiñ ar skrev war da lerc'h.

L. ANDOUARD

A-ziwar «Di große Fracht»
gant Ingeborg BACHMANN

AVISPICE : UL LABOUS NATUR AL LOUARN ENNAN

E-touez an testoù evit Prosez Sant
Erwan e oa un den hag a vez graet anezhañ
e latin : AVISPICE, pe zoken AVIS
berr-ha-berr (rann ar Gardinaled, all lodenn
al levr); El levr ACTA SANTORUM avat,
(levr Bollandiz) e vez graet AUSEPICE
anezhañ, ha setu ar stumm a gaver alies el
levrioù diwar-benn Sant Erwan. Daoust
ma'z ac'h muioc'h preset da glevout istor
an den-se, lannenien ger, e rankan ober
deoc'h kemerout un tamm pasianted da
ziskouez deoc'h ez eo AVISPICE gwir
stumm e anv. Testenn ar Gardinaled, evel
n'emaomp o psouez lavarout, a skriv AVIS
ha dre-se ne welomp ket perak derc'hei da
AUS, evel pa c'hallfe bazañ al lodenn
gentañ eus an anv.

Elevr La Borderie, hervez an dornskrid latin bet adskrivet gant Tempier hag e genlabouerien, e skriver atav E evit AE hag amañ e ranker lenn, na petra 'ta, AVISPICAE. Ar re a oar un tamm latin a gompreno diouzhtu AVIS - PICAE hag a droio EVN-PIG pe c'hoazh ar pezh a zo heñvel LABOUS-PIG. Al latin avat, AVIS a dalvez ivez a-wechoù evit gallina = yar. Amañ neuze YAR-BIG hag ar ger-mañ a zo anavezet mat-tre e brezhoneg ha distaget YARBIG, hennezh e oa sur-mat ster AVISPICE ; pe gentoc'h e lesanv l

Tu avat a zo da zibab etre EVN-PIG ha YAR-BIG pe implijañ anezho o-daou evel ma redmp-ni en hon danevell. Ur vaouez kozh eus Plouared, eus an ampartañ war ar brezhoneg, e lavare deomp n'eus ket pell, e c'helled en amzer Sant Erwan, ober EVN-PIG eus YAR-BIG -ar pezh n'eo ket ur broouenn, evel just, met a ziskouez e kompren ervat ar bobl petra eo EVN-PIG ha YAR-BIG.

Mar degemerer EVN-PIG e vo mat derc'hel soñj penaos e veze skrivet en amzer Sant Erwan : EZN (distaget EDDN, ETHN) hag ar stumm-se a gaver da skouer paj. 129, e-lec'h ma komzer eus an Itron Mabilia, eus parrez Gwiklan, en eskopti Leon, gwreg Alan ROZNEZN (Roznezn o talvezout ROZ-AN-EVN). (Mabilia, uxor Alani de Rosnezne, parrochiana de Ploelan, Leonensis diocesis).

Petra eo avat ur yar-big pe un evn-pig ? Daoust ma ne vez ket graet alies, e tichañs a-wechoù, kement ha c'hoari, da ganfarded 'zo krapat en neizhioù-pig, tapout ar vious, poazhat anezho hag o adlakaat en neizh en-dro gant ur vi-yar bennak da c'hoari. Ar vious-pig, evel just, ne zeu labous ebet diouto pa'z int poazh, met ar big a chom da c'hoari ken na vez difluket ar yar-big ! Ar yar-se dezhi war un dro natur ar yar ha natur ar big, a vefe, hervez lavar ar bobl, gwanoc'h ha nervusoc'h eget ar yer bihan all, ha droukoc'h dre ma kresk ; ha tamm-ha-tamm dre forzh pikat ar re all e vez piket ganto hag e varv abred... Ret e vefe avat, gwiriekaat kement-se, rak n'hon eus kavet den ebet hag en defe bet gwelet yar-big ebet...

Met ar pezh a zo iskis a-walc'h eo e seblant al lesanv roet d'hon AVISPICE klotañ gant e demz-spered, ha gant stad e yec'hed...

Un den ha na oa ket yac'h an hini 'oa. N'eo ket sklaer-sklaer al latin : INFIRMUS.

Un den kiañvidik, un den gwan e yec'hed, ha marteze zoken siet e gorf. Hon EVN-PIG pe hor YAR-BIG-ni a ranke bezañ evel-se, ha pa oa ken mat Sant Erwan ouzh ar beorien hag an dud kaezh, e oa deuet da glask repu davetañ, e 1291, d'an oad a 21 bloaz (1). Pa ne oa ket un den kaezh ne c'helled ket reiñ dezhañ labourioù start da ober. Lakaet e voe da geginer ; ober soubenn da vihanañ a ouie ober, rak eñ a veze karget da aozañ anezhi d'ober beorien ha d'e vestr.

Evit bezañ keginer e Kervarzin e oa ret bezañ ken ampart hag ur Santezh-Tieg bennak. A-hend-all moarvat e oa veze sikouret gant familh Riwalloz. Gant-holl gant Pantonada : homañ a oa bezañ karget da zerc'hel naet ha kaezh an ti, ha war he c'hont edo gwalc'hed d'ober had : ur wech e tegouezhas ganti kaezh d'ober Sant Erwan : «Un orrol l'emp'gant al laou a oa outi !».

Marteze evelkent, e oa droukoc'h EVN-PIG war ar gegin eget ne soñjomp, rak a-wechoù p'en em gave tadod brezege-rien : Dominikaned pe Tadoù eus Urzh Sant Frañsez e veze graet «frikio» a-ratozh evito...

YAR-BIG a oa 12 vloaz 'oa e servij Sant Erwan hag ar beorien, ha tostaat a rae ar C'hoariz. E-pad 11 vloaz diouzhtu en devoa gwelet pebezh pinijennoù rust a rae e vestr, dreist-holl e-pad ar C'hoariz : yun bemdeiz diwar bara ha dour...

Erru omp eta gant ar bloaz 1303, ar bloaz ma tlee Sant Erwan mervel. War e hanter-kant vloaz edo ar Sant, hag anat e oa d'an dud a oa war e dro, e oa krog e nerzh da vont digantañ. Ha setu m'edo ar C'hoariz o vont da zigeriñ, ha tamm esper ebet da welout Dom Erwan o laoskaat war boent ar vuhez pinijennus a rene, gant ar riskl da heul, da abretaat e varv.

Lavaret e vez :

*N'eus na tort na kamm
ha na ijin un tamm,
N'eus na kamm na tort
ha na ijin a bep sort !*

Ne oa ket servijer Sant Erwan, EVN-PIG evit mann. Setu eñ, un devezh, o tont da gaout e vestr :

— ME, emezañ, ne rin ket a soubenn, na din-me, na d'ar beorien nemet asantñ a rafec'h hoc'h-unan debrñ aveldomp hag a-gevret ganeomp. Peotramant e raimp holl pinijenn aveldoc'h».

Ar paour-kaezh Ebn-Pig ne oa ket e stad da dremen ar C'hoariz oc'h ober pinijenn evel e vestr ! Hemañ diouzh e du a anaveze e Ebn-Pig hag a ouie a-walc'h e oa barrek d'ober ar pezh a lavare : pikez a-walc'h e oa evit-se ! Ne blijte ket da Sant Erwan tabutal diwar-benn pinijennoù : eñ a rae pinijenn, hag e kave mat evel-se, met ne giaske ket hep ezhomm, lakaet ar re all d'ober pinijenn. N'eo ket diaes deomp gwelout dre hor spered, Sant Erwan oc'h ober ur sell a druez ouzh e servijer hag o respont dezhañ war e blaen : «Ma l, arabat dit ober an taol-se ! Te ac'h eus ezhomm soubenn vat, hag ar beorien gaezh ivez. Met evit ober plijadur dit, e tebrin a-gevret ganeoc'h ar soubenn a ri deomp, soubenn-ar-fav, soubenn-ar-piz, ha legumajoù all. Me avat, he debo gant un tamm hollen hepken, met hep temz all ebet, hag evel kustum gant bara gros segal-winizh. Koulskoude d'ar merc'her, d'ar gwener ha d'ar sadorn e fell din yun evel er bloavezhioù all».

Graet e voe marc'had evel-se, hag ar C'hoariz diwezhañ a dremenas Sant Erwan er bed-mañ e rankas plegañ d'e Ebn-Pig.

Pa varvas Sant Erwan d'an 19 a viz Mae 1330 ne oa ket Ebn-Pig war al lec'h, e Kervarzhin : aet e oa da Louaneg. Met kent mont kuit en devoa gwelet e vestr o lavarout an oferenn evit ar wech diwezhañ, oc'h oferennañ gant deolizh tener ha feiz don, Tad-Abad ar Porzh-Kaer (Bellus Portus) hag hini Itron-Varia-Vear, ouzh hen harpañ a bep tu... Ne zistroas Ebn-Pig da Gervarzhin nemet goude bezañ klevet ar c'heloù eus marv Dom Erwan.

Un tamm mat a goll a oa evitañ, a dra sur, met e-pad 12 vloaz en devoa bet ar c'hras da welout e vestr a-dost-kaer, e skouerioù santel, e oberoù a drugarez, e zouster hag e basianted e-keñver an holl, hen klevet o prezeg gant kement a feiz ar Gormz-Santel ma ouele ar Sant alies a-unan gant ar re a veze ouzh hen selaou. Skoet e spered ivez gant meur a zarvoud dreist-ordinal evel hemañ...

Klevet en devoa Sant Erwan komz eus un den hag a oa ar vrud e oa un droukspered en e gorf.

— Kae, Ebn-Pig, eme Sant Erwan d'e servijer, kae da gerc'hat an den kaezh-se hag hen degas amañ din-me.

An den kaezh-se ne oa ket brav tostaat dezhañ. O chom e oa e Treleven : Alan ar

C'hozh a veze graet anezhañ (= Alanus Senis). Gant e vab eo bet kontet an istor : Gwilhelm a oa anv ar mab-se da Alan : Guillemus filius quondam Alani Senis (test 102, paj. 171) (2)

— ... Drouk-spontus e oa : skeiñ a rae gant an dud pa c'helle tostaat dezho, drailhañ e zilhad, yudal evel ul loen, chom hep kousket, gourvez war an douar ha lavarout : «Perak 'ta am skuzhez evel-se ?» Ranket e oa bet hen klozañ en un ti bennak ha tremenet e veze boued dezhañ dre ur prenestrig, hag alies (gant resped deoc'h) e troazhe war e voued a-raok hen debrñ (Dabatur sibi (sic!) comestio super quam frequenter mingebat et postea comedebat...).

P'en em gavas Ebn-Pig eno, ne stourmas ket an diaouleg outañ an disterañ, hag e teuas sioul ha brav d'e heul. Pa voe Alan ar C'hozh dirak Sant Erwan, e iliz Louaneg e c'houlennas hemañ digantañ

— Ha gwir eo ez eus un diaoul ennout ?

— Ya, emezañ, hag alies e wallgas ac'hanon hag e komz ouzhin.

Neuze e reas Sant Erwan dezhañ kofesaat ha goude e gofizion a c'houlennas digantañ :

— Ha derc'hel a ra bepred an diaoul da gomz ouzhit ?

— Ya ! Va gourdrouzet en deus, ha prometet ober droug din : Perak, emezañ, ac'h eus-te va degaset amañ ? Gwazh-a-se dit, emberd da noz e ranki paseañ ar pezh ac'h eus graet ouzh va degas amañ

— An diaoul, eme Sant Erwan dezhañ, a zo o kontañ gevier ; rak n'eo ket te eo a baeo, met eñ e-unan ! Emberr e chomi amañ da zebrñ ganin, ha da gousket em zis.

Pa voe deuet an noz e reas Sant Erwan fichañ ur gwelo d'an den kiañv, e-tal e hini ; neuze e skoas dour banniget war ar gwelo, hag en ti, lenn a reas Aviel Sant Yann hag e lavaras pedennoù all. Ober a reas d'an diaouleg mont da gousket, tra ma chome e-unan e-pad an noz koulz lavarout, hep kousket, o lenn hag o pediñ. Kousket c'hwek a reas Alan evel n'an devoa ket graet tri bloaz a oa, emezañ.

— Bremañ, eme Sant Erwan dezhañ, lavar trugarez d'an Aotrou Doue evel ma ran me va-unan. Kae d'ar gër, gra ar mad ha kae alies hag a galon vat da selaou oferennoù ha prezegennoù, gra aluzen, bez madelezhus, mir gourc'hemennoù an iliz.

betegout na zistrofe an diaoul ennout ha na vefe gwashoc'h da stad eget a-raok !».

Biskoazh a-c'houdevezh ne oa bet an droukspered war-dro Alan ar C'hozh, eus parrez Treleven. Pemzek vloaz bennak e vevas c'hoazh goude e bareañs.

Un drovezh bennak all, e ti Hamon ar Rouz, stok en iliz Louaneg, e oa bet kroget an tan, hag e kleved an dud o hopal, evel m'emañ ar c'hiz en degouezhioù evel-se : «An tan ! An tan !». Sant Erwan hag a oa en iliz o pediñ a zeus er-maez ; goulenn a reas ur bannac'hig laezh ha goude bezañ graet sin ar groaz warnañ, hen skoas gant e zorn war an ti en ur lavarout «*En anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. Amen* !». Kerkent e varvas an tan.

Tremenet e oa an amzer-se pa zeus Yarbig, da Landreger, er bloaz 1330, da zougen e desteni. A-benn neuze edo o vevañ evel un ermit, en un ankloz, e Gwengamp, e tal ar pont. Daoust d'e yec'hed fall, e oa bev bepred, ha kalz eus ar re en devoa anavezet a oa marv a-benn neuze, evel Riwallon ar soner ; met bev e oa bepred Pantonada, hag erru e oa en oad a 80 vloaz, bev ivez an div blac'h en devoa anavezet pa oant bihan e Kervarzhin : Amisia hag ar Goentenn, ha meur a hini all. Ne ouzon ket peseurt kaoz a veze etrezo, met n'eo ket diaes divinout... Goude bezañ bet o pediñ war vez Sant Erwan, e kemerent hent ar Vinic'hi, hent Kervarzhin, en ur eforvoniñ e buhez o mestr. Hag eñ, Yarbig o kontañ gant teneridigezh, an dro-louarn en devoa c'hoariet d'e vestr dre garantezh evitañ.

... 17 vloaz avat, e vije ret gortoz c'hoazh kent gwelout Erwan lakaet war roll ar Sent gant an iliz Katolik. Met evit an holl dus-vat-se ne oa ket diaes ar gudenn da zibunañ...

NOTENNOU DIWAR-BENN ST-ERWAN AVISPICE

1 - 21 bloaz ado e 1291, peogwir an devoe 50 vloaz da goulz ar Prosez. Ganet e oa neuze e 1270. E anv-badez a oa Ivon (Ewen).

2 - Taurel evezh ouzh ar ger latin «quondam» o tiskouez e oa marv Alan a-benn 1330. Gwelout izaloc'h : 15 vloaz bennak e oa chomet bev goude e bareañs.

TREWEZEL Raklavarig

Anat eo n'o deus ket ar re o deus skrivet buhez Sant Erwan klasket reiñ d'an anvioù-lec'h na d'an anvioù-tud o gwir stumm. Aleksandr Masseron, alvokad e lezvarn Brest, da skouer, daoust d'ur rakskrid liv ar ouiziegezh warnañ, n'en deus torret e benn o teurel sklerzenn war ar poent-se. Ha koulskoude ! Pa weler, lakomp, e-touez servijerien Sant Erwan, un den anvet Tholeflam ha koulz eus Plistin-an-Traezh, ez eus peseurt vezañ estonet un tammig, ne gavet ivez gwashoc'h ? Dreist-holl pa ouzer ez eo Eflamm an den eus «seizh sant Bro-Blistin !».

Gwir eo e vez skrivet anv ar Sant Erwan e meur a stumm : Tholeflam, paj. 32 ; Tolleflam, paj. 37 (Harnav, stofflam parrochie de Plestin = Harnav, Tholeflam eus parrez Plistin).

Er bajenn 170, setu-eñ isklaer parrezian eus Louaneg : «*Amo Tholeflam* (sic !) *reclusus, parochianus de Lohaneac*» (*Harnav Tholeflam, ermit, parrezian eus Louaneg*). Ur wech da vihanañ e welomp, paj. 102 **AMO TOULEFLAM**. Pa oa e gwirionez, genidik eus Plistin, n'eo ket diaes gouzout eus peseurt korn eus ar barrez e oa : eus Sant Eflamm, na petra 'ta ! Eus Toull-Eflamm, an Toull ma voe Eflamm o ren e vuhez-ermit, pe al lec'h ma skoas an Aerouant er mor, hervez ar marvailhoù-pobl. Bez'e oa unan eus ar re a blije ar muiañ da Sant Erwan, dre ma oa un den pur ha glan. Toull-Eflamm, setu penaos e tlefed skrivañ e anv.

E levr MASSERON adarre, e kaver nouspet gwech anv **Yves de Tregordel**. Setu aze un anv ha mar bez galvet e berc'henn dindan an anv-se, er varn diwezhañ, ne gompreno ket 'm eus aon o c'hervel piv e vezor, daoust ma'z eo evel-se ez eo skrivet e levr de La Borderie, paj. 112 : **Yvo de TREGORDEL** (test XLVI = 46), eus Pleuvihan.

Met kent mont hiroc'h, gwelomp da gentañ e desteni. Hir a-walc'h ez eo an testeni-se, rak mignoned a bell 'zo e oa Erwan Helouri hag Ivon Tregordel. Div wech e oa bet Tregordel o studiañ an Orleañs d'ar mare m'edo Erwan eno ivez. Ne vezent ket o loañ en hevelep ti met en em welout a raent alies. An dro gentañ ma oa bet Tregordel, en Orleañs e oa chomet daou vloaz, hag an ail tro daou vloaz hanter. Daoust ma seblant lavarout en

devoa bet darempredoù gant Erwan e-pad an holl amzer-se, ne c'hell ket an dra-se bezañ, rak ne oa ket bet Erwan 4 bloaz hanter en Orleañs o studiañ.

Goude ma oant distroet da Vreizh en em welent alies-tre : a-wechoù hed ur sizhun, pe zoken div sizhunvezh hag ouzhpenn. E Kervarzhin pe Louaneg, kement ha ken bihan ma lavar Tregordel en devoa gwelet e vignon tremen mil gwech. Hen gwelet a-walc'h en devoa oc'h ober pinijenn, o yun bemdeiz, nemet d'ar sul, hen gwelet ivez o servijañ ar beorien gant e zaouarn e-unan, en e di a Gervarzhin, hag e presbital Louaneg (1). Bet e oa zoken o tebrif e ti Dregordel e-unan (2) hag e prioldi Pleuvihan (3). Notit ervat an diforc'h a zo etre an daou bersondi : presbital Louaneg ha prioldi Pleuvihan (**presbyterium...** de Lohaneac, **prioratus de Plebe Parvâ**). Rak evit gwir, ez eo bet chomet Pleuvihan betek 1793 ur prioldi eus Abati Sant Jord, eus Roazhon. N'eo ket ur person eo a oa e penn ar barrez met ur priol.

Kement-se a ziskouez ivez ne oa ket Sant Erwan un den divonedus, hag e veze alies war an hentoù ; war e droad atav avat ! Evit mont da welout e vignoned, evit biziñ ar glañvourien ha reiñ o sakramantoù dezho, evit prezeg : daoust ha n'eo ket e Pleuvihan ec'h echuas an drovezh-se ma reas 7 prezegen en hevelep deiz (Deiz Gwener ar Groaz), en ur vont eus an eil parrez d'eben, kement ha ken bihan ma ne oa mui evit chom en e sav, hag ez eo Ivon Tregordel a rankas hen souten ? Met forzh pegen dedennus e vefe mont da heul Sant Erwan hag e geneil mat Tregordel, e rankomp treiñ hor selloù war ur poent all...

Er bajenn 112 e kaver meneg eus un **YVO TREGUOEZEL**, un den eus parrez Pleuvihan. Daoust ha ne vefe ket ar memes den ha TREGORDEL ?

Amañ avat, a ranker ober un tamm tro en hon danevell, daoust ma vefe tu da reiñ diouzhtu ar respont. Selaouit da gentañ istor ur burzhud bet dre veritoù Sant Erwan. N'eo ket re zispiljus, evel ma welot.

Tremenet e oa bet an darvoud amaomp o vont da gontañ deoc'h, 9 bloaz goude marv Sant Erwan, da lavarout eo er bloaz 1312...

A-boan ma kaver amañ hag ahont e levr tev de La Borderie, un draig bannak o sellout ouzh buhez pemdezlek ar bobl. Setu perak ez eo talvoudus sellout a-doat ouzh

pep tra. D'ar c'houlz-se ne oa ket a vekanikoù bras da zornañ (nag ur pennad mat da c'houde !). Diwezhadik e veze an eoñt, ha ret klenkañ an ed en ur skiber bennak -pe dogañ mat ar berrloù- d'o diwall diouzh ar glav, da c'hortoz un devezh sac'h bennak d'hen dornañ. Ha d'han dornañ gant c'hwistoù, pe freilhoù. Dav e veze kaoz sikour an amezien evit ober al labour. E latin an amzer-se e levered «*flagellare bladum*» = freilhata, gwalaennata ed. Marteze e veze graet ivez, en amzer Sant Erwan gant ar verboù freilhata, pe gwalaennata... En deiz-se, eta, edo an dornañ e ti Ivon TREGUOEZEL. Miz Here e oa dija. E-touez an dornerien edo un amezeg da hemañ : Yvon Kadiou Skalar (Yvo Cadioci Scalart).

A-greiz-holl e voe klevet tud o krial forzh. Hag Yvo Kadiou d'ar red da welout petra a oa en em gavet : e vab Alan, ur bugel bloaz hanter pe war-dro, e oa kouezhet en un doufeziad-dour, e-tal ti Yann Jafrez ar Mab-Henañ (prope domum Johannis Gaufridi Primogeniti). Pa dostaas e welas e vugelig astennet war an douar e-kichen an doufez, hag eñ marv : kloz e oa e zaoulagad, ne denne mui e alan, yen e oa e gorf, reut ha disliv... Bazilia, gwreg Kadiou, mamm ar bugel, eo he devoa hen tennet eus an dour hag hen roet da Alan Jafrez ar Mab-Henañ, hag hemañ en devoa hen tapet diganti ; hen astennet war an douar eno, war vord an doufez. Daoust ne deo ket sklaer a-walc'h an destenn e ranke Bazilia bezañ en em daolet en dour da dapout krog en he bugelig, ar pezh a ziskouez e oa don an doufez.

Pa oa marv ar bugelig, ha pa ne oa mui esper ebet da zegas buhez ennañ, e oa bet douget d'ar gêr, ha pourchaset peadra d'ober ul liñsel da lienañ anezhañ, gant kement a oa ezhomm a-hend-all.

Neuze, avat, e teuas soñj dazho da ouestañ ar bugelig da Sant Erwan : e dad, e vamm, e dad-kozh hag an dud niverus a oa eno (lezet e oa bet an dornañ war e gement all ha deredet an dud, se 'zo sklaer) a yeas war bennoù o daoulin evit goulenn digant Sant Erwan daskor ar vuhez d'ar bugel. An tad, ar vamm hag an tad-kozh a ouestias anezhañ da Sant Erwan hag a brometas reiñ d'ar Sant ur c'houlaouenn-goar un dinar, hag ouzhpenn profañ bep bloaz un diner ivez. Kerkent ec'h addeuas buhez er bugel. Hervez doare-kontañ isklis an amzer-se e oa chomet ar bugel hep buhez, keit ha ma'z eus ezhomm d'ober ur c'hard-lev...

Roomp en ur dremen un diskleriadur bennak diwar-benn an anvioù emaoamp o paouez menegiñ. **CADIOCI** (anv-familh) hon eus troet **KADIOU** ; **SKALART** a zle bezañ lesanv un den hir ha treut a-walc'h, diwar ar ger **skeul**, pe al latin **Scala**. An anvioù-mañ ; **Skeul** ha **Skalart** a zo meneget e levrioù F. Gourvil (gwel. levr 1^{añ}, paj. 179, 183). An dibenn **art** a zo da dostaat ouzh hini gerioù evel «**sklipard**», «**glazard**», «**gwennard**», «**Goueloard**», «**dukard**», h.a. An anv **PRIMOGENETI** (Mab-Henañ) n'eo ket un anv gwirion met lesanv an hini koshañ eus mibien an tiegezh. Amañ neuze lesanv tad pe zoken tad-kozh Yann Jafrez.

Gwelomp bremañ kudenn **YVO DE TREGORDEL = YVO DE TREGOEZEL** pe **Tregoezel**. Ur bern kentelioù hon eus da dennañ ac'hano, 'm eus aon.

Da gentañ, an hevelep den ez eo ! Sellit ouzh levr Bollandiz, an **ACTA SANTORUM**, paj. 545 hag eno e komzer eus **YVO TREGOEZEL**, parrezian eus Pleuvihan, bet div wech a-gevret gant Dom Erwan o studiañ en Orleañs. Klotañ mat a ra an traoù war ar poent-se. Evit an istorourien avat, e sav kudennoù : n'emañ ket an testenioù er memes renk en daou levr.

La Borderie a ro testeni Tregoezel-Tregordel, evel ar XLVI^{et} (46^{et}) hag an **ACTA SANTORUM** emañ ar XXXV^{et} (35^{et}). An oad avat, a glot : 55 bloaz, ar pezh a zo ur fazi anat, bet merzet gant ar re o deus skrivet buhez Sant Erwan ; ha n'eo ket diaes hen proufiñ. Ma oa Tregoezel o tougen testeni e 1330 ha ma oa 55 bloaz neuze, e oa ganet e 1275, da lavarout eo, e oa 22 vloaz yaouankoc'h eget Sant Erwan. Ma oa Sant Erwan o kuitaat Orleañs er bloaz 1279 pe 1280 e oa Tregoezel en e jakenn c'hoazh, pa oa nemet 4 pe 5 bloaz d'an hirañ... Dav, d'hor meno, lenn LXXV = 75 vloaz, da lavarout eo, e oa 2 vloaz etre an daou zen, ar pezh a zo gwirhefvel-mat.

E ti an Tregoezel-se, sur-mat edo Yann Gadiou o tornañ e 1312 pa oa bet kouezhet e baotr bihan en dour.

Ar pezh a chom ganeomp ez eo klask gout e pelec'h edo Yvo Tregoezel o chom ha peseurt furn reiñ d'e anv.

Evidomp-ni ez eo sklaer hon eus d'ober amañ gant un anv-lec'h : lec'h ginidik an Ivon-se, pe al lec'h m'edo o chom -hag a c'hell bezañ an hevelep hini !

Ar ger heñvelañ ouzh TREGOEZEL ez eo TROEZEL e parrez Kerborzh. Kerborzh a oa eus parrez (prioldi) Pleuvihan. Diaester ebet war ar poent-se.

An anv TREGOEZEL a zo bet studiet gant Emil Ernod (Glos. Moyen-Breton, paj. 277) dindan ar ger **GOETHELOC**. Ne adskrivomp ket pennadig Ernod war e hed, pa ne deo ket ret. Ernod a ro **TREGOEZEL** ha **TREVOUEZEL**. Evitañ ez eo tennet ar ger eus **Gwazell** : douar e-lec'h ma tremen ur **wazh-dour**. **Gwazell** a c'hell neuze da skrivañ **Gwazhell** en hor yezh bremañ... Ha **Tregoezel-Trevoezel** a c'hell neuze **wazhell** pe marteze **Trewezhell**. Hogen...

Rak un «hogen» a zo. Er 19^{vet} ha hiziv ez eo deuet an anv-se TREGOEZEL da vezañ TROEZEL ha distaget e vez **TREVEZEL** gant ar bouez-mouezh war ar silabenn **EUL**, pa ziefed kaout : Troezel, mar deo ar z eus un **th** kalet kozh. Kouezhet eo ar z.

Setu perak ne vo ket difennet ouzhimp moarvat klask un arroudenñ bennak all estreget hini Ernod. Lenn a rafemp eta **TREWEZEL** gant un **L** hepken e dibenn an anv hag hep **ZH**. Hag e rannfemp an anv evel-hen : **TRE-WEZEL**. Tre o talvezout **Ti**, annez, annezlec'h, kêr.

Ha **Wezel** ? Da dostaat ouzh anv un enezenn vrudet eus Bro-Wened : enez ar Gêrveur. E brezhoneg kozh **GUEZEL** (**Gwezel**), diwar ar c'heltieg **VIINIDILIS**, da lavarout eo, an hini vray, an hini gaer. Gwethel (gant **th** dous).

Hon **TREWEZEL** a vefe neuze : **Ti**, annezlec'h **brav**. Ar stumm **TREGORDEL** a zo diabegus nemet e ranker lakaat un **E** e-lec'h an **R** ha reiñ d'an **D** talvoudegezh an **TH** dous, dres evel m'emañ kont gant anvioù all evel : **ADOU** (mamm St Erwan) evit **AZOU** ; **ADEVISIA** evit **AZEVISIA** ; **ADELICIA** evit **AZILISIA** (**Aziilz**), hag all.

Darn eus ar sekretourien ha na oant ket boaz da glevout an distagadur-se **TH** (dous) a glevfe moarvat an **TH** evel un **D**.

Da lavarout eo ar **Z** eus **Trewez** a veze distaget **TH** (dous) a-du gant hof goulakadur. (4).

Ur ger berr a rankomp koulskoude stagañ c'hoazh ouzh hon displeg. Bezomp soñj eus an hini a voe mestr kentañ Sant Erwan : Yann a Gerc'hozh hag a oa eus Kerborzh-Pleuvihan. Hervez lavarioù kozh ar bobl, ez ae alies Erwan pa oa krennard, a-raok ma oa aet da Bariz d'an oad a 12 vloaz, da di e vestr da Gêrborzh. Ha mar deo gwir ar pezh a leverer, ez ae ivez Erwan

pa oa yaouankik da zebrñ da di Briol Pleuvihan gant Yann a Gerc'hozh ; hag iskisat tra ! priol Pleuvihan d'ar mare-se a veze graet Ivon Trewez el anezhañ (5) ivez : marteze un eontr d'an eil Ivon Trewez el a voe er skol en Orleañs, gant Sant Erwan. Ha diwezhatoc'h neuze, evel ma lavare Ivon-Trewez el en e desteni, e oa bet Dom Erwan en e di e-unan o tebrñ meur a wech, e Trewez el-Kerborzh. (2).

Gant kement-se avat, n'eo ket souezhus gwelout ken alies anv parrez Pleuvihan el levr war **Buhez ha Burzhudoù Sant Erwan** : darempredoù eus ar stankañ en devoa bet hor Sant gant tud ar barrez-se.

NOTENNOU DIWAR-BENN ST ERWAN TREGOEZEL

- 1 - E latin : in domo sua de Ville Martini et in presbyterio ecclesie sue de Lohanec.
- 2 - Aliquando in domo dicti testis
- 3 - Et in prioratu de Plebe Parva
- 4 - Goulakadur diwar alioù F. Kervella
- 5 - Hervez ul lizher digant an Ao. Juluen Rannou, person an Arvor-Pleuvihan, bet Kure Pleuvihan

EUIJEN AR ROUZ Evnig Penn-ar-C'hoad

Goude ur c'hleñved berr hag un oberatadenn en ospital Landreger, eo bet marvet Eujen AR ROUZ deiz Lun Fask 19 a viz Ebrel e Plougoustant. Anavezetoc'h e oa dindan e anv-pluenn **EVNIG PENN-AR-C'HOAD**. Ganet e oa bet e Peurid-ar-Roc'h d'an 9 a viz Gwengolo 1892. E obidoù a voe lidet e Pernenan d'an 21 a viz Ebrel. Pedet e oa bet an Aotrou Klerg da lavaret an oferenn ha d'ober an homilienn ha war ar vered e lavaras an Aotrou F. Danno ur c'himiad kalonek d'an hini a oa bet e genlabourer e **BEILHADEGOU TREGER**.

Amañ e vo kavet ar c'himiad-se hag homilienn an Ao. Klerg.

Un toullad doareoù a-bouez a gavo neb a garo, en **ISTOR AR LENNEGEZH VREZHONEK** gant Abeozen, paj. 151-152.

Gwelout ar son Bro va C'havell war ar golo. Sonerezh gant F. Danno.

Itron Ar ROUZ,
Kenvroiz ker,

Deiz Sul Pask diwezhañ, Eujen AR ROUZ en deus troet diwezhañ pajenn e vuhez. Aet eo da Anaon d'an oad a dri bloaz ha pevar-ugent e Plougoustant, 'lec'h ma oa deut da chom ur bloaz 'zo.

Barzh koshañ Strollad Beilhadegou Tregar a zo marv ; ha n'eo ket hepken tud e familh a zo en-kañv, met ivez ar ganerien hag ar c'hanerezed niverus o deus kanet e oberennoù, war leurenn ar Beilhadegou pe ouzh mikro ar Radio.

Perak an-devoa eñ choazet evit e anv-pluenn «**Evnic Penn-ar-C'hoad**» ? Ganet a oa e Peurid-ar-Roc'h, er gêriadenn Penn-ar-C'hoad. Hag, evel ma oa e soñj ober dreist-holl kanaouennoù, an anv «**Evnic**», 'pezh a dalvez amañ evid lapousig, a zereze dezhañ klok.

Skrivet en deus, e-pad e vuhez, barzhonegoù niverus war donioù kozh hor bro pe war donioù eus Bro Iwerzhon. E 1930 e roas da embann e zastummadenn gentañ «**Eun dornad brug**», enni kanaouennoù poblet, evel «**Son ar jistr**» ha «**Son ar c'hafon**», anavezet gant an holl Vretoned. Daouzek vloaz goude, e teuas er-maez ul levrig all : «**War va zelenno**». Hag an deiz ma oan deut da welet anezhañ da Berwenan evit ar wech kentañ, pemzek vloaz 'zo, e kinnigas din ur C'havier leun a ganaouennoù diambann. Setu penaos e oa ganet e drede levr : «**War hentoù Breizh**».

Daoust dezhañ bezañ oadet, kendalc'het en deus da skrivañ, hag el levrig nevez deut er-maez : «**Kanaouennoù Nevez a Vro-Dreger**» ez eus c'hoazh unnek barzhoneg savet gantañ.

Peseurt barzhonegoù a veze e re ? O, n'eo ket, a dra sur, traoù karget a venozioù don, skrivet en ur yezh diaes da gompren. Nann. **Evnic Penn-ar-C'hoad** e skriva evit ar bobl, en he yezh, ar saut traoù a vez kavet er c'hanaouennoù, da lavaret, evel just, ar garantez, met en ur stumm breizhat, evel da skouer, «**An aval ruz**, **Mintin**, **Melkoni**, **Serr-Notz**». Kanañ a rae ivez kaerder ar bed e Breizh, «**Hed-ha-hed** ar c'hleuzioù mielen, **Ebrel**». Kanañ a rae c'hoazh levnezh an harluet oc'h adkavout e vro : «**Goude an harlu**, **An distro**».

Me soñj din e oa Evnig un den seder hag evurus, hag e felle dezhañ skignañ e levezenn d'an holl dud gant e ganaouennoù. A dra-sur, ez eo bet tizhet ar pal-se gantañ a-drugarez da ganerien ar Beilhadegoù.

Met un dra all c'hoazh a rene e vuhez : ar garantez evit Breizh hag ar fealded d'ar brezhoneg.

Awenet gant menozioù taer an emsaver ma oa, e savas meur a son entanet evit meuliñ e vro **Dihun o Breizh, Sav Breizh, Hardizh paotred ha merc'hed, Kanoù, Bro va C'havell**.

Poan a rae dezhañ pa wela ar brezhoneg dilezet en iliz, dilezet er familhoù ; met spi en doa e teufe an traoù da cheñch. Evurus e oa o klevet an abadennoù radio e brezhoneg. Evurus e oa o wela tud yaouank niverus o kemer hent ar skol vrezhonek.

Labouret hon eus asambles e-pad pemzek vloaz hep na vije bet etrezomp an disterañ diemglev : darempredoù a vignoniez penn-da-benn.

Echu eo ! Aet out kuit, va c'hamalad kozh. Ar maro didec'hus en deus dispartiet ac'hanomp. Met anv *Evnig Penn-ar-C'hoad* a chomo pell c'hoazh e kalonou an dud en deus karet e-pad e vuhez : tud pobl e vro, tud Vreizh.

Itron ar Rouz, ha c'hwi e vugale, en anv holl vignoned *Evnig Penn-ar-C'hoad*, e pedan ac'hanoc'h da zigemer, gant hon doujañs vras evit ho klac'har, va startañ gourc'hemennou a gengañv.

OBIDOU EVNIG PENN-AR-C'HOAD Plougoustant, 21-4-1976

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen,
va mignoned e-kañv,

Ne c'hell den ebet dibab e eur nag e amzer da vervel. Un dra hepken a zo ezhomm : bezañ prest dalc'hmata da respont pa zeuy Doue d'hor gervel, da lavarout eo bezañ e stad vat evit kaout ur setañs vat... Met koulskoude, pa vez d'ober gant un den troet gant ar varzhoniezh, douget da garout bleunioù ha traoù kaer er bed, evel ma oa hor mignon, an Aotrou Eujen AR ROUZ, *EVNIG PENN-AR-C'HOAD*, e vefe diaes dibab bravoc'h ha kaeroc'h koulz eget an nevez-amzer, koulz ar bleunioù-lann ha balan, koulz ar bokedoù munut a bep liv o varellat maazioù ar vro, koulz bleunioù gwenn ar gwez-kereze... Ya ! met daoust da se, un dra dreit ez eo ar marv, rak n'eo ket hep glac'har, na hep poan, e vez graet an disparti, an troc'h etre

ar bed-mañ hag ar bed all... Tristidigezh evit an hini a zo deuet e eur da vont, tristidigezh e vignoned, ha dreist-holl, tristidigezh ha glac'har e diegezh e kañv... Setu perak, daoust ma oa erru an Aotrou Rouz d'an oad vras a 83 bloaz, e komprenomp ervat glac'har e diegezh, hag en ur bediñ evitañ da gentañ, ec'h unanimp en hor pedennoù ar re en deus lezet da ouelañ dezhañ.

Deuet omp eta da gentañ us t'adifiñ, met ivez da glask tennañ ur gentañ bennak diwar ar skouerioù en deus hor mignon, Eujen AR ROUZ, *EVNIG PENN-AR-C'HOAD* lezet ganimp.

Ur ger hepken, d'am soñj, a zo trawalc'h da reiñ da gompren petra e bet e vuhez : FIDEL ! Fidel eo bet ! Fidele d'e Zoue, Fidel d'e vro ! Fidel d'e c'hristur hag a oa «*Doue ha Breizh !*» *«Doue ha Breizh !»*.

N'emañ ket em c'harg komz deziv diwar-benn ar gelennadurezh kristen en devoa bet adalek e vugaleaj. Kristen an bet savet, en kristen en deus bevet, hag en kristen eo bet marvet... N'eo ket en er defe manket e ofisoù dre e faot... Ar sivez diezhañ a dremenas er gêr, stl ar Bleunioù, e felle dezhañ mont d'an oferenñ, daoust ma oa krog ar c'hleved d'an em ziskouez... En em glevout mat a rae gant an Aotrou Meurig, e berson, ar beleg mat hag a oa e interamant amañ dilun diwezhañ, hag alies ez ae d'e gaout da c'houlenn digantañ sklerijenn ha pardon, e Sakramant ar Binijenn, evel ma reomp holl, pa'z omp holl pec'herien.

Fidel eo bet d'e Zoue... Pa oan aet d'e welout da ospital Landreger, e-kreiz ar sizhun dremenet, goude ma oa bet oberataet, e oa en ur werennad-dour, ur bodig beuz benniget ar sul a-raok... Traoù dister, a leverot din marteze... Marteze, lakomp, ha koulskoude, an dra dister, an dra vunut-se, a oa un testerñ, ur merk anat, e oa chomet fidel d'ar ger kentañ eus e c'her-stur : «*Doue !*», «*Feiz !*»...

Plijout a rae dezhañ daremprediñ ar veleien... Daoust ma vo hirik a-walc'h va homilienn, me 'gav din e c'hellan hiziv, degas da soñj eus darn eus ar veleien chomet bev en hor menor hag a selle *Evnig Penn-ar-C'hoad* evel o mignon. An Aotrou Beskond hag a oa kure e Peurid-ar-Roc'h, pa oa Eujenig ar Rouz e-kreiz e yaouankiz, ar beleg-se hag hen sikouras da santout en e greiz ha d'hen lakaat da greskiñ ha da vleuniañ, an nerzh-se hag a vez graet anezhañ gant ar varzhed : an AWEN !

Ha setu dre benaos ec'h en em lakaas da ganañ evel un evnig : *EVNIG PENN-AR-C'HOAD* dre ma oa ganet stok e Penn-ar-C'hoad... ha ne welan ket perak n'eus mui nemet un anv gallek d'ar skol vras Labour-Douar savet eno, war zour Peurid... (2).

Beleien all... An Aotrou Lec'hvien, person Kemper Gwenzenneg, bet lazhet a-enep pep justis, e fin ar brezel diwezhañ.

Hag unan all bet lazhet ivez evel ur c'hi klañv, pa oa o tistreiñ eus lavarout an oferenñ en ur chapelig eus Skrignag : an Aotrou Perrot. Unan eus ar re gentañ o vont da Skrignag goude al laz, e oa *Evnig Penn-ar-C'hoad* hag a oa d'ar mare-se resevour-tailhoù e Gwerliskin. Fidel e oa *Evnig*, ha setu perak, dirak e zaoulagad, en e gandr-ospital edo poltred kaer an Aotrou Perrot, da gaout nerzh-kalon ha fiziñs war e dremenñvan e-unan.

Un den fidel da Zoue e oa Evnig ha n'eo ket en en defe dislavaret ar c'homzoù frealzus hon eus klevet bremañ en Aviel diwar vuzelloù Marta : «*Ya, emez, krediñ a ran ez eo c'hwi ar C'hrist, ar Mesiaz, ar Mab da Zoue, deuet er bed-mañ !*».

Fidel d'e Zoue, Fidel ivez d'e vro, ha da gement a selle ouzh e vro : Istor, Yezh, Sevenadur, madoù-korf evel madoù-ene... pep tra. Breizhad penn-kil-ha-troad.

Set amañ un dra iskis ! Pa varv ur Breizhad mat, e ranker lavarout : hemañ a gare e vro. Just ar pezh emañ oc'h ober bremañ... Ral a wech koulskoude pa varv unan bennak, e n'eus forzh peseurt bro, nemet e vefe un den meur, un den brudet bennak, graet gantañ traoù eus ar c'haerañ evit e vro hag evit e bobl, ne gomzer ket eus e garantez evit e vro.

Marteze neuze, ar Vretoned hag a gar o bro, evel ma rae *Evnig Penn-ar-C'hoad*, a vefe ivez tud veur, tud vras, tud uhel, tud nobl, daoust d'ar pezh a soñj kalz a dud... Met, ya ! Rak bez'ez int tud ar vuhez, ha n'eo ket tud an dismantr hag ar marv... Eno emañ an dalc'h ! A-du gant ar vuhez an hini emañ !

Ken alies e klevet komz eus brezelioù, eus lazhañ pe bezañ lazhet, ma ne reer ket kalz a van ken. Evit aro'hant, e lazher. Evit un tamm enor dismagañset, e lazher. Sevel a reer zoken lezennoù o permetiñ lazhañ bugale a-raok m'o dije amzer da welout liv an deiz, sklerijenn ar bleunioù, da glevout kanaouenn al laboused... Ya ! ha taurel dreist kement-se dindan anv «*AL LEZENN*» mantañ ar VEZH !

Ken kustum omp da glevout komz eus lazhañ ma ne reomp van ebet, kalz ac'hanomp, pa wela, dre lezenn pe hep lezenn, dre verrsperegezh, dre lorc'haj, pe 'evit komz evel ma reer bremañ - en anv al Lezennoù Ekonomikel - lazhañ ur vro : ar vro-se hag a oa an nesañ da galon hor mignon tremenet.

Ken kustum omp da glevout komz eus lazhañ, ma lazher, pe ma lezer lazhañ dre ar Skol, dre ar Radio, dre ar Skinwel, dre zarempredoù a bep seurt, ar pezh a oa gloar hag enor *EVNIG PENN-AR-C'HOAD* ; e Yezh, -Hor Yezh-, e vro -Hor Bro !

Ar re a lazha bugale vihan, p'o deus al Lezenn a-du ganto, ne gav ket dezho e reont netra fall, netra difennet gant o c'houstiañs. Ar re a lazha ur vro, spered ur vro, Yezh ar vro-se, ne gomprenont ket gwelloc'h gourc'hemenn Doue :

Muntrer na vi e nep feson !

Nag hemañ kennebeut hag a zo diazez ar gwir garantez-vro :

*Da dad, da vamm a enori
Evit pell amzer ma vevi.*

Breizh a oa Breizh evit *EVNIG PENN-AR-C'HOAD*. Ur pezh hepken. Ha setu perak en deus bet c'hoant da vezañ lakaet amañ, e Plougoustant, en douar santel, evitañ da gaout bez e familh, e Peurid-ar-Roc'h, e barrez c'hendik. Met Plougoustant a zo Breizh ivez.

Dirak korf divuhez hor mignon, e c'hellomp evelkent trugarekaat an Aotrou Doue da lakaat da dremen drezañ betek enomp an donezon kaer-se a reas da *EVNIG* kanañ e kanaouennoù fur, e kanaouennoù poblek joa ar vuhez, ar bleunioù : brug, lann, balan... ar garantez etre an dud yaouank. Ken akuit e oa, un arzour evit gwir, ma rae traoù eus ar bravañ gant traoùigoù dister, evel ma reas e Bleun-Brug Lanuon, e 1938 gant son ar botoù-koad, kanet ha c'hoarist ken koant gant bugale skol Gwerliskin...

Tud gwelloc'h plaset evidon, e c'hello komz eus al labour en deus graet er BLEUN-BRUG, er C'HORSEZ, e BEILHA-DEGOU-TREGER. Arabat krediñ e vefe seurt labour, un dra er-maez eus tachenn ur c'hristen, pell ac'hano...

Ur muzikar e oa *Evnig Penn-ar-C'hoad*. E-touez ar binvioù hag a zo anavezet bremañ, e Breizh, emañ an DELENN. Evit son brav ha reizh, eo ret toniñ an delenn

evel just. Marteze e vank un dra bennak c'hoazh da delenn hor mignon, evit kanañ ervat, gant karantez pur ha peurbadus : Gloar da Zoue, e barr an Neñvou, e-touez Sent hor Bro-Vreizh. Setu perak, c'hoazh ur wech ez omp deuet da bediñ evitañ, d'hen skoazellañ, d'hen sikour da doniañ ervat e delenn, telenn e ene, da gemer perzh er ganadeg, en delennadeg dudiud-se 'lec'h m'emañ bev ar Varzhoniezh, ar Garantez, al Levenez pur ha peurbadus.

AMEN.
Doue d'e bardonno !

KLERG

Bro va C'havell

DISKAN

*Bro va c'havell, douar santel,
Selaou mouz da vibien feal !
Ni e zougo sonn da vanniel ;
En hon darn e chomo divrall.
Gent an hent hon eus dibabel
Penn-da-benn ni 'zalc'ho dinoc'h
Na pa vefe hir ha kalet
Rak hor bro, sur-mat, a vo trec'h !*

1

*Evit mirout he frankizoù
D'ar vro gaer a ze anvet Breizh
Hon tud kozh, hor yaouankizoù
A stourmas gant kalon ha feiz.
Warnomp ive eo dirollet
An avel fallak a hep tu !
Hag hon herzh 'vo peurgollet
Mar na zwallomp ket diouzhtu !*

2

*Ar Vretoned a zle galfout
Gonid en o bro bara gwenn
Hep mont da redek an darvoud
Hag an naon er c'hiriou estren !
Poent bras eo reñt d'ar brezhoneg
Kement tra 'zo dleet dezhañ,
Ha gwir istor ar Vretoned
Tremen poent hen dichadennañ !*

3

*Ni 'zo skuizh o vezañ gwasket
E pep doare hag e pep lec'h !
Ne fell ket deomp 'vefe savet
En hor Breizh ur gaer a ouelec'h !
Ni a venn bale dishual
Dre vaezioù ken koant hor mamm-vro.
Ni 'yudo, mar bez rat yudal,
Ha, 'taok pell, an nask a dorro !*

Evnig Penn-ar-C'hoad
1986

NOTENNOU DIWAR-BENN EUJEN AR ROUZ

- 1 - An Aotrou Beskond (1875-1965) gwel. Istor al Lennegezh Vreizhonek gant Abeozen, paj. 80.
- 2 - Ecole de Chef-du-Bois. Setu aze hag a zo kaout Resped evit anvioù kaer ar vro !



EMBANNADURIOU AL LIAMM

Oberennoù llok Taagi MALMANCHE

An Antekdil	7,00 lur
An Intellivas Arzhar (Pevor orvest)	19,00 lur
Buher Saleun Lannvet or Fell (Tri orvest)	24,00 lur
Gwreg an Teor — Marvailh an Ene Noanek (daou bazi-c'hoari en un orvest)	12,00 lur
Gurvan or Man'hag Estroñjeur (Tri orvest)	24,00 lur
Ar Bogenn (Tri orvest)	27,00 lur

Oberennoù Roparz HEMON

Alenig en Tri Repe	10,00 lur
Burzhonegoù Ivar Arches Niverennel	24,00 lur
Ha kervel e rie an nos (brezhoneg oet)	30,00 lur
Taagi Kervilic, roman	14,00 lur
Ur Breizhad ec'h oadourved Breizh	30,00 lur
Nann Jann, roman, 230 pajenn	25,00 lur
Mat Vegen, roman	22,00 lur
* * * [war lagad Niverennel]	34,00 lur

J. GUILLE, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp
— C.C.P. 1186 82 Breizh —

14

AR ROMANCHED E BRO-HELVETIA

Bro-Helvetia a zo 22 ganton ouzh hec'h ober hag, emberr 23 pa vezo bet krouet da vat ur c'hanton a-ratozh evit Jurasiz o komz galleg, gant ar c'horn gwalar eus kanton Bern.

Pep kanton en em ren e-unan. Disheñvel eo ar c'hantonioù dre o ment, o boblañs, o yezh, o relijion hag o lezennoù alies. Lod anezho, evel re Zoug ha Jenev, a zo bihan-bihan. An daou vrasañ a zo moarvat kanton Bern ha kanton ar C'hrisoned (7 185 kilometrad karrez ar gorread anezhañ).

Peder yezh a zo komzet e Bro-Suis : an alamaneg, ar galleg, an italianeg hag ar romanched pe rannyezhoù anezho. An alamaneg a zo yezh an tri-c'hard eus ar boblañs, ar galleg a zo komzet gant ur bempvedenn anezhi, 4 % a gomz italianeg hag ar peurrest (nebeutoc'h eget 1 %) ar romanched. En ur vro liesyezhek evel ar Suis lod eus an dud a zo divyezhek pe deiryezhek. Nemet dre an ermaezid ne vez komzet ar romanched nemet e Kanton ar C'hrisoned. War 120 000 annezad er c'hanton e tro 1920, 65 000 anezho a gomze alamaneg, 37 000 romanched ha 18 000 italianeg.

Ar gartenn a embannomp a ziskouez dre vras tachenn pep yezh. War ur gartenn all hon eus diskouezet tri c'hanton ar c'hreisteiz. Er Valez (diskouezet e darn nemetken) e komzer alamaneg en hantenn reterañ hag galleg en hanterenn gornokañ (tost da Vro-C'hall). En Tessin e komzer italianeg. Er C'hrisoned e komzer alamaneg dreist-holl nemet e traoniennoù ar stêr Rhein, er gwalar, hag en Engadina, er gevred hag er reter.

Daoust d'an nebeut a dud a gomz romanched ez eo anavezet evel pedervet yezh ar vro abaoe 1938.

Ar romanched a vez graet rieto-romaneg anezhañ ivez hag ar rannyezh komzet en Engadina : ladineg.

Al lennegezh romanched a zo bet skedus dreist-holl da vare an Disivoud hag er XVIIvet kantved hag en XIXvet kantved. E-touez an dud o deus skrivet pe e romanched pe e ladineg, e komz-plaen pe e gwerzennoù, e c'heller menegiñ *Muot, Huonder, Paliapi, Caderas* ha *Peider Lansel* a gomzer anezhañ er pennad all.

Ar Suis a oa 6 270 000 a dud o vevañ enni e 1970. Gant ur palevarzh eus 'he gorread distruj a-grenn ez eo anezhi unan eus broioù pividikañ ar bed.

Er pajennoù gouestlet da Vro-Helvetia gant ar gelaouenn *«Le Monde»* (26-27 Gwengolo 1971), e c'helled lenn frazennoù evel ar re-mañ : *«Gouezet he deus ar Suis krouiñ war he douar unan eus ar sevenadurioù politikel bras a zo anezho»...* *«Ur gallowd meur e-keñver an arc'hant hag ar moneiz ez eo ivez ar Suis ur vro jineretzel eus ar c'hentañ»...* *«He lod er sevenadurezh a zo bras-meurbet ken e-keñver an arzoù ken e-keñver al lennegezh hag ar skiantoù».*

Kement-se a zo, evel just, dleet da veur a abag nemet ar frankiz lezet gant ar yezhoù hag ar sevenadurioù disheñvel n'eo ket, moarvat, unan eus ar re zisterañ, rak o deus gallet kement pobl a zo enni e bleuniañ ha c'hoari he lod e-lec'h bezañ dismegeñset, goapaet ha mouget evel m'az eo bet er Frañs lod ar pobloù bihan.

UN OALED A SEVENADUREZH : ar skol romanched

Lakaet en arvar abaoe kantvedoù gant gwagnadoù pobloù estren o tont heul-ouzh-heul e talc'h pobl vihan ar Romanched da stourm, hag o stourm a zo ur skouer evit meur a bobl all. Rak, daoust ma seblant dispi an emgann, e tiskouez ar stourmer kement a galon, a vuhez, a feiz hag ur faltazi ken ledan ma chomer baret dirak an disoc'hoù anezhañ.

E penn-kentañ ar Grenn-Amzer a voe germanekaat er bobl gant an Alamaned. Lakaat a rejont ar romanched da gilañ betek bevennoù hiziv ar C'hrisoned. Derc'hel a reas da vont war-dreñv goustadik dindan levezon noblañsoù o tont eus an hanternoz. En XIIIvet kantved, *Valeziz Uhel*, eus traonienn Conches, hag int oc'h ermaeziañ, a zegasas ur rannyezh nevez er *Rheinwald*, e traonienn *Davos* ha, goude, e *Safien*, e *Vals*, e *Klosters* ha betek ar *Voralberg*. An *Disivoud* a greñvas an italianeg e *Bregaglia*. Ar c'henwerzh, diouz e du, a c'hoarias e lod e *Coire* hag e *Thuisis*. En XIXvet kantved e voe tro an *Douristalezh* e kreizennoù 'zo d'erepredet stank gant an estrapian. Selllet e voe neuze, e kornioù 'zo, ouzh ar romanched — ur yezh digomprenus d'an estrapian — evel ouzh un diaester ha, da nebeutañ, un dra didalvoud. Goude ar prantad-se a velas ar romanched o kilañ,

15



ez en em gavas, a-drugarez Doue, tud, stag ouzh o sevenadurezh, o c'hustumoù hag o yezh, evit enebñ. Amzer an dasorc'hidigezh e voe. Eno emeur erru hiziv.

Eur an Dasorc'hidigezh

En ur seurt lusk, ar bugel en em gav e-kreiz ar stourm. Bez'ez eo anezhañ an dachenn wellañ evit hadañ. Pa voe bet kaset kuit ar romanheg eus skolioù 'zo e kreiz ar C'hrisoned hag en Engadina-Uhel, e voe merzet e vefe kollet ar c'hornioù-se evit ar sevenadurezh latin. D'ar mare m'edo krog ar varzhed da zisplegañ pezh a oa e don kalon ur bobl a-bezh : «Ni Talians, ni Tudaische, Rumantschs vulains restar» e teuas da vezañ anatoc'h-anatañ talvoudegezh pezh edod o vont da zilezel. Oberiañ a voe divizet ober.

Ret e oa bet, dija, stourm ouzh menozioù «irredentist» Italia Vussolini a sulle ouzh ar romanheg evel ouzh ur rannyezh eus al lombardeg. Ar ouiziegezh, avat, he doa trec'het. Ur skoazell dic'hortoz a zeuas eus Kobenhavn p'en em gavas e kêr-Jenev an doktor G. Gangale -hag en gant e kreisteiz Italia-, gant ar c'helenner Lebeskind ha, goude, e kêr-Sent, gant ar c'hoziad kaer ma oa e 1943 Peider Lansel. P'edo ouzh en erbediñ d'al «Lia Rumantscha», daoust hag en doa bet ar barzh ur soñj bennak eus ar skoazell edo o vont da zegas ? Edo o studiañ oberoù Stephane Gabriel, an hini en doa krouet er XVII^{vet} kantved romanheg skrivet ar Rhein. Yac'haat ar yezh en Domiesch, en Heizenberg, er Schons, anezho ar c'hornadoù ar muiañ en arvar gant ar germanekaat ; sed a venned ober. Kaset d'ober un enklask eno ez eas Gangale eus ur gêriadenn d'eben. Studiañ a reas an holl zoareoù da gomz ha, war un dro, ez unvanee an doareoù da skrivañ. Goude, evel m'en doa graet en Danmark, evit Inizi Far-Oêr, e kinnigas sevel skolioù evit ar vugale vihan, etre 2 ha 7 vloaz, an oad gwellañ da romanhekaat ur boblad en he fezh a zo enni muoc'h-mui a dud estren.

Digoret e voe ar skolioù kentañ e 1944 e Donesch, e Scharans, e Almens, e Schons hag e Andeer. Berzh a rejont. Plijet e vije bet Gangale oc'h ober gant doare-kelenn Montessori ha gwelout ar vugale o tegemer, gwech ha gwech all, o zud e doare ma c'hellje ar re-mañ -hag int mesket gant ar vugale- kas kuit eus o spered o falz-venozioù diwar-benn o yezh. N'hellse ket, avat, dre ziouer arc'hant hag e

voe ret dezhañ ober gant doare-kelenn Froebel. A-walc'h a lidzhoarezed-bugale eus ar vro a gavas evit seveniñ al labour-se a c'houlenn kemend-all a emroüster. Evel-se e voe digoret skolioùigoù (scoletas) kerent ha 1945 e Zillis, e Tomilis, e Papelo, e Präz, e Innerferrera, e Rodel, goude e Cazis, e Rothenbrunnen, e Unterealta, e 1946 hag e Sarn e 1947. Pouezañ a ra ar c'helenner dre-holl evit ma rafe ar vestrez yaouank gant yezh ar vro ; ma'z eo dizek warni e rank he deskiñ.

An ober-se, boulc'het dres goude ar brezel, a c'hounezas tachenn. Maria Calonder, hag hi mestrez-skol babiged e-pad 11 vloaz e Zerner, a savas kerent ha 1946, skolioù evit deskiñ al liorzhoarezed-bugale e Bravuogn, e Flins, e Ilanz. Graet e vez, ingal, tro ar skolioù evit gwelout penaos ez eont en-dro. Kenlabourezed a dalvoudegezh a c'hounez e kêr-Jenev o zesteni a ro dezho an aotre da gelenn ar yaouankiz-flamm. Anna-Lina Felix, un Engadinadez anezhi, deuet a-benn da zeskñ buan ar surselveg hag ar surselveg a droas er yezh-mañ diwezhañ levr J.C. Arquent, hag en dreist da zeskñ ar romanheg.

Nerzhioù all o c'hoari

Ar strivoù-se, avat, ne voent ket trec'h dre-holl. Nerzhioù all a zo o c'hoari. E 1949, ar bloaz ma kimiadas an doktor Gangale, e voe serret «scoletas» Rothenbrunnen, Unterrealta ha Cazis. E 1965, e voe tro hini Scharans hag e 1967 hini Rodels. Er c'hêriadennoù-mañ e verk an degouezh-se ez eo echu gant ar romanheg. Pobladoù beuzet gant an estrenien, dispignoù re vras, an diaes m'eo kavout mestrezed, kementse a zispleg an dilez. A-drugarez Doue, e lec'hioù all eo bet frouzhus al labour. Salvete eo bet ar romanheg e kalz a diegezhioù hag e kalz a gêriadennoù gant ar «scoletas». Ne baouez m'orse ar stourm, avat. E Präz, en Heizenberg-Uhel, ur c'horn-bro ken glas, n'eo nemet gant mil boan a talc'h ar skollig da vont en-dro. E-keñver 131 annezad a zo ar germaneg o yezh ne gontar nemet 74 romanheger. Dre eurvad ez eus eno ur vestrez kalonek a zeu a-benn, abaoe 20 vloaz 'zo, da zeskñ yezh kaer an draonienn d'ar vugale na gomzont nemet almaneg er gêr. Evit-se ret eo kaout donezonoù ur gwir gelenn, kaout faitañ, gouzout tresañ ha seniñ. Rak n'eo ket gerioù eo e tesk ar bugel bihan met ar galloud da zisplegañ ar pezh a zo en e benn en ur yezh a bak en he fezh, ha ganti ar peadra sevenadurel pивidik a vez graet

anezhañ kanaouennoù, kontadennoù, mojennoù, kustumoù, buhez ar gêriadenn hag ar vro. Kement-se holl avat, a zo degaset d'ar vugale kemmet, treuzneuziet gant faltazi krouer, ur bam l ar v-«mussadra», mestrez ar «scoleta». En ur c'hoari holl a-gevret, hag en ur frankiz laouen e tesk ar vugale romanchegeañ ha kenvefañ gant an douar a zeu da vezañ muioc'h-mui o hini, ha gantañ e holl amzer-dremenet hag e zoareoù gwirañ.

Ur plac'h a feiz o lakaat berv er «c'hoari».

Evit ren seurt skolioù e ranker kaout ur garantez virvidik ouzh ar romanchege hag, ouzhpenn, bezañ desket ar vicher penn-dabenn dre ar c'helenn hag an ober. Anjelina Secchi, ensellerez kerkent ha 1965, o laka gant feiz da vont en-dro. Digoret e vez ar c'helenn-se gant ur rummad kentelioù a bad 15 sizhunvezh : speredegezh, kelennezh, lennegezh, sonerezh, treserezh, labourioù-dorn hag all... Lakaet e vez neuze an danvez-mestrez en ur skol evit peuzeskriñ ar vicher dindan evezh an ensellerez. An hevelep patrom -kelenn hag ober- a vez dalc'het gantañ e-pad tri bloavezh. Arnoddennoù a gloc' ar studioù-se.

Arc'hant a zo ret kaout da zerc'hel ar skolioù en o sav. Dastumet hag ingalet eo gant al «Lia Rumantscha» a zo harpet gant skoddennoù ar gouarnamant-kreiz hag ar c'hantonioù hag ensavadurioù prevez 'zo hini Anton Cadonau dreist-holl - a-gevret gant re kêrioù Coire ha Zurich. Hetomp e kompreno Helvetiz e rank ar gouarnamant kreskiñ e skoddennoù rak e teu an dispignoù da vezañ brasoc'h-brasañ. Ur seurt ober, a zo e bal gwirizennañ don ur bobl en douar m'emañ warnañ o chom, a hañval deomp bezañ eus ar pouezusañ e lusk bremañ ar bed.

Gabriel MUTZENBERG
Lakaet e brazhoneg gant Loeiz Andour

a-zivour ur pennad embannet 2 pe 3 bloaz 'zo gant ar gelaouenn swisat «CONSTRUIRE». Ur gelaouenn sizhunik eo a vez moulet ouzhpenn 200 mil skouerenn anezhi bep gwech, ha roet evit ur bennozh Doue d'he fratikoù gant ar gompagnunezh-kenwerzh anavezat mat en Helvetia «MIGROS». Ouzhpenn 30 vloaz 'zo eo embannet. Kavet a vo, war ar Romanched, ur pennad dudius all, war «Le Peuple Breton», e galleg, ar wech-mañ, war niverenn 149. Ebrel 1976.

18

BUHEZ Santez GWENNREWI

Troet diwar Vita Sante Wenefrede
embannet gant A.W. Wade-Evans e
Vita Sanctorum Britanniae

Evel ma ouzer ez eus bet dastumet hag embannet un toullad «BUHEZ Santez HA SENTEZED» eus ar Broioù Keltiek. Kalz anezho, evel an hini emaoamp oc'h klevañ hiziv a zo dreist-holl marvailhañ ha mojennoù diaes didoueziañ enno. Evit gwir diouzh ar pezh a zo ijnadennoù, yegen kent komz eus didoueziañ eo dav evit kement embann an dielloù, d'an dud outadik da vurutellat an testennoù, d'o c'heñveriañ gant testennoù all evit esae donet a-benn da zamwelout ar wirionez. Un dra bennak evel m'en devoa ar Chaloni DOBL gant e labourioù war SENT KERNEV-VEUR (THE SAINTS OF CORNWALL, bet adambannet er bloavezh 1960, 1961, ha 1964). Ne embanne ar chaloni nemet frouezh e enklaskoù hag e labourioù war an testennoù kozh, evel just, hag e enklaskoù war an devozion d'ar Sent-se er broioù keltiek all : Breizh, Iwerzhon, ha Bro-Gembre.

Amañ, e Breizh, goude labourioù dom GOUGAUD, DUINE, LARGILLIERE, KOUFON, evit reiñ un nebeut anvioù hepken, e chom traoù da zastum bepred. Lakomp diwar-benn Sant Tual hag e ziskibien. Dav e vefe tolpañ an holl destenioù da gentañ. Ur greizenn-labour a vefe ezhomm, na petra 'ta, rak un den e-unan-penn ne c'hell ket ober kalz a dra.

Kement ha reiñ ur skouer eus ar pezh a fell deomp lavarout e troomp diwar al levr hag a vez graet anezhañ VITAE SANCTORUM BRITANNIAE ET GENEALOGIAE marvailh Santez Gwennvrewi. Ur feunteun eus ar brudetañ a zo dindan anv ar Santez, en Hanternoz Kembre, dour burzhudus o strinkañ anezhi, e TREFFYNNON (Holywell Trefeunteun). Dav e oa santelaat ar feunteun-se ha dre-se evit abeg pe abeg ez eo lakaet dindan warez hag anv ar santez ez eomp da gontañ ar vuhez anezhi.

Diwar al latin ez eo bet graet al labour-mañ, met o vezañ ma'z eus un droidigezh e saozneg keñver-ha-keñver gant al latin e c'helle homañ talvezout deomp da c'haridoù ! N'omp ket deuet a-benn da gaout bep tro ur gwir stumm brezhonek d'an anvioù. E dibenn hon troidigezh, e vo kavet lod eus «Buhez Sant Bweno» da glokaat an traoù.

AMAN E KROG BUHEZ SANTEZ GWENNREWI, GWERC'HEZ HA MERZHEREZ.

Mar deo un dra vat kuzhat sekred ar roue, e vefe pec'hed chom hep diskleriañ oberoù-kaer an Aotrou Doue. Dre-se, kement hon eus klevet, dre ic'hras Doue, diwar lavar hon tadoù-kozh, diwar-benn Santez GWENNREWI, e fell deomp hen embann, pa'z eo un dra dereat, evit meulifi Doue e-unan hag evit brudañ meritoù e werc'hez.

1. En deizioù-se eta, m'edo Kadvan o ren war rannvroioù Gwenez (Gwynedd), e oa ur brezelour kalonek hag a oa perc'henn war dri domani : Tevez (Tevyth) a veze graet anezhañ, ha mab e oa da Eiluz. O chom edo e Tegeingl. An hini kentañ eus e zomanoù a veze graet AVELWIG (Avellyc) anezhañ, an eil MEINGWENN (Maynguen) hag an trede GWENNFEUNTEUN (Guenphennaun).
2. An Tevez-se n'en devoa ket bet a vugale nemet ur verc'h hepken anvet GWENNREWI. Homañ adalek hec'h oad tenerañ a roas he c'harantez d'he fried eus an neñv ; fæ a reas war dud varvel evit gouestlañ he gwerc'hted dezhañ hepmiken. Pa glevas he zad kement-se, e savas nec'hamant ha tristidigezh ennañ diouzh un tu, met diouzh an tu all e oa stad ennañ. Trist e oa dre n'en devoa ket a vugale en tu-hont dezhi, hag ar pezh a gave an diaesañ eo ne felle dezhi dimeziñ da zen ebet evit mirout peadra an tiegezh a-benn an amzer-da-zont. A-hend-all avat, e oa laouen o welout e verc'h o'n em ouestlañ da Zoue ; hag e tivizas neuze e-unan dre garantez evit Doue reiñ kelennadurezh d'e verc'h war ar skiantoù uhal.
3. P'edo e spered gant se, e tichafasas d'an den santel Bennon diskenn en e di, rak dizorniet e oa bet hemañ eus e beadra, o vezañ ma oa re niverus bugale Selev (e dad). Ar brezelour-meur o welout e oa Bennon un den desket ha leun a feiz, a c'houlennas kuzul digantañ diwar-benn e verc'h en ur ziskleriañ dezhañ peseurt

gouestl he devoa graet. Goude bezañ pouezet ha dibouezet diskleriadurioù ar brezelour, e lavaras Bennon dezhañ : «Mar fell dit, abalamour da Zoue, fiziout ennon da zomani, e chomin amañ ganit, hag e kelennin lezenn Doue d'ar verc'h ac'h eus ganet».

— Aotrou, eme Devez, mar befe kement-se em galloud, n'eus den a gement hen graet gant muioc'h a c'hred egedon. Met bremañ, o servijer Doue, mar ne gavez ket diaes gortoz re bell, e kafen az kwelout o chom amañ, ken n'am bo resevet respont ar Roue war-se.

— Va mab karet, eme Vennon, kae war-raok, war-lerc'h Doue, dit da gaout da vennad».

5. Tevez neuze a guitaas e di e-unan evit mont betek palez ar Roue, hag a c'houlennas start digantañ ma'z aotrefe dezhañ ober ar pezh en devoa divizet ober gant e vadoù.

— O den enorus, eme hemañ, n'eo ket din-me, na dit-te, divizout war se. Koulskoude, arabat tennañ douar diwar goust ar rannvro, mar befe kement-se hep gonid ebet eviti, nag evit va ezhommoù-me Eus an tri domani-se ec'h aotrefan dit an hini a zibabi evit servijer Doue, mar karez, gant ma lezi ar peurrest ganin-me».

6. Goude bezañ klevet ar respont dispar-se gant ar Roue, e tistroas d'ar gêr hag e tisklerias da Vennon kement an devoa klevet gant ar Roue ; «Neuze 'ta, emezhañ, mar c'hoantaez chom ganin evit servijañ an Aotrou Doue, dibab e-touez va leve al lec'h a gavi ar gwellañ».

— E gouelec'h Avelwig, eme Vennon venniget, eo e fell din ober va annez. Hag evel-se e voe graet.

7. Ha Bennon, dindan baeroniezh Tevez, a ziazezas e gabanell, en draoñenn a veze graet Sec'hnan anezhi e yezh ar Vrezhonec, hag a savas ivez eno un iliz vihan lec'h ma lavare an oferenn ha ma tiepleg bemdreiz da Wennevri ur bajenn eus ar Skritur-Sakr. Mont a rae ivez Tevez ha tud e goskor bemdreiz d'an oferenn d'al lec'h ma oa boaz Bennon da ofisañ.

8. D'ar c'houlz-se, un devezh-sul, e oa aet Tevez gant e wreg d'an oferenn, ha chomet e oa Gwennvrewi war-lerc'h, e ti he zad, evit (pourchas) ha kas gant i ar pad ar c'heñ-se, Mab Alog, Karadog, un den a ouenn roueel, bet o chasael hag aet skuzh, a dostaas d'an ti da c'houlenn un dra bennak da evañ, rak sec'hed en devoa. P'en em gavas en ti e c'houlennas piv a oa

19

ar perc'henn rak, emezañ, em eus ur sekred da ziskuilh dezhañ.

9. Ar plac'h yaouank hag a oa hec'h-unan-penn en ti a zeredas mall warni da zegemer an hini a oa o klask war-lerc'h he zad, ha gant ur salud seven e respontas :
— *Aet eo va zad d'an oferenn da glevout Bennon o prezeg.*

Ur sell a reas Karadog ouzh ar plac'h yaouank gwenn ha livrin he liv, hag e chomas bamet ouzh he gwelout stummet-kaer penn-da-benn korf ha dremm. Kement ha ken bihan ma santas e galon en e greiz entanet da vat gant ar c'hoant anezhi, ha peogwir en devoa he c'havet hec'h-unan-penn er gêr, hag hep test ebet, ec'h ankouas e sec'hed dre nerzh e garantez, hag e lavaras dezhi :

— *O plac'h yaouank karet, asant d'am c'hoantou en ur ober ar pezh a ra an amourouzien, rak da c'hoantaat a ran gant va holl nerzh.*

10. — *Va Aotrou, emezi, petra eo ar c'homzoù-se a-berzh un den a renk uhel eveldout, pa fell dit ober ken vil d'az servijerez ?* «Aotrou, emezi c'hoazh, ne c'hellan ket ober ar seurt tra-se, rak prometet ez on d'unan all hag a zleean eurediñ en deizioù-mañ».

O klevout kement-se e savas fulor e Karadog : «*Lez a-gostez, emezañ, an traoù sot ha diskiant ha dibenn-se, hag asant en em unaniñ ganin. Dimez ganin ha me az kemero da bried.*

11. Ar plac'h yaouank, pa welas e oa troet ar paotr da glask jeu outi, a c'hoarias dre finesa evit na vije ket trec'het dre nerzh, gant ar paotr : «*Permet din neuze, emezi, mont d'am c'hamb-ermwiskañ ma vin en ur stad dereatoc'h evit en em reiñ dit. Lezel a rin a-gostez al labour a zo bet roet din da ober hag en em roin d'az youl.*

— *Mar ne chomez ket re bell, eme Garadog dezhi, ne gavin ket re start da c'hortoz ur pennadig.*

Goude bezañ bet e aotre, ez eas ar plac'h yaouank buan-tre a-dreuz he c'hamb ermit mont d'an draoñienn gant ar c'hoant da bellaat ken prim ha ma c'helle diouzh sellou ar paotr yaouank.

12. Karadog neuze o welout e oa bet touellet dre finesa ar plac'h yaouank, a savas droug ennañ spontus ; hag en da vroudañ e varc'h gant e gentrou evit hec'h adtapout. Un tamm lafis he devoa-hi warnañ, hag en em gavet e oa e toull-dor ar manati o klask gwarez ar peoc'h digant Doue ha digant Bennon. Met pa fellas dezhi lakaat he zroad dreist an trezoù ar paotr

he diarbennas gant e gleze hag a droc'has he fenn dezhi.

13. He zud o welout ar pezh a dremene a chomas ur pennadig er-maez anezho o-unan, ha pa zeujont enno e-unan en em lakjont da ouelañ gant ar glac'har. Bennon ivez o welout an torfed a voe seizet gant an dristidigezh vrasañ, hag o kuitaat an aoter ez eas buan da doull an nor gant ar c'hoant da c'houzout piv en devoa graet ar seurt drouklazh. Pa savas e zaoulagad e welas Karadog leun a wad, gant ar c'houlz-beun a wad, en e zorn gantañ atav ; he c'houlz em rentas kont e oa bet graet anezhi gant Karadog e taolas e valloù warnañ diouzhtu. Ha dirak e zaoulagad e veuzas egile evel koar dirak an tan.

14. Distreiñ a reas Bennon da gontañ marv ar plac'h yaouank ; hag ar paotr bet kouezhet en diabarzh a dapas an den adlakaat en e blas ouzh ar c'horf. Evezet er-maez, en ur bediñ Doue a-raok da advevaat ar c'horf, evit na gemer ket an enebour joa diwar gement-se. He c'horf kent hag e bedenn, setu ar c'horf oc'h adkrouet e nerzh hag o tegemer e ene en-dro : ur greizhenn dister ne weled ken war c'houk ar c'hil. An douar mastaret gant gwad ar plac'h yaouank a strakas hag eno e strinkas ur vammenn-dour fonnu evel ur froud ; ar vein anezhi betek an deiz a hiziv evel en deiz kentañ, a seblant bezañ ruz gant ar gwad. Ar c'hinvi zoken a daol c'hwez-vat evel ezañs hag a wella meur a gleaved.

15. Bennon eta o welout en devoa Doue graet ar burzhud-se abalamour dezhi, a lavaras dezhi, dirak he zud a oa eno o selaou :

— *Va c'hoar, al lec'h-mañ a zo bet merket dit gant Doue, ret eo din-me monet da lec'h all, d'al lec'h ma plijo gant Doue pourchas lojeiz din. Din-me avat, bep bloaz, war-dro ar c'houlz-mañ e ri kement-mañ : degas din ur vantell bet graet ganit-te da-unan.*

— *Va Aotrou, emezi, ober kement-se evdout, ne vo ket un dra diaes d'am c'halon ; n'eus nemet un dra a gement a gavan diaes da vat : penaos e vo tu d'he c'has dit, pa ne ouzon ket e pelec'h e vi o chom.*

— *Arabat bezañ nec'het an disterañ gant-se, eme ar Sant dezhi l E-kreiz ar wazh a zeu eus ar feunteun ez eus ur garreg, hag e oan boaz da ezezañ warni da brederiñ ha da bediñ. Warni, d'ar c'houlz merket e laki ar vantell ha ma teu betek ennon, ra zeuio Iu.*

Hag evel-se, goude bezañ roet o

bennozh an eil d'egile, ec'h en em zispartijont.

16. Kalz a amzer a dremenas Gwennvrevi venniget en dezerzh-se e-pad he buhez, hervez ar c'huzul bet roet dezhi gant Bennon. Bep bloaz, d'erc'hent Gouel-Yann, e kase ar vantell da Vennon evel-hen. He lakaat a ra war ar garreg, hag homañ o ruzañ da heul dourioù ar feunteun he douge betek ar mor, hep na vije glebiet nag e-ziabarzh nag a-ziavaez, ha neuze ez ae eus vor betek porzh Sac'henn betek Bennon. Hag evel-se bep bloaz e reseve Bennon prof ar werc'hez.

17. Ur vertuz bras-meurbet a oa stag ouzh ar vantell-se en abeg da zelliadoù ar werc'hez : n'eus forzh e pelec'h e veze Bennon gant ar vantell warnañ, na veze ket glebiet, hag ar blev anezhi ne fiñvent ket gant an avel. En abeg d'an darvoud-se e oa ar c'hasanvet Bennon «*paotr e vantell*».

18. En amzer-se, war a gonter, ez eas da venna da welout lec'hioù an Ebestel Santel, gant eno dirak ar relegoù santel ec'h en em ebestilas a-grenn, gant doujañs, da Zoue. Ur wech echu e berc'herinded, e tistroas adarre d'e zezzerzh.

19. En deizioù-se, e oa bodet ar Sent eus Breizh a-bezh, e Sened Gwennvrevi (Wenefredi), hag ez eas Gwennvrevi venniget di gant ar sent all. Eno e voe savet reolennoù gant ar Sened, ha setu ar pezh a oa bet divizet : ar sent hag a veze o vevañ diaroak disparti diouzh ar re all, en o fart o-unan, hep kaout reolenn ebet nemet o bolontez vat, a rankje en em vodañ da vevañ a-gevret e lec'hioù diouzh se, ha reizhañ o buhezegezh dindan brioloed lakaet da ren warno. Evel-se e tegouezhas gant Santez Gwennvrevi bezañ dibabet da ren war unnek gwerc'hez ma c'helljont kemer skouer diwar he buhez hag he doare-bevañ santel.

20. Ken bras e oa gouiziegezh hag helavardet ar werc'hez-se ma n'emañ ket en hor galloud hen displegañ. Dousoch eget ar mel e oa he frezegenoù hag he c'homzoù, ha gnanoc'h eget al laezh, war a gawe d'ar re a veze ouzh he selaou.

Setu perak e voe anvet gant an holl Gwennvrevi Wenn, dre ma oa glanded ar furnez gant he c'homzoù ha ma talc'he divrall d'he reolenn a vuhez.

Gwezherin (1) a vez graet eus al lec'h ma vevas e kompagnunezh ar Gwerc'hez ; eno goude ma oa echu he buhez e voe sebeliet a-unan gant he c'hoarezed leanezad d'ar 4 a viz Gouere. Bremañ emañ

o repoziñ gant an Aotrou Krist, an hini a zo dezhañ klod hag enor da virviken. AMEN.

Mañ ec'h eno buhez Santez Gwennvrevi, Gwerc'hez ha Merzherez.

NOTENNOU DIWAR-BENN GWENNREVİ

- 1 - Gwezherin (Gwytherin) diwar al latin *Victorinus*. Diaes gouzout dre sur e pelec'h emañ. Morteze e korn-bro Avallon e Bro-Saoz.

- 11 - Da glokaat un tamm istor Santez Wenefredi e troomp emañ lod eus *BUHEZ SANT BEUNO (Hystoria o UUCHED BEUNO)*. id. paj. 18-19.

- 12 - Un devezh bennak ez eas TEMIC (= Tevez) hag e wreg d'an iliz da selaou oferenn ha prezegenn digant Beuno ha lezel ar gêr e-vech da zivall (an traoù). Kerañ plac'h yaouank ar bed e oa homañ, ha ne oe ket dimezet c'hoazh. Hag evel ma oa hec'h-unan-penn o tiwall an ti, setu ma welas ar Roue, an hini a oa d'ar c'houlz-se ar vro, o tonet-tre en he betek ; Karadog a oa e anv. Petra a reas-hi : sevel d'hen degemer ha diskouez joa outañ. Ar Roue neuze a c'houlennas digant da belec'h e oa aet he zad : «*Aet eo d'an iliz, emezi. Met n'oc'h eus un aotr bennak d'ober gantañ, gortoz anezhañ, rak erru eo bremaik.*

— *Ne c'hortozin ket, emezañ, nemet e teufes da vevañ va serc'h din-me.*

Respont a reas ar plac'h yaouank :

— *Ne zere ket ouzhin bezañ serc'h dit-te, rak roue ez out, ha diwar rouantez ha ma n'eo ket uhel a-walc'h va gwad evit ma terefe ouzhit bezañ da serc'h. Met, emezi, gortoz emañ, (me 'zo vant) d'am c'hamb ha pa zeuñ en-dro e ri ar pezh a garis.* Ha war zigarez mont d'he c'hamb, petra reas ? Te-c'hel kuit ha redek etrekek an iliz lec'h ma oa aet he zad hag he mamm. Ar Roue he gwelas o tec'hel, hag en war he lerc'h. Pa oa hi o tapout krog e dor an iliz, ec'h en em gavas en gant ha gant e gleze e tarc'has un taol gant war he fenn ken na gouezhas ar penn an iliz, tra ma kouezhe ar c'horf er-maez. Beuno, he zad hag he mamm, a welas kement-se, ha Beuno o lavarout neuze d'ar Roue en ur sellout outañ e-kreiz e las : «*Me a c'houlenn digant Doue, emezañ, n'az es perno ket ha n'az toujo ket m'oc'h eget n'oc'h eus-te bet doujañs evit ar plac'h warnañ.* Ha war an taol e teuzas ar Roue hag e teuas da vevañ ur poullad dour, ha ne voe mui gwelet roud ebet anezhañ er bed-mañ.

- 13 - Neuze e tapas Beuno penn ar plac'h yaouank hag han lakas ouzh ar c'horf, ha teurel e vantell e-unan dreist ar c'horf, ha lavarout d'he zad ha d'he mamm a oa stouet o us d'ar penn o c'horf ar dezi.

nadig (emezañ) ha lezit-hi evel m'emañ ken na vo echu an oferenñ. Ha Beuno a aberzhas da Zoue. Pa voe echu an oferenñ, ar plac'h yaouank a savas holl-yac'h hag a se-c'has ar c'hwez diwar he dremm, ha Doue ha Beuno he mentas holl-yac'h. El lec'h ma oa kouezhet ar gwad, e savas ur feunteun ac'ha-no, hag ar feunteun-se betek hiziv, a ro ar yac'hed d'an dud ha d'al loened ha d'o c'hleavedoù ha d'o goulioù. Hag ar feunteun-se a voe anvet diouzh anv ar plac'h yaouank hag anvet e voe *Feunteun Wennvrewi*. Ha kalz eus ar re a welas kement-se a gredas er C'hrist. Hag unan eus ar re a gredas ena e voe Kadvan, roue Gwenez. Hag hennezh a roas da Veuno kalz a dir hag a zouar.

NOTENNOU

- Evel ma weler, hervez an arroudad-mañ, n'eo ket BENNON eo a zo da lenn a-us met BEUNO e gwirionez.
- An eil lodenn eus Pasion Santez Gwennvrewi a ganter enni ar burzhudoù graet ganti. Re hir e vefe o lakaat amañ, ha neuze kalz anezho a zo heñvel ouz ar burzhudoù dreist-ordinal lakaet gant an hagiografourien war gont ar sent a zanevellant o buhez. Graet e vo eta un dibab warno.
- Klask a raimp ivez moulañ lod pe lod da vihanañ eus Buhez ar sent all, evel Iltud, Padern, Dewi, Sant Kadog...

Klerg

LEVRIOU

LEOPOLD KOHR, «*Une Bretagne libre est-elle viable ?*». «*Cahiers de l'Avenir de la Bretagne*» N° 1. Ed Nature et Bretagne, 132 paj, 25,00 l.

Warlene e oa kouezhet «*L'AVENIR DE LA BRETAGNE*», evit meur a abeg moarvat : arc'hant marteze, met an hent politikal nevez kemeret ganti. Na blije ket d'an holl lennerien. Ar rener avat, Yann Fouere, en deus kavet un diskoulm : e-lec'h embann da vareadoù reñsis ur gelaouenn, en deus krouet ur bennev-brudañ dindan stumm «*KAIEROU*» a vo embannet gwech ha gwech all. Ha marteze n'eo ket bet ken fell-zivizet-se, en em gemerout en doare-se, da vihanañ diouzh ar «*C'haliere*» kentañ deuet er-maez.

22

Amañ e kaver un droidigezh diwar ul labour savet gant ur c'helenner eus Skol-Veur Puerto-Rico, genidik eus Aostria «*Hag-erñ e c'hell Bro-Gembre mestrez en he zi bevañ ?*». Graet eo bet an droidigezh hag an «*treuzlec'hiadura*» gant ur mestr war ar vicher, an Ao. Per BOURDELLEZ. En un doare souezhus, ur bam l'eo bet kaset al labour da vat : 132 pajenn war un dachenn-studi hag a c'hellfe bezañ ponner hag a lenner evel ur roman, ur roman avat, n'eo ket.

Ne din ket da reiñ da vezañ ar rannoù, an arguzennoù a vez savet perak e vefe gwelloc'h an traoù en un doare all, dieub, mestrez war hec'h amzer, kement a zo gwir evit Bro-Gembre. Ar gwir all evit Breizh. An oberenn a vez en he fezh, a zeu da vezañ ur holl-veur-mall a-enep d'ar «*ramzelezh*» : ar mestr an politikerezh koulz ha war ar c'henn an ekonomiezh ez eo ar ramzelezh. Doug a laka tud dianaouedek pe zik-vevez eus kudennoù-diorren ur vro da vezañ mestr. Kaeroc'h 'zo. Daoust hag-erñ eo ret, daoust hag hemañ eo ar pal da dizhout : dioren muioc'h-mui ur vro, en un doare dall ? Bez'ez eus marteze ur muzul «*optima*» a vefe fall mont dreist dezhañ, hag e vefe dav a-wechoù dont en-dro dezhañ evit mad ar vro. Gwell eget nep hini all e sant hag e oar tud ar vro penaos kavout ha pourchas ar mad-se.

Evit lakaat e dezenn da dalvezout, ar skrivagner -hag an troer, war-bouez treuzlec'hiañ ar sifroù hag ar plegennoù evel just- a laka dirak daoulagad al lenner broioù all, broioù bihan, mestr er gêr : Danmark, Suis, Holland, h.a. Met an donezon en deus da gaout skeudennoù o reiñ da gompren aes ar pezh a fell dezhañ lavarout : Breizh a zo ken brav ha Bro-Suis pe Danmark, peadra da zedennañ touristed. Pinvidigezhioù-natur : ar magañ-loened, frouezh-prim an douar, frouezh-mor. Dreist-holl pinvidigezhioù an den, pinvidigezhioù ar spered ; hag emañ ar pinvidigezhioù-mañ o vont kuit eus ar vro evit mont da greskiñ peadra broioù all. An doare nemetañ da zigoll ha da zic'haouiñ : lakaat er Vro ar Veli hag an Dibab.

Re vihan eo Breizh ? Mèt re vihan eo ivez Bro-C'hall evit sevel ar gourc'harr-nij KONKORD. Evit petra ez eo graet ar c'henwerzh etre ar broioù, mar ne deo ket evit lakaat da dalvezout labour ar re vras hag ar re vihan ? N'eo ket dav evit se d'an holl vroioù bezañ liammet en ur stad nemetken. Hag ar frazenn c'hwec'h-mañ :

«*N'emañ ket Bro-Suis e stad-vat dre m'emañ enni ar bankoù ; met enni emañ ar bankoù dre m'emañ Bro-Suis e stad-vat*» (paj. 42). Ar frazenn-mañ ivez diwar-benn bevennoù ar c'hreskiñ, n'eo ket fall kennebeut : «*Mar befe fiziet un dant en ijinoerien pe en armerzhourien, ne hanfent ket d'e lakaat da greskiñ ; hag ar re o devefe an dent hirañ a vefe leun a fouge evit ma'z eo leun a fouge ar Stadoù o deus ar brasañ armeadoù hag ar c'hreñvañ bombez atomek. An Natur, avat, er kontrol, a zo damantus d'an neuzioù hag evit war ar c'hreskiñ : atav e wel un tuden bennak d'an traoù. Setu perak e vefe breka tamm-ha-tamm o c'hreskiñ dre ma'z estoanta d'an dareviñ, hag e paouez bevennoù*» (89).

Diwar-benn an doare-gouarn komunist «*En U.R.S.S. e laka ar gouarnamant da vezañ e fedusted da greskiñ dre lezel ar c'hreskiñ war un dachenn strizhik gant an abegerezhioù prevez, en doare ma c'hellfe-se treiñ e holl nerzh war dachennoù ar c'hreskiñ-tre*» (78). Perak kreizennañ pep tra ? «*Ur vombezenn atomek o kouezhañ war Bariz a sonfe ar glaz evit Breizh, Normandia, h.a., hep na vefe lazhet ur vroc'h e peurlvanoù Kernev, dre ma vefe seizet ar c'has-degas marc'hadourezh adalek ar greizenn nemet*» (95).

Ezhomm he deus Bro-C'hall eus Breizh, da nebeutañ kement ha m'he deus ezhomm Breizh eus Bro-C'hall : «*Mar he deus Rusia aloubet Tchekoslovakia da herzel outi da zibab hec'h hent dezhi hec'h-unan, ez eo dre ma ouie he devoa ezhomm eus Tchekoslovakia. Homañ a gave dezhi, gant gwir abeg, e vefe gwelloc'h an traoù ganti dre vevañ he buhez dezhi hec'h-unan. Memes tra er XVII^{vet} kantved, pa gemeras Bro-C'hall Breizh : n'eo ket evit pinvidikaat Breizh, met evit en em binvidikaat diwar goust Breizh : Breizh, Perou ar c'hallaoued !*» (98).

An nebeut skouerioù-se a ziskouez talvoudigezh al levri, hag ar skoazell a c'hell reiñ d'ar stourmerien evit respont d'an eneberien, hag ivez ar sikour a c'hell reiñ da bep hini evit sklaeraat e venozioù dezhañ e-unan ha menozioù ar re all war gudennoù Breizh. Ur blijadur ez eo lenn ar raklavar diwar blienn Y. Fouere, ken sklaer evel ma vez displeget atav an traoù gantañ. Ma vefe tra pe dre da bismigañ : en ul levri a seurt-se, e vefe bet tu da ziouserout ar skeudennoù ; keroc'h a-se n'eo ken al levri, ha n'eo ket se a lakay muioc'h a dud d'e

brenañ. Mar bez gant holl «*Gaieroù*» da-zont an dastumadeg-se ar memes talvoudigezh, e vo bet kavet un diskoulm mat da gudenn ar gelaouenn «*L'Avenir*», daous ma ne c'hellint ket tizhout kement a lennerien evel ar gazetenn hec'h-unan.

J.C.

ANNA YOUENNOU, «*Fransez Debeauvais da Breiz Atao et les siens*», t 2 *La bagarre de l'avant-guerre*. Mémoires du chef breton commentées par sa femme. 390 p. Rennes, 20 pl des Lices

Hemañ eo an eil levri diwar-benn Frañsez DEBEAUVAIS embannet gant e intañvez Anna YOUENNOU. Buhez ur stourmer, ar stourmer kentañ, e vuhez stourmer met ivez e vuhez pemdeziek, e zarempredoù gant e gerentiezh, e wreg ha tiegezh homañ ; buhez ha darempredoù trubuilhet gant e stourm. Leun eo al levri a gentelioù evit an hini a c'hoantefe an em stiepel diwar-skañv en emgann breizhat. Ret eo dezhañ en a-raok pouezañ e nerzh-kalon, en am dalmeta da welout hag-erñ e c'hello gouzañv, zoken a-berzh e diegezh, e dud-nes, e vignoned pe e genlabourerien, ar reuz-mañ-reuz dic'hortoz ; da welout hag-erñ e c'hello santout an dienez a arc'hant hag a zañvez gwashoc'h eget paourentez an hini en deus dibabet ar vuhez-a-avanac'h : ur manac'h a zo paour, n'eo ket chalet gant arc'hant ; met an hini en deus dibabet labourat pe stourm evit e vro, en deus ezhomm arc'hant, ezhomm eus an arc'hant-se hag a ra diouer dezhañ, hag a zo ken ret evit tizhout ar pal. Ar brogarour kalonek hag en deus gouestlet e gorf, e ane, e zanvez, e vevañs zoken d'e vro, a ranko bemdez ober pep tra gant netra, azgoulenn skoazell digant e gemvroiz, bevañ taget a zle, chom hep bezañ komprenet, ha poaniosoc'h tra, lakaat e diegezh da zougen an hevelep samm. Daoust dezhañ da c'houzout en a-raok ec'h asanto ar re-mañ a galon vat dougen lod eus ar bec'h, ne vezo ket hemañ skañvoc'h a se, tamm ebet.

Sebezet e chom al lenner gant an emgann pemdeziek-se a-enep an dieoù sammet war o chouk a-hed meur a vloavezh a-hed e holl vuhez, gant F. Debeauvais hag e wreg. Ne c'hell ket lenn ugant pajenn hep kejañ gant an enkreiz-se.

Ur gentell all ivez : an nerzh rakis d'ar stourmer evit chom hep bezañ digalonekaet gant an dizunvaniezh a welo en-dro

23

dezhañ o tistrannañ an Emsav hag o strobari e gerzhadenn war-raok. Da grediñ e vefe ne c'hello biken tud an Emsav tremen dreist dibabou-kontrol 'zo evit lakaat an enebour dirak un talbenn unanet. Emichañs ne c'hell ket an dra-se mont gant temz-spered ar Gelted ; se ne c'hell ket mont gant hon istor. E 1485, e 1488, e 1491, e kreiz an emgann-meur diwezhañ, n'edo frankiz ar vro en arvar, tiegezhioù uhelañ an noblañs vreizhat a werzhe, dre warizi ouzhan Dug, o skoazell, o anvioù, o brezelourien, o gwizien da roue Bro-C'hall ; hag int-i eo a voe penn-kaoz da gentañ ma voe trec'het ar Vretoned ha drouk-kemmet amzer-da-zont ar Vro. Neuze penaos bezañ souezhet oc'h adkavout e 1936 (hag e 1976) kement a zisrann ma'z eo evel teuzet evit ket ha netra, nerzh an Emsav.

A-wechoù e klasker an abegoù d'ar «burzhud germanek» : ur bobl o c'houzout mestroniañ ken buan he droukchañs hag adkavout al lec'h kentañ war leurenn bolitikel hag ekonomikel ar bed. Ya, met gant an dud-se emañ skiant ar c'hevrediañ, an emunaniñ, dre zilezet menoz pe venoz -reizh a-hend-all- evit harpañ an amezeg pa vez an traoù o vont da fall. Ha sklaer eo hiziv an disoc'hoù... Er stourm a renas F.D. evit unaniñ ar Vrogerourien eo e skuizhas e nerzh hag e yec'hed. Met ne oa nemetañ a gement a c'helle lakaat pep hini da gerzhout a-unan en emgann. Splann eo kement-se diwar bajennoù Anna Youennou

Arabat klask lennegezh er pajennoù-se (an dra-se a zo krenn er-maez eus ar pal). N'eo ket kennebeut evel un «droc'hadenn» eus Istor an Emsav. Nann, emañ n'eus nemet un dastumad dielloù a oa ret o saveteiñ. An diskoulm eunañ, evel just, a vefe bet o lakaat en un «ti-dielloù», ul lec'h ma c'hell dont ar re a fell dezho klask ha labourat. Hogen meur a wech, an dielloù fiziet en tiez evel-se, a chom dizanav, pe ne vezont ket digoret aes da bep hini. Feal da efvor he fried, feal d'hec'h amzer dremenet dezhi hec'h-unan, he deus kavet gwell A.Y. gouestlañ kalz a arc'hant -un arc'hant ha na oa ket avat, dreist-ezhomm dezhi ha d'he buhez pemdeziek -evit embann an testiñoù-se : lizheroù, eñvorennoù h.a. Marteze ne oa ket ret reiñ evel-se pep lizher ha pep skrid, met dre-se e teuer da anavezout ene ha buhez ar stourmer gant an tudioù bras ha bihan anezho. N'eo na fardet na kempennet an traoù, ha n'eo ket sur e vefe bet gwelloc'h labour ur skrivagner a-vicher, da lakaat anaout an den en un doare ken bev-buhezek.

24

En eil lev-mañ eta e kaver taolennet mare trubuilhet Istor an Emsav politikel a-raok ar brezel diwezhañ ; an taolioù graet evit dihiniañ spered ar Vretoned, evel distruj «Savadur ar Vezh» da noz ar 7 a viz Eost 1932, e Roazhon, an tan-arouez (14-4-36) er prefetiou, barnedigezh ar stourmerien vreizhat (26-6-38) distruj Monument Pondi (18-12-38). Evit heuliañ ha prizout al labour hag ar plegennoù, met n'eo ket al levrioù eo a vank en deiz a hiziv evit anavezout kement-se : lakaomp re b-Prizidik (Istoc de bardono !), re Gaereon, re Mordrel, Mordrel ha re all. Bremañ e vez klask istorourien dielloù a-vern evit anavezout dezho, un daolenn wirion evit an Emsav. Ha levrioù Anna Youennou, leun a wirionez denel, ne vezont zisterañ da sikour sevel evel hag an neb a skoazello, evel Anna Youennou en hec'h levrioù labour talvoudus evit ar Vretoned.

Alain DENIEL, «Le Mouvement Breton», Ed. François Maspéro, 1, Place Paul Painlevé, Paris 75006, 454 paj. 50,00 l.

Goude kalz a re-all ez eus bet embannet (ar wech-mañ e ti Fr. Maspéro), un oberenn diwar-benn an Emsav -reizhoc'h diwar-benn «Breiz Atao». Marteze e oa ur seurt klaoustr mont war an hent-se goude levrioù Yann Poupinot pe Ronan Caerleon, ha dreist-holl goude levr Mordrel («Breiz Atao») ha levrioù Anna Youennou («Fañch Debeauvais»). Ha koulskoude n'eo ket ul labour dreist-ezhomm.

N'eus ket ket amañ da ganañ ur stourm diaes level m'en deus graet R. Caerleon, da zibunañ efvorioù (diouzh giz Mordrel), evel-just untuek. Kinnig a reer ur studienn skiantel he doare, o lavarout e pe lec'h eo bet kavet an dielloù, ha zoken, o tegas, evel stagadennoù, arroudennoù hir, dedennus-tre. D'hor soñj e kavomp aze, kempennet evit pep lenner, un dezenn-dok-torelezh, dalc'het e Skol-Veur Brest e 1975 : un dra hag a ra d'al labour bezañ selllet evel ul labour a-zevri. N'eo ket souezhus eta ne vefe ket troet ar skrivagner gant -pe enep- oberoù Breiz Atao. N'eus ket evitañ nemet da zistagañ ur skejenn eus istor Breizh. Etre al linennoù avat eo aes gwelout n'emañ ket a-du gant paotred en Emsav politikel.

Da grediñ eo ivez e kouezh un tammig er si marksel a-vremañ ken moutmout gant kelennerien ar Skol-Veur : ne dalv an dra bolitikel nemet diouzh hec'h efeüsted e buhez pemdeziek pep oberour. Evitañ emañ an Emsav da vezañ lakaet war roll ar c'hostezennoù a-zehoù, fall, eta, ivez neuze, o kas en-dro ur stourm kollet en a-raok... Diouzh e veno ez eus bet kollet meur a striv ; rak ar menozioù displeget e kasetennoù an Emsav («Breiz Atao» da gentañ), menozioù diazezet war an istor, an anvazioù, ar ouenn, a zo re uhel evit ar bobl, ur bobl dedennet pergen gant an amzer a-vremañ. Mat ! Met, ha n'eo ket se ankounac'haat pouez an amzer dremenet, arzh-distruj al levezon c'hall e-pad kantveoù ? Ankounac'haat n'eo ket hepken diwar vara e vev mab-den ? Ankounac'haat n'eo dedennet ar re yaouank muic'h evit menozioù uhel ha gant ur vuhez start gant menozioù a-rez an douar. Aze, emañ ar skrivagner oc'h azkavout Yann Poupinot (Doue d'e bardono !) meur a wech a-hed ar rann gentañ, enni arroudennoù hir diwar al levr «La Bretagne contemporaine» (met tra souezhus ! arroudennoù ebet diwar «La Bretagne à l'heure de l'Europe», gant un embanner eus tu dehoù) Evel just, emañ dibab A. Deniel a-du gant dibabou istorourien Istor Breizh (kelennerien ar Skol-Veur) savet gant un embanner Privat.

Barnet eo gantañ eus an nec'h, gant ur skeud a zismegañs ma teze, istor La Bordenie : komz a reer diwar e benn un tammig evel pa ne vefe ket bet diuntuek an istorour breizhat bras. Dav e vefe bet da A. Deniel prederiañ war venozioù Robert Aron, an istorour gall a-bouez vras diwar-benn an istorour lakaet dirak testennoù ha testoù, onest ha leal, o tibunañ an darvoudoù hag o efvorioù e doareoù kontrol. A-hend-all, emañ hag ahont, en oberenn faziig pe faziig a ziskouez pegen diaes eo ar vicher. N'eus forzh ! E-kichen ur si bennak evel-se, ez eo bras perzhioù-mat an oberenn. Gouzout a oar A. Deniel dielfennañ an traoù, merkañ spis abegoù ha disoc'hoù un darvoud bennak. D'hor meno, e vefe da lakaat keñver-ha-keñver gant afer distruj «Savadur ar Vezh», e Roazhon, e 1932.

J.C.

JULES GROS, «Le Trésor du Breton par lui», 3^e partie 1974. Le Style Populaire gwerzh e ti Giraudon, 30, Ru Kerampont, 22300 Lanuon.

Gant an trede lev-mañ diwar-benn ar yezh komzet emañ taolennet en un doare bev ha gwirion ar brezhoneg evel m'emañ a genou ar bobl e Bro-Dreger. An neb a anavez yezh Treger a lavaro kerkent «Honnezh eo va yezh ; sed aze gerioù ha troioù-lavar a zeu ganin bemez pe a glevan bemez end-en-dro din !».

Ya, dre vras ! Met nag a droioù-lavar avat hag a zo renket emañ n'int ket bet klevet evit gwir gant pep den eus Bro-Dreger. Ha n'eo ket souezhus, peogwir emañ an Aotrou Gros o tustum e deñzor abaoe 1912 ha diwar-bouez tañvouesa en deus graet ur bern teskadou. Gallout a reer krediñ hon eus meur a wech testennoù war ar yezh abaoe 150 vloaz, pa oa ganet kentañ pourvezerez gerioù an Ao. Gros, e vamm-gozh end-eeun, e 1833.

Un dra a zo avat, a vank hag a vanko e-keñver gouziegezh hag emdroadur ar yezh abaoe an amzer-se : klevout an dud o komz. Ya, met penaos, pa ne oa sonerollier ebet, nag ar binvioù pe an ardivinkoù a zo bremañ e servij an enklaskerien ? Daoust hag e oa tu a-hend-all da notennañ en ur skritur fonetikel kement bomm-lavar pen-naouet gant J.G. ? Tu a vefe bet da welout evel-se ar c'hemmoù degaset tamm-ha-tamm -pe a daol-trumm- rak dleout ar bezañ eus ar seurt kemmoù trumm en ar yezh a sell nerzhioù a bep seurt o tiriñnal warni. Sellit nag a gemm e doare-distagañ etre an dud kozh hag ar yaouankizoù abaoe 10 vloaz bennak hepken... Met un den e-unan-penn ne c'hell ket ober pep tra.

Soñjal a ra gant darn ha n'o deus ket gwelet labourioù J. Gros ez int graet evit deskiñ ar yezh. Ne dint ket muic'h graet da zeskiañ ar yezh eget ur geriadur, a gwirionez met da wellaat, da binvidikaat, da vevaat yezh an neb a garo o studiañ.

Diwar oberennnoù Jul Gros, sed amañ ur menoz bennak diwar-benn labourioù a vefe da ober. Daoust m'en deus an oberour savet ur Geriadur an troioù-lavar ne zle ket bezañ ennañ kement ger dizanav a zo implijet en e levrioù. Ober ur roll klok anezho a vefe da ober. Pelloc'h avat a vefe tu da vont ha gwelout betek peic'h e c'hellfe kavadennoù an Aotrou Gros talvezout d'ober an daolenn eus buhez ar bobl, eus he buhez klok, micherioù, kerwerzh, labourioù ivez ha me 'oar ? Da

25

LEVRIOU (kendalc'h)

gomz sklaeroc'h c'hoazh : gant peseurt tachenn eus buhez ar bobl e pled dreist-holl an troioù-lavar ? Un dachenn strizh, un dachenn frank ?

Evit pezh a sell ouzh ar YEZHADUR e kav din ez eo aesoc'h al labour, peogwir ne deo ar yezhadur nemet ur skeudenn reolennet eus ar yezh, hag amañ emañ ar yezh (yezh Treger da vihanaf) evel m'emañ e gwirionez, en he gwerc'hted, koulz lavarout.

Un dra a lavarfen ouzhpenn : studiañ a-dost lusk ar frazennoù. Studiet a-walc'h eo bet reolennoù ar merzaouriezh gant tud evel R. Hemon, Maodez Glanndour evit komz eus ar re anavezetañ e-touez ar skrivagnerien vrezhonek. Lusk ar yezh-plaen, ar stumm hesonañ hag ar muiañ diouzh ijin ar yezh, da echuiñ ur frazenn n'eo ket biskoazh studiet ervat ; gwir eo hon eus da zerc'hel kont eus ar rannyezhoù met amañ e komzom eus ar yezh evel m'emañ e labourioù Jul Gros. Ar skrivagner gall brudet, Pascal en devoa sellet a-dost ouzh ar frazenn latin a-raok klask kemer skouer diwarni evit e labourioù dezhañ e-unan. E levrioù J.G. e vefe moarvat kentel da dennañ e-keñver yezh an displegañ er radio, er skingwel, er c'hoariva.

Dav eo meuliñ an oberour evit e bennegezh, e zalc'husted en ur bouezañ c'hoazh war ar merit en deus bet oc'h adskriñ e zornskridoù div pe deir gwech da glask heuliañ sorc'hennoù ar vrezhonegerien war dachenn ar skritur.

Evel ma ouzer, en devoa J.G. skrivet e notennoù e yezh Vallee-Gwalarn. Adskrivet en devoa gant e zorn, mar plij, danvez e levr kentañ er skritur drouganvet «skolveuriek». En dro-mañ dre ma soñje gantañ e oa bet degemeret un toullad kemmoù goude un emglev gant an holl skrivagnerien en deus adskrivet adarre e notennoù hervez ar reolennoù nevez ! Hogen emglev ebet n'eus bet, reolenn nevez ebet n'eus bet degemeret war boant ebet peogwir n'eus ket den ebet o sinañ ! Chomet eo an traoù war o c'hement all. Ar gazetenn vihan «EVID AR BREZHONEG» lennet da vat a-hend-all, a zo bet fur a-walc'h o chom hep mont re bell. Met da luziañ ar stal he deus U(vaniez)h D(emokratel) B(reizh) savet ur skritur nevez diouzh he zu hec'h-unan ; ne c'heller ket lavarout evat he deus roet ur skouer a spered demokratel, rak n'he deus haulet reolenn demokratel ebet en afer-se.

Labourioù Jul Gros ? Un teñzor fonnis, pinvidik-meur da dennañ dioutañ, evel ma leverer en Aviel diwar-benn ar penn-tiegezh ; «traoù kozh ha traoù nevez»

Klerg

ERNEST LE BARZIC, «Mur de Bretagne et sa Région» (3^e édition), «Vieilles et Bretagne», 48,00 l.

Ma ! Dizehan e talc'h E. B. Barzic adskriñ ha da embann levrioù ha gantoù-skrid, e galleg hag e brezhoneg, da dro-mañ e ro deomp e galleg, ul levr «HENCHAN» n'eo ket ul «levrig-heñvel» met ur pikol levr 480 paj. bennak e vez diwar-benn MUR... An trede mouladur eo, ha kresket da vat, ar pezh a ziskouez deus an daou levr kentañ kavet aesoc'h prenerien. Hemañ a raio sur-mat ivez dreist-holl e Mur hag ar c'horn-bro-se, p'emañ an danvez n'eo ket diwar-benn Mur hepken, met ivez diwar-benn meur a barrez diwar-dro, gant istor familhoù bras ar vro.

Arabat, avat, krediñ ez eo ul levr «touristikel», rak e meur a gerviser ez eo ur gwir levr-istor. Met ken fonnis e oa an danvez mar n'en deus ket gallet an oberour, daoust d'e c'hoant da gouchañ ar muiañ ar gwellañ a draoù, kleuzañ don war bep tachenn. Evel steuen ul levr fonnis ez eo meur a bennad end-eeun. Hag o vezañ ma fell da E.B. komz diwar-benn kement-se a draoù ez eo distroll un tamm ar pennadoù, da lavarout eo, e vank unanded el levr. Met hennezh ez eo si ar seurt oberennoù.

Arabat avat, soñjal ez eo graet al levr evit tud Bro-Vur hepken, rak an neb en devo amzer a gavo e-leizh a draoù da bennaouiñ ennañ... Lakaomp istor ar brezhoneg-a zo o paouez mervel eno koulz lavarout pe ne chom mui nemet unan kozh bennak bet savet e brezhoneg, ha daoust ma'z eus chomet gerioù ha troioù-lavar brezhonek niveruzik er yezh pemdezhek kemmesket gant galleg (dreist-holl) ha romaneg Breizh-Uhel. E gwirionez, ne ra E.B. nemet divrazañ ar gudenn, rak, d'am menno, en istor kiladenn ar yezh er sitread-se, abaoe ar Reveulzi vras, e vefe peadra da sevel un dezenn-doktorelezh. Ne gav ket din eo mat komz evel ma ra hor c'heneil eus un «divyezhegezh start ha padus» e kanton Mur, abaoe meur a rummad. Ur marevezh a-dremen ez eo an divyezhegezh e pep lec'h e-mesk ar bobl ; a-benn ar fin, ez a an trec'h gant hini pe hini

26

eus an divyez, peurvuiañ gant an hini deuet eus an diavaez -evel ma weler e Breizh en deiz-a-hiziv- Hogen ezhomm a vefe ur studiaden resis war ar sujed-se e komad Mur.

Anat eo ivez, diwar lenn istor ar skolioù e Mur, o deus ar re-mañ graet ul labour drastus, daoust d'ar bleuniou ha d'ar meuleudioù a roer el levr da ampartz hag enroustet ar skolaerien hag ar skolaerezed d'ar skolioù ofisiel, pe ar skolioù kristen.

Pa reomp meneg eus ar yezh, e weler ivez eo bet levezonet an oberour -betek reolenn tezennoù F. Falc'hun. Ur wechig bennak e tichañs dezhañ sachañ war ar reolenn evel ma leverer, evel pa lavar e oa bet dibabet Abad Abati ar Repoz-Vat (De Revoze Requie), Dom Aofred, da jubennour ar yezh Kernev, gant Prosez Sant Erwan. Lec'h ebet n'eo merket kement-se er yezh. Pe neuze evit peseurt rannyez e bet dibabet va c'henvroad, ar chaloni Kernev, eus Plouvael ? Ne zlee ket bezañ heñvel-zisheñvel rannyez Plouvael diouzh ar Mur, d'ar mare-se.

Derc'hel groñs a ra E.B. d'e ziskleriañ eus anv MUR o talvezout MEUR hervezañ. A c'hell bezañ, daoust ne deo ket difennet gwelout hepken MUR, diwar al latin MURUS. B. Tangi, en e levr war an anvioù-lec'h a zo techet ivez da welout MURUS amañ. Pe neuze, er gont-se, e vefe koulz (gwel kentoc'h), sellout MEUR evel un anv-den ha keñveriañ outañ ar parrezioù all eus Kernev, hep PLOU na LANN a-raok anv o diazeourien, evel m'en deus hen diskouezet Gwenole ar MENN, evit meur a barrez.

Tabutoùigoù a netra, n'eus forzh penaos, ha n'eo ket se a goazho meritoù al labourer dizamant m'eo E. ar BARZIC.

E meur a lec'h ez eo pinvidik-eston e c'halleg, met evit ar rummadoù-da-zont ez eo e oberennoù brezhonek -darn anezho da vihanaf- eo a gonto. Kemer 'ta, Ernest, da c'her-stur komzoù latin Horatius kozh «Opus feci, aere perennius !».

Klerg

BERNARD TANGUY, Les Noms de lieux bretons, 1 - Toponymie descriptive, 134 paj. Priz ebet merket.

El levr-mañ e kaver un 3 000 anv bennak renket ha diskleriet. Meuleudi d'an oberour evit e basianteg hag e aked. Kaout a ray, sur-mat, gwerzh d'e labour, pa blij kement d'an dud gout petra a dalvez an anv-mañ-anv. Hag amañ ez eus kalz hag a gavo traoù nevez.

Met re a anvioù, un tamm mat, a zo el levr, ken n'en deus ket gallet an oberour merkañ evit an holl anvioù-se ha pep hini anezho an dielloù o deus servijet dezhañ da sevel e labour. Un taol esae onest-tre ez eo avat, daoust ma c'heller abegin tra pe dra.

E-touez kavadennoù ar skrivagner emañ orin an anv PLAINTEL (Planten e Bro-Gintin). An hevelep anv ha PLOUNEVENTER ez eo. Anv PLOUENAN a zo da glask an orin anezhañ en anv MENOEN (1150) ha n'eo ket e BENOEN (diwar BENIGNUS).

An anv-parrez all heñvelik ouzh PLOUENAN, ha bet tostaet outañ gant BARR-HEOL (niv. , paj.) PLEVENON a c'heller aveletat hen sellout evel o tont eus PLOEBENON diwar an anv BENON o tont e-unan diwar al latin BENIGNUS, met, evel m'hen diskouez B. Tangi e-unan gant e gavadenn war BLOUENAN, ez eo bubuik kement kinnig ha n'eo ket diazezet war zielloù kozh. War ar poent-se e ro B.T. ur gentel eus ar gwellañ d'an disklerourien-anvioù. Met en em ankouazh a ra e-unan a-wechoù, evel, da skouer, pa gomz eus al LEGE. Kalz eus an anvioù meneget gantañ ivez a zo tennet eus an tri levr embannet gant an INSEE hag a vez graet anezho «Nomenclature des lieux-dits». Ur mell-labour ez eo evel just, ober un enklask pizh-meurbet evit pep anv, setu perak n'eo ket souezhus gwelout paj. 72 Ar C'hrayo un anv eus Ploubër, hag a vez distaget ar C'hreid (evit Krec'hio) gant ar bouez-mouezh war an O.

Chal-dichal, en ur stumm bennak, a zo e diskleriadurioù an anvioù-lec'h. Setu KAOUENNEG (paj. 125) adtroet : «Lec'h kaouenned», daoust da labourioù Lergil-lière, ha daoust m'eo bet ar barrez-se un drev eus Kawan-Kaouan !

Er raskrid -hag a zo mat-kaer dre vras-ne ouzon ket ha degemeret e vefe gant an Okitanegourien ar pezh a zalc'h ar da embann en holl levrioù diwar-benn LE STRASBOURG, sellet evel an destenn «c'hallek» kentañ, Josép Salvat a lavare e oa e gwirionez Okitaneg.

Ar ger «STANK» ne seblant ket bezañ gwall-aes da zisplegañ. Diwar al latin e tle donet koulskoude, mat e latin e oa daou c'her : stagnum (latin klasel) ha stancus (latin pobl). An hevelep kudenn a gaver en Okitaneg (gwel. Geriadur Ailbert, 1966, paj. 379 dindan ar gerioù ESTANHAR hag ESTANHI), hag e galleg ivez.

Despetus eo n'emañ ket e dibann al

27

levr an holl c'herioù meneget el levr ; un dra eus an diaesañ ez eo evit an neb a garfe kaout diouzhtu ar respont evit ar ger-mañ-ger.

A-du emañ B.T. evit gwelout ar ger PENN e gerioù evel BENODED : *Penn-an-Oded...* Kalz gwelloc'h gwelout ar wrizienn BAN, BEN, (BON) lakompren diouzhtu : genoù, aber...

Ul levr mat, ul levr da breñañ.

Klêrg

NOTENN DIWAR-BENN LEVR E LE BARZIG MUR E TSA REGION

1 - Mur a vefe neuze evit Pluvur pe Pleuveur. Peotramant soñjal en anvioù evel Plougastell (Ploeg-Kastell).

KELAOUENNOU

BRUD (4 niv. ar bloaz) : 30 I. P.M. MEVEL
29200 Brest. K.R.P. 1499-55 Roazhon
Niv. 51.

Daoust ha tizhet a vefe **BRUD** gant klêved ar c'helaouennoù brezhonek : an diouer a arc'hant, pa dro da vezañ kelc'helaouenn liesskrivet eus a voulet ma oar ? Setu an niv. 51 o tont er-maez. Daoust ma'z eus pennadoù liessseurt bourrus er peurrest eus an niverenn-se : kontadennoù, studiadennoù evel an hini war guzul Fabrik Gwiglan (1742-1762), notennoù war dud aet da Anaon nevez 'zo, evel Per ar ROUZ (1874-1975) bet kelennet war ar yezhoù keltiek, e Skol-Veur Roazhon ; Zavier LANGLEIZ, Dom GODU, ha neuze burutellerezh levrioù e pouezimp kentoc'h war ar rann gantañ gouestlet da IWAN AN DIBERDER (Doue d'e bardono!)

En daou raskrid, unan gant Per-Mari MEVEL, lakaet e parlant Gwened gant K. ar Brazideg hag egile gant Sten KIDNA, e kaver en tu-hont da venozioù an daou skrivagner-se war dalvoudegezh lennegel oberann an Diberder hag e labour, doareoù trist ha fromus diwar-benn e vuhez, dreist-holl, dibenn e vuhez. Marvet paour-Job. Ne oar mui den zoken emañ emañ e vez, e kom ar beorien, e bered, Gwened, 20 vloaz goude e varv : n'eus mui na kroaz na seurt, o verkañ emañ o repoziñ ar Breizhad-se ha na oa ket bet kaezhiget nemeur gant ar vuhez.

Gwellañ diverrañ a oufed da gaout diwar-benn IWAN AN DIBERDER a zo e levr ABEZEN : Istor Lennegezh Vrezhonek an amzer-a-vremañ, paj. 58 (a-zivout BRITTIA), ha paj. 224. Spi hon eus n'eo ket

kollet e skridoù dezhañ e-unan nag an traoù talvoudus dastumet gantañ e-touez ar bobl : gwashoc'h e vefe an taol-se 'm eus aon eget bezañ lezet e relegoù paour da vont en ankouazh. Labour vat a rafe a-hen-all an hini a glaskfe temañ eus menozioù -lavar-dislavar alies I- an Diberder an danvez mat, an danvez pozitivel a zo enno. Ha bez'ez eus. Met da furchal e vefe e meur a lec'h, e meur a skrid, e meur a gelaouenn, ha war veur a gazetenn, ha kontañ e lizhiri e galleg hag e brezhonek.

Lavar-dislavar, emaoimp o paouez skrivañ. Daoust ha n'eo ket un tamm dra-se a gaver end-eeun er pennad ma'z war **VRUD** : *BALEIN BRO ?* Pouezañ e kement I.D. war baourentez Breizh e-touez broioù all : ekonomiezh, arz, lennegezh, ha me 'oar -betek bezañ direizh hag e-touez m'en em c'houlennet perak en doas c'hoazh un tamm fiziñs en e vro, pa gentoc'h en ha yezh. Gwanik eo e respont daoust ma'z eo kaver ar menoz-mañ, ha gwir : Hep menoz (tuhenn) d'hep pobl a gouezh.

Ne oa ket lwan an Diberder, gant bennak, pell ac'hano, war menoz goapus, krogus e oa e dro-livrezh e-touez alies e liv-skrivañ, ken na lakae e gantañ wellañ da vont a-enep dezhañ ha da ziwall d'hen daremprediñ a-re-dost. Ne oa ket brav kouezhañ dindan e bav, hag an nebeut istorioù kontet gant STEN KIDNA a gloc' er vat gant e demz-spered. Un den leun a gomples oñ, evel ma vez lavaret bremañ, hag a ranke *«en em zivoustrañ...»* Ya, an Diaoul ag an Oriant (evel e dad, a-hervez !).

Pec'hed avat, e vefe hen sellout evel un den gwinegr-tout rak un den e oa hag a zellez enor, ha resped, dre m'en deus gouzavet kalz, kalz a-berzh ar vuhez voutin, kalz ivez dre ma oa Breizhad.

E 1944, da heul kalz a vrogarourien all e vel EVEN, an Dred e voe «buorzheta» e kamp Langæog (Langeu mutu !)-e-kichen Sant-Brieg, ha mil boan am boe o kaout darempredoù gantañ dre ar beleg a oa karget eus ar brizonidi (ur c'helenner eus klerdi bras Sant-Brieg) ; hemañ, ar beleg-mañ ne c'helle ket zoken ober ar pezh a gare I «Chatal brein buorzheta»-dre ma oant Bretoned vat, ne oa ken anezho...

E-pad ar brezel e oa deuet da chom da Blouared. Evit bevañ e ranke sevel pennadoù evit ar c'hazetennoù gant a ouie merat galleg eus ar bravañ... E wreg a oa skolaerez e Plouared ; ur wech hepken em

eus he gwelet ; ne oa nemet galleg ganti. ha gwir eo, gant lwan an Diberder ivez, pa ne veze ket stourmet outañ, rak aesoc'h e teue galleg gantañ eget brezhoneg ; un eil yezh e oa ar brezhoneg evitañ.

Da domañ e di, pe da vihanañ da c'hwezhañ an tan, ec'h ehane, e Lann-Blouber, e ti Jerom Merdi, ur botaoer-koad, hag e karge a skolpadoù e valizenn -ur pezh hini, unan rous hanter-diskloz. D'ar mare-se e vefe, war varc'h-houarn, ur wech ar sizhun pe-ziv da welout e verc'h Sesilia, ur plac'h e-touesk 17 vloaz o vervel gant al langiz en Vital Lanuon... Me 'oa bet en interamant.

Nann ! Ne oa ket liv ar binvidigezh gantañ gant e borpant rous, an hevelep hini war e gein.

Studiet en devoa ar yezhoù keltiek, ha gantañ, na petra 'ta, e yezh dezhañ er vuñ, p'en devoa ranket he deskiñ, e-giz emaoimp o paouez hen damvenegiñ ; daoust d'ar pezh a c'hell soñjal darn ne oa deuet a-benn d'en em ober «brezhonek» -ann-kil-ha-troad ; un draig bennak a ranke dezhañ farabat ken tamall dezhañ avat ! evel ma'z anvave L. Herrieu e-unan, e-kuzulig ; n'eus forzh penaos n'eo ket L. Herrieu a vefe aet da inkantiñ an dra-se, dre resped, na pa ve ken, evit youl ha pennegezh e genlabourer I, an Diberder, ha dre zoujañs evit e ouiziegezh... Bout a oa an Diberder ivez ag er midad kozh-se ha na gavent ket d'jaoc'h hoari gant galleg ; ha dre-se, ne zlee ket bout brezel en e empenn etre an div yezh !... Ret e veze stourm outañ evit d'erc'hel kaoz pell, e brezhoneg, gantañ...

Studiet en devoa kembraeg, ha gouest e oa d'hen lenn da vihanañ, peogwir e veze levrioù kembraek gantañ, en e sac'h o pourmen, hag ur wech bennak e lezas ganin da lenn «*Llyr Y tri Aderyn*» (Levr an Tri Labous) gant Morgan Llwyd, hag ul levr bennak all.

Studiet en devoa dreist-holl gouezeleg Bro-Skos war a lavaras din, un devezh, war an hent, etre Plouber ha Kerofern, d'ar c'houlz m'edo o kenlabourat gant noter Gouezeg, Yeun ar Gow.

Paotr-an-dielloù e oa a-walc'h, ha ne selle ket berr-berr evit kaout dielloù : hen gwelet em boa, un drovezh bennak, e presbital Kemper-Gwezenneg, o tispakañ d'an aotrou lec'hvien (Doue d'e bardono !) ha din-me, ur bajenn bet diframmet eus Kaieroù-Badeziantoù parrez Plounez, abalamour da gaout sinatur Laorañs ar Richou, kure Plounez, ha saver misterioù ar Basion. Ne oa ket en tu-hont d'al Laorañs-se evit an

Diberder ! (gwel. *Feiz ha Breizh*, Meurzh-Mezheven 1941). Prometiñ a rae daskor ar papiroù amprestet gantañ, met ober a rae evel ar re all : ankouazh seveniñ e bromesa !

Ur wech em boa prestet dezhañ levr TALDIR : *Ur wech e oa eur c'hrennard, eun diskard, eur soudard...* Ret e oa bet din prenañ ur skouerenn all, met ma oufen en devefe bet gant va levr ur gweneg bennak da breñañ un draig bennak d'ober dezhañ disoñjal e vizer, e vefe stad vras ennon...

Ne oa ket just e-keñver skrivagnerien evel VALLEE, MEVEL, MORDIERN war zigare ma felle dezho modernaat ar yezh. An DIBERDER hag a oa paotr ar yezhoù klasel a ouie a-walc'h ez eo disheñvel skrivañ latin hervez rolennoù ar yezhadur, ha skrivañ latin-latin hervez ijin al latin end-eeun ; ha moarvat e veze e skridoù 'zo traoù ha na seblantent ket dezhañ bezañ hervez ijin yezh ar Vretoned. Hogen ken soutil ez eo kement-se, ma'z eus riskl atav o troukvarn troioù-lavar ha skridoù 'zo... Brezhoneg-pobl ? Ar mestri ? Sellet eta ha yezh ar bobl an hini eo a zeu gant an Diberder diouz ar pezh a zo war **VRUD** ?

Karout a rae an troioù-lavar poblek saourus evel ma ra an holl. Roet em boa dezhañ e prof ur skouerenn eus AVIEL KATOLIK an Aotrou BILER-AZENOR, person Yvias (St Briek 1907) hag eñ o kouezhañ, er bajenn 2, war ar frazenn-mañ diwar-benn Zakariaz hag Elizabed, tad ha mamm Yann-ar-Badezour : «*N'ho devoa ket a vugale, na bet gan Elisabeth kelo a gaout...* «*Sell aze brezhoneg, emezañ, kuit a gomz eus gornac'h na brezhagn, nag eus traoù all !*» Lakaomp...

Hogen al lusk roet d'ar yezh gant KROAZ AR VRETONED, gant GWA-LARN hag o-diskible, a oa ul lusk yac'h war an tu mat, ha mar n'en deus ket douget ar frouezh a oa diet dezhan dougen, ha ma tro yezh ar midad nevez da vezañ ur podad-ar-meskailhez n'eus abeg all nemet an diouer a vuhez vroadel. Me 'gav din en devoa lwan an DIBERDER meizet kement-se, rak n'eo ket evit treiñ mein da sec'hañ eo en devoa savet BRITTIA. Evit pezh a sell ouzha an tabut war ar yezh, daoust ha ne vefe kentoc'h ur merk eus kompleks kalz a Vretoned vat, aon dezho d'en em zispartiañ d'en em zisrannañ diouz ar bobl, hag o santout pegen gwan ez int evit terrin ar stern lakaet gant an Istor ha Lezennoù gouarnamantoù Pariz war chouk Breizh ?

BREIZH, BRO GRAS ?

E niverenn 88, **BARR-HEOL** eo bet embannet ar pennad «*Eus an eil diskar-amzer d'egile*» am boa savet diwar-benn an doare amzer a oa bet o ren war bro etre Kala-Goañv 1974 ha hini 1975. Ne oan ket o c'hortoz, c'hwec'h miz goude ma savis ar pennad-se gwelout an holl gelaouennoù oc'h embann pennadoù diwar-benn an diouer a zour e Breizh. Un dra wir eo koulskoude, ur goañvezh dizour a zo bet, ha goude ur miz Ebrel kras souezhus ez eo deuet an dud da vezañ ankeniet o soñjal en hañv da zont hag er verrezh dour a c'hellje dont warnomp ma vez adarre nebeut a c'hlav ha tomm an amzer.

Setu ni e kreiz miz Mae, ur miz hag a vez ennañ, hervez al lavar, re a c'hlav pa gouezh bemdez ha re nebeut pa gouezh nemet bep eil devezh. Ma ! Betek-hen n'en deus ket ar miz-mañ hon dic'haouet eus sec'hor miz Ebrel, hag e c'hortoz er beped ar barr founnis a rofe un tammig dour d'an douar. Moarvat ez eus kouezhet un tu bennak e Breizh ur barr mat a c'hlav ; met amañ, e kostez Lannuon, n'eo ket zoken glebiet an douar. Hag e meur a lec'h all e seblant bezañ bet heñvel, ha lenn a zo bet gelliet er c'helaouennoù ne oa bet kouezhet e-doug ar miz-se nemet ur millimetrad hanter a zour e Plougoustant war dachenn-esa al labour-douar du-hont. Ne gav ket din e ve bet kalz muic'h dre amañ. Pelloc'hik e tu ar c'huzh-heol ez eus bet muic'hik, daoust ma oa moarvat an nebeutañ a zo bet gwelet biskoazh er miz-se : e Montroulez ez eus kouezhet 7 millimetrad (an nebeutañ betek-hen a oa bet 26 mm e 1954), 10 e Landivizio ha 9 e Brest. Er gêr-mañ e oa an niver etre evit ar miz-se 69 mm etre 1931 ha 1960, met ar glaveier a c'hell bezañ dizingal ha ma ne gouezhas nemet 31 mm dour e 1965 (goude ur miz Meurzh dourek avat) ez eo 191 millimetrad eo a vezas an douar e 1966 ; mar boa 1973 gant 70 mm, unan etre, ez eo bet eno miz Ebrel 1976 an trede hini diouzh renk gant diouer a zour (41 mm e 74 ha 53 mm e 75). Met miz Ebrel ar bloaz-mañ n'emañ ket e-unan en afer rak, abaoe penn-kentañ 1975, n'eus bet e Brest nemet tri miz a vije kouezhet enne muic'h a c'hlav eget ordinal : Genver +18, Meurzh + 58 ha Gwengolo + 20 mm. En Ebrel e vankas 16 mm (ha koulskoude e oa

kouezhet 53 mm), e C'hwevrer e vanke 69, e Mae 40, e Mezheven 27, e Gouere 34, en Eost 20 mm (a gouezhas a re e Gwengolo), en Here 61, e Du 9 hag e Kerzu zoken 89, e doare ma vanke 269 millimetrad dour er bloavezhad glav a oa bet e Brest e 1975. E Roazon avat ne badas ket ken gell ar sec'hor hag e Brest peogwir e vezañ muic'h a c'hlav eget boas e mizioù Meurzh, Mae, Gwengolo ha Du, e doare ma ne oa fin ar miz-se diouer nemet a 56 mm dour. Met an unnek miz, met Kerzu, gant 13 mm dour hepken, a greskas ar mank a 58 millimetrad all.

Ma tistroomp da Vro-Dreger, n'eus bet tu da lenn ne oa bet e Plougoustant, e-pad tri miziad kentañ ar bloaz 1975, nemet 103 millimetrad dour, da lavarout eo nebeutoc'h eget e miz Genver 1975 hepken (117 mm), ha gant miz Ebrel da heul n'eus ket er bloaz-mañ 105 mm zoken. Dre se ne vo ket kavet dizereat moarvat e tistrofen amañ da heul war an amzer a zo bet dre amañ e-doug ar c'hwec'h miz goañv set e-biou.

TOMMDER HA YENIEN

Em fennad diwezhañ em boa displeget pegen klouar e oa bet goañvezh 1974-75 dre vras. N'eo ket bet garv kennebeut hini 1975-76, hep bezañ ken klouar hag an hini diagent koulskoude, ha tra ma oa chomet bev en hini kentañ an darn vrasañ eus ar plant kizidik ez int bet er goañv-mañ devet gant ar rev evel ma vezont ordinal. Degas a ran da soñj ne ran ket va muzulioù dindan c'houder evel ma ra tud ar «meteo», met er-maez en disheol, un tri metrad bennak a-us d'an douar. Dre vras e krog an douar da glerenniñ er poullou bihan pa vez tri derez dinadan zero, nemet pa vez bet ur frapad yenien ha deuet an douar da vezañ yen d'e dro. Evit ar rev, ha ne deo nemet glizh skornet, ez eus kudennoù all, ha ne deo ket un devezh rev kendalvoud gant un devezh skorn.

E-pad goañv 74-75 e oa bet diskennet ar wrez 39 gwech dindan 0° C, 11 anezhe dindan -3°, gant -5° da izelañ ; er goañv-mañ ez eus bet 50 gwech nebeutoc'h eget 0° C, unnek nozvezh yenoc'h eget er goañv diagent eta. Eus an 50-se ez eus bet 20 dindan -3°, an izelañ o vezañ bet -5° d'an 10 a viz Meurzh. Ha kleret eo bet an douar 25 gwech er goañv-mañ.

Devezh tommañ ar c'hwec'h miz goañv a zo bet an 20 a viz Ebrel ; 15° (d'an 29 a viz C'hwevrer e oa bet 14,5°), arlene e oa bet 18° d'an 28 a viz Ebrel. Nemet e C'hwevrer ha Meurzh e oa bet tommoc'h devezh tommañ pep miz e 74-75. Er bloaz-mañ devezh freskañ ar goañv a zo bet ar 16 a viz C'hwevrer, en deiz-se ne savas ket ar wrez uheloc'h eget 0° C ; er bloaz a-raok an izelañ a voe 3° (Meurzh 19, Ebrel 4). Nozvezh klouarañ ar goañv a zo bet d'ar 15 a viz Du gant 9° da izelañ, er bloaz a-raok e oa bet 9,5° d'an 29 a viz Kerzu. En enep, miz an nozvezhioù yenañ a zo bet miz Ebrel, an hini glouarañ anezhe o vezañ bet hini ar 6 gant 4,5° da izelañ. Anavezet e oa bet miz C'hwevrer miz an nozvezhioù yen, an hini glouarañ er miz-se o vezañ bet d'an 8 gant 5° da izelañ.

Ar goañv diwezhañ a grogas da vat miz-hini a viz Kerzu hag a voe un devezh gwech peogwir e oa bet tizhet -5,5° en noz Meurzh. E voe ket muic'h eget 0,5° en deiz, met da vat ken gwazh hag ar 16 a viz C'hwevrer (-6° : 0°). Pennadoù a zo bet eus an 11 d'an 18 a viz Kerzu, eus ar 14 d'ar 16 a viz Genver, eus ar 24 a viz Genver d'ar 4 a viz C'hwevrer (gant barroùigoù erc'h d'ar 24 ha d'ar 25, an erc'h nemetañ a ve bet er goañv-mañ), eus ar 15 d'an 20 a viz C'hwevrer, eus ar 5 d'an 12 a viz Meurzh, eus an 3 d'ar 5 a viz Ebrel hag eus an 28 eus ar miz-se d'an 1 a viz Mae.

AN AVELIOU

Mar deo bet ar goañv diwezhañ yenoc'h eget an hini a-raok, ez eo bet avat kalz sioulloc'h an avel : pemp gwech hepken ez eus bet avel foll tra ma oa bet seizh gwech er goañv kent ; 30 gwech all ez eus bet avel greñv (37 gwech kent), met 24 devezhiad sioul a zo bet (14 hepken er goañv a-raok). Ar pennad gwashañ avel a zo bet eus ar 27 a viz Du d'an 2 a viz Kerzu, gant deiz kentañ ar miz-mañ an hini gwashañ. Met ar peurrest a viz Kerzu a zo bet sioul souezhus. Ar c'hreñvañ m'eo bet an avel goude-se eo d'an 11 ha d'an 12 a viz C'hwevrer.

Eus ar gornaoueg e teuas an avel an allisañ (61 wech), met tost da vat ken alles e teuas eus ar reter (59 gwech). Hag a zo sebezus a-walc'h : allisaoc'h e c'hwezhas an avel eus an uhel (noz da c'hevred) eget na reas eus an izel (su da walam) : 107 gwech ouzh 97. Mar deo uheloc'h an niver kavet evel-se evit an daou du (204) eget hini an devezhioù goañv (182) eo ez eus bet devezhiennoù gant avel eus an daou du. An

avel uhel a voe trec'h e mizioù Kerzu. Meurzh ha dreist-holl Ebrel, an avel izel e miz Du ha dreist-holl e miz Genver. Ma seller dre drimizad e weler ez eo bet trec'h an avel izel e-pad an trimiz kentañ (54 gwech ouzh 47 war 92 devezh) hag an avel uhel a drec'has en eil trimiz (60 gwech ouzh 43 war 90 devezh).

Un diverrañ dre viz a vo kavet amañ da heul :

Taolenn 1

	MIZ	AVEL UHEL	AVEL IZEL	EN HOLL
1975	Du	14	19	33
	Kerzu	22	13	35
1976	Genver	11	22	33
	C'hwevrer	16	15	31
	Meurzh	20	17	37
	Ebrel	24	11	35
Goañv	107	97	204	

N'eus bet devezh sioul ebet e miz Meurzh hag e miz Ebrel, met e miz Kerzu ez eus bet daouzek anezhe. E pep hini eus an tri miz all ez eus bet pevar devezh.

HEOL HA KOUMOUL

Dre vras ne vez ket ar goañv, dreist-holl ar penn-kentañ anezhañ, ur pred amzer ken heoliek ha ma vez an hañv, dreist-holl o vezañ ha ma vez kalz berroc'h an devezhioù, met ivez dre ma chom kalz izeloc'h war an oabl ha dre-se en devez da dreuziñ ar c'hoabr kalz muic'h a-veskell evit dont betek ennomp, o reiñ da grediñ an doare-se ez eo kalz tevoc'h pep kumoulenn eget ne deo e gwirionez. Gouzout a reer e toug daou viz kentañ ar goañv an anvioù *du* (da lavarout eo teñval) ha *Kerzu* (teñval meurbet), n'eo ket hepken dre ma vez neuze an devezhioù en o berrañ, met ivez dre ma vez an oabl gwall goumoulek peurliesañ neuze. N'eus forzh pa vare eus ar bloaz e c'heller avat rannañ an devezhioù etre devezhioù heoliet ha devezhioù hep heol, re c'heoliet. Ar rummad kentañ a c'hell d'e dro bezañ ennañ devezhioù heoliet-kaer pa vez fraezh an oabl, re all heoliet bravik pa vez kumoul o tremen (un

devezhiad barroù dourek a c'hell bezañ un devezh heoliet-mat), pe neuze re all heoliet dister. An devezhiou hep heol d'o zro a c'hell bezañ sklaer a-walc'h ma teu a-benn ar sklerijenn da dreuziñ aes a-walc'h ar gwiskad kourmoul, bez e c'hellont ivez bezañ teñval pa vez izel an oabl ha tev ar c'houmoul. Teñval e vez ivez an amzer pa vez mogidell pe vrumenn, met muioc'h a vogidell a vez pa vez amez heoliek, peurvuiñ e penn kentañ an devezh, eget na vez da heul ar glav.

Ar goañv diwezhañ a zo bet war un dro kalz heoliekoc'h ha teñvaloc'h eget an hini a-raok : 113 devezh heoliet, 84 anezhe heoliet bravik a zo bet er goañv-mañ tra ne oa bet en hini a-raok nemet 87 devezh heoliet, ha 30 hepken heoliet madik a-walc'h. Tri devezh teñval ha tregont a zo bet avat, enep unnek diagent.

An daou viz teñvalañ a zo bet, hag a bell, miz Kerzu ha miz Genver : n'eus bet, e pep hini anezhe, nemet 12 devezh gant heol, ar pezh a ra koulskoude muioc'hik eget ar goañv a-raok ma oa bet 10 hag 11 ; hag e miz Genver n'eus bet nemet pemp devezh heoliet madik a-walc'h (met arlene ne oa bet nemet unan !). E-pad tri miz kentañ ar goañv n'eus bet avat nemet daou devezh gant mogidell, ha c'hoazh e oant an 30 hag an 31 a viz Genver ; ar muiañ mogidell, pemp gwech evel arlene, a zo bet e miz C'hwevrer.

Setu amañ da heul un diverrañ eus devezhiou ar goañv evit ar pezh a sell ar sklerijenn :

Taolenn 2

MIZ	TENVAL	HEOLIET		GANT MOGIDELL
		EN HOLL	BRAVIK	
1975 Du	5	20	14	0
Kerzu	11	12	9	0
1976 Genver	9	12	5	2
C'hwevrer	6	17	13	5
Meurzh	0	24	19	3
Ebrel	2	28	24	4
6 miz goañv (goañv 74-75)	33 (11)	113 (87)	84 (30)	14 (10)

AR SEC'HOR

Ar goañv a vez peurvuiñ koulz ar glaveier bras, dreist-holl e-doug an tri miz kentañ anezhañ. Hag evit an tri miz o tont da heul tro ar bloavezh ec'h anavezzer an dro-lavar :

- Miz Genver da gargañ ar fezier,
- Miz C'hwevrer d'o c'hendalc'her,
- Miz Meurzh gant ur c'hwezha-denn o c'haoc'h.

Ma l'er goañv-mañ ne deo ket miz Genver eo en deus karget ar fezier, ha paneve da viz Du e oant e riski ha da vezañ bet chomet dizour. N'eus bet nemet miz C'hwevrer, er goañv tremen, hag e vije bet glav ennañ aliesoc'h eget ar goañv a-raok, hag e miz Ebrel n'eus bet nemet tri devezh gant glav ha glav skleriek anezhañ ouzhpenn, e 1975. Er goañv a-bezh n'eus bet nemet nav devezh gant glav bras, ha c'hoazh pemp eus an nav-se a oa e miz Du, gant ur seizhvet devezh d'an 1 a viz Kerzu. Diwezatac'h n'eus bet pennadoù dourek a-walc'h nemet etre an 5 hag an 12 a viz C'hwevrer, hag un devezhiad d'an 22 a viz Meurzh.

Setu un daolenn o tiskouez niver an devezhiou glav dre viz :

Taolenn 3

MIZ	GANT	KALZIK	GLAV
	GLAV	GLAV	BRAS
1975 Du	20	0	5
Kerzu	15	2	1
1976 Genver	16	0	0
Tri miz	51	10	6
C'hwevrer	14	3	2
Meurzh	13	3	1
Ebrel	3	0	0
Tri miz	30	6	3
6 miz goañv (goañv 74-75)	61 (107)	16 (30)	9 (17)

Pa skrivan ar pennad-mañ eo aet e-biou pemzek devezh kentañ miz Mae ; pe lavarinn ez eus bet eizh eus an devezhiou gant glav e vo peadra da grediñ ez eo bet douret bravik an trevadoù, ar pezh n'eo ket,

rak an tammig «foetaj» a zo bet n'en deus ket zoken glebiet ar poultr, ha ne deo ket an tri devezhiad tommder a zo bet etre ar 6 hag an 8 eo o deus gwellaet an traoù, kennebeut hag ar revnenn a zo bet d'ar 14.

Bloavezhioù sec'hor a zo bet a-vis-koazh war hor bro, met bez e veze anezhañ kentoc'h sec'hor hañv. An hañvezh sec'hañ bet anavezet gant ar re gosañ eus tud hor rummad eo moarvat hini 1921, hag e bloaz-se e padas ar sec'hor betek goude bredeleg.

Bloavezhioù all chomet brudet evit o sec'horioù pe an tomin ma oant bet : 1928, 1947 (tommder), 1949, 1955, 1959... Met da heul ar bloavezhioù kras-se e teue alies avat bloavezhioù ha dreist-holl goañvezhiou dourek. Goude hañvezh kras 1959, e teuas ar goañv dourek ha 1960 a voe ivez dourek ar maremek (1 606 mm e Brest, ar pezh a oa 516 mm muioc'h eget niver etre 1921-1950), met bremañ ne zeu mui ar glaveier goañv bep bloaz da gargañ ar fezier na da vagon ar mammennou, ken ez eus peadra d'en em c'houlenn ha ne vije ket bet kemm gant an amzer un nebeud bloavezhioù 'zo, ar mell o vezañ bet marteze goañvezh kriz 1962-63 (ma skornas ar mor e lec'hioù 'zo war aodoù Breizh !) : Abaoe n'eus bet goañv kriz ebet, hag ar pezh a zo anat dreist-holl eo e vez yenc'h an nevez-amzer eget ne veze gwechall. Ne zeu mui ar pechez, na zoken ar prun, el liorzhoù, hag e 1975 e voe rev zoken d'an deiz kentañ a viz Mezheven. Ha dreist-holl, nebeutoc'h a hañvezhiou gleborek a vez bremañ. Krasoc'h an hañvezhiou, penaos e vo ma teu ar goañvezhiou da vezañ kras d'o zro, bremañ pa vez muioc'h-mui ezhomm a zour evit an ti hag evit ar maez ?

UN NEBEUDIG KELEIER

PRIZ LENNEGEL LANGLEIZ :

Er bloaz-mañ e vo savet, en anv KUZUL AR BREZHONEG, ur priz lennegel, e gwerzennoù pe e komz-plaen, e memor eus an Ao. ZVIER LANGLEIZ. Ar skrid e komz-plaen en devo 50 pajenn skrivaerzet

da nebeutañ ; evit ar varzhoniezh n'eus ket bet merket niver ebet al linennou. Skridoù ar genstrivadeg a vo da gas da :

v-Maodez GLANNDOUR - Keresperz
22700 LOUANNEG

a-benn an 30 a viz Gwengolo 1976, e teir skouerenn, e brezhoneg unvan. Ar priz a vo 1 000,00 lur. Roet e vo e miz Kerzu. Ar varnerien avat, a c'hell divizout chom hep reiñ ar priz. Gallout a raint ivez lakaat embann an oberenn bet ganti ar priz, goude emglev gant ar skrivagner.

DOM GODU

E dibenn miz Kerzu 1975 eo bet marvet e Pariz an Tad Dom GODU. Un toullad mat a vloavezhioù en devoa tremenet e ti an Itron Sant Per, e St-Brieg, e-keit ha m'edo o sevel roll an anvioù-lec'h evit Skol-Veur Roazhon, e ti an dielloù. Milieroù ha milieroù a fichennou en deus bet savet evel-se hag a bourchaso labour d'ar furcherien evit un toullad mat a vloavezhioù Gantañ ivez e oa bet savet taolennou al levr *Notennou diwar-benn ar Gelted kozh* ha difallet an amprouennoù. Talvezout a rafe ar boan kentañ e vuhez. Ganet e oa bet en Naoned, e 1888 (Doue d'e bardono !).

BOKEN

Bec'h a zo atav, e Boken, kas gouzout piv a gemero an abati bet adsavet gant Dom Aleksiz. Urzh ar Sistersianed eo a zo perc'henn an abati, hag aotreet ez eus bet un urzh-leanezed *«Leanezed Betlehem»* da zonet d'en em ziazzañ eno. Met n'eo ket ingalet an traoù c'hoazh, pell ac'hano. Disrann a zo atav etre an dud : darn a-du evit derc'hel gant labour Dom Aleksiz, darn all a-du gant taol-arnod Bernez Bezzad (40 beleg eus Eskopti Sant-Brieg, o deus bet sinet ul lizher a-du gant hemañ), ha neuze darn all a-du evit gwelout Leanezed Betlehem o tont di...

LEONID PLIOUTCHTCH :

E gwirionez, ne deo ket ar matamategour-se ur rusian, evel ma oa bet merket war *VARR-HEOL* diwezhañ, met un ukrainiad (not. degaset gant A.L., trugarez dezhañ).

KENTELIOU D'AR PEVARLAMM-RUZ

Adalek al lun 5 a viz Gouere betek an 9, e Skol-Veur Roazhon, kentelloù prim-ha-

prim da zeskiñ komz brezhoneg (crash course). Ar stourm gwellañ-holl anavezet betek-hen, modern-tre ha liesdoare.

Skrivañ da :

Per DENEZ - Skol-Veur Roazhon
Kevrenn Geltiek - Pellg. (99) 59.20.33.

LIDEREZH HA MENOZIOU NEVEZ

Pariz 26 a viz Ebrel 1976

Aotrou Person ha Renner **BARR-HEOL**

En deiz all e oa bet dedennet va evezh, en ul levr di eus Pariz gant ul levrig golo melen, dezhañ evel titl : **MISSALE ROMANUM ET MISSEL ROMAIN**, savet gant an Tad RENIE, un den hag en deus embannet un toullad levrioù eus ar Skritur-Sakr. En em lez e oan da vezañ temptet ha prenet al levr (1).

Bet am eus graet gwechall va studioù klasel, evel ma vez lavaret, ha daoust ma'z eo erru mervlet a-walc'h va latin ha va gresianeg, e c'hellan c'hoazh evelkent kompren un draig bennak. An oberour, an Tad RENIE, a zo bet kuzulier e Komision ar Bibl, e Roma, ha bet rener pe superior zoken kloerdiou bras Kêr-ar-Milinoù (Moulines) ha Nevezdin (Nevers). Un den gouiziek, sur-mat. N'em eus ket gallet meizañ ervat pep tra, met war a seblant lavarout, ne deo ket bet gwall-fidel an droourien d'an destenn latinek savet gant Roma. Daoust n'hen lavar ket, e ra an Tad RENIE evel p'en defe c'hoant da damall dezho ivez bezañ gwariet ha kammet ar gelennadurezh katolik a zo el Liderezh. Ha gwashañ pezh a zo e ro skouerioù hag o deus va lakët un tamm nec'het, rak kement a dezennou, (kement a c'hedon !) a vez laosket da redek en amzer a-vremañ, ken hor bez poan a-wechoù, ni paour-kaezh laiked, o'n em zibab.

Diwall a rafent, da skouer, ar muiañ ma c'hellont d'ober gant gerioù evel «sacrifice» (aberzh, sakrifis) evit ober dreist-holl, gant ar ger «Eukaristiezh». Tamall a ra dezho ivez bezañ tennet kuit ar ger «semper»; Beata Maria semper Virgo (Ar Werc'hez glorius Vari bepred Gwerc'hez, evel ma oa

bet desket dimp en hor c'hatekiz). Daoust hag o defe c'hoant da reiñ da grediñ he defe bet ar Werc'hez Vari bugale all estraget Hor Salver ? Neuze e vefe hor feiz bremañ tost-tre da hini ar Brotestanted ? Iskis-tre e kavan kement-se holl.

Diwar-benn Adsav Hor Salver a varv da vev, evel Adsav ar C'horfoù marv e fin ar bed, e kav an Tad RENIE traoù da abegiñ en troidigezhioù nevez. Ha me 'oas. Ne gomzan ket eveljust, eus ar stumm m'eo bet troet al latin : laosk ha frank, evel an Tad : n'on ket mailh a-walc'h da vezañ ha bez'ho pefe, Aotrou Person, ar vev-sech d'am sklerijenniñ un tamm war ar poan-se, ha da lavarout din petra a savas ar veleien ? Ne vefe ket un dra fall, a gwall-embann ho respont war **VARR-HEOL** ha lennan atav gant evezh ha plijadur !

Trugarez deoc'h en a-raok. Gwelloc'h doujusañ gourc'hemennoù.

Yann B.

Goude-skrid. Evit espern deoc'h ar *Missal hag amzer, e kasan deoc'h al levr da welout, hag ur wech m'ho po hen stardiet e c'hellot hen degas din en-droad Trugarez.*

RESPONT KLERG - BULIEN

2 a viz Mae 1976

Kenvroad ha keneil ker,

Kerkent ha resevet ho lizher hag al levr am eus graet un tamm tremen war hemañ, buanik avat, met trawalc'h evit damgompen ho nec'hamant... C'hwï a lavar din embann va respont war **VARR-HEOL**. Hen ober a ran eta, met gant un tamm diegl, rak n'eo ket stank-stank marteze ar lennerien a blij dezho ar studiadennoù evel-se, dre ma troont da vezañ labourioù teknikel, evit gwir. Klask a rin eta bezañ sklaer ha diwall diouzh mont re war un dachenn 'lec'h ma vefen risklet va-unan da sac'hañ marteze.

Da gentañ, e rin un evezhiadenn. An Tad RENIE a zo ur Biblour, un den hag en deus pledet dreist-holl gant ar Skritur-Sakr h n'eo ket lavaret e vefe ken ampart al war dachenn al Liderezh ha yezh al Liderezh, daoust ma'z eo stag-ouzh-stag Skritur-Sakr ha Liderezh, evel ma ouzoc'h.

Sellomp da gentañ petra eo labour ur jubennour mat. Evit bezañ jubennour, pe «trouer» mar kir, e ranker gouzout ervat an div yezh : ar yezh da dreiñ hag ar yezh a droer anni an destenn da dreiñ. Amañ eta

evit pezh a sell ouzh ar **MISAL ROMAN**, e oa dileet d'an droourien bezañ akuit war al latin ha war ar galleg, se 'zo sklaer... Al latin avat, n'eo ket ur yezh unan, ur yezh unvan, pell ac'hano ! A bep seurt latinoù 'zo. Al latin kozh, lakaomp a-raok Kikero ha Kaezar, neuze al latin-aur (*latinus aurea*), en amzer an impalaer Augustus ; neuze, al latin-arc'hant (*latinus argentea*) al latin izel (*senior et infima latinitas*), hag all... Ha neuze latin ar Grennamzer ennañ o paotañ ar reoù-lavar poblek ha gerioù tennet eus ar reoù komzet. Dav gortoz betek an troidigezh a-raok adgwelout o vleuniañ ar latin-Aour, da lavarout eo, al latin klasel. N'eo eud an adsav-se, pe an distro-se d'ar liderezh, e oa bet darbet d'al latin mervlet mat, met dre vras ez eo e latin klasel e embannet Lizheroù-Meur ar Pibien, mat ma rankont derec'hel kont eus studiadennoù ar bed nevez hag eus studiadennoù a bep doare, ha stummañ o latin diouzh se, ha krouiñ traoù-lavar ha reoù-nevez.

En tu-hont d'al latinoù-se ez eus latinoù teknikel, evel pa lavafen, evel e pep sezh evit kement micher ha kement skiant a zo. Neuze 'ta hon eus Latin ar Filozofiezh, Latin an Deologiezh, hag evel just **LATIN AL LIDEREZH** (erru omp !).

Biskoazh-ha me beleg abaoe 40 vloaz 'zo-n'em eus bet kentel ebet a-fetepeañ war yezh al Liderezh, ne lavaran ket war al Liderezh, met *Yezh al Liderezh*. Na me, na va c'henvreudeur... Bremañ avat, ne ouzon ket peseurt studioù o deus graet war se, ar re a zo bet lakaet e Komision al Liderezh da dreiñ ar **MISSALE ROMANUM** e yezh ar C'hallaoued. Da grediñ eo e tlefant bezañ holl ispisialourien, rak ur yezh teknikel, forzh pehini, a zo leun e bechoù. Ha diouzh lenn an Tad RENIE ne dint ket holl mailhed war al latin-SE, hag e ro skouerioù eus ar fazioù souezhus ha na rafe ket, emezañ, ur skoliad mat.

Evit pezh a sell ouzh o labour e oa bet roet dezho urzhioù ha reolennoù. Ar pezh a damallfe dezho an T.R. e vefe bezañ kammet a-ratozh-kaer ster al latin, evit ober dezhañ klotañ gant o menozioù dezho o-unan, menozioù ha n'o deus seurt da welout gant al Liderezh, met menozioù an amzer o ren, liv modemist dezho mui pe vui. Ne lavar ket an T.R. kement-se, ha ne c'hell ket hen lavarout, rak ken soutil ez eo an traoù ma'z eo diaes sourpren trouer pe droour o siliñ e venozioù el lec'h-mañ-lec'h. Ha neuze o vezañ na ne c'hellant ket mont

evel-se a-enep-krenn d'ar feiz katolik, o devefe kempennet traoù-lavar dezho o-unan. Piv a gavfe abeg' en ur ger reizh-meurbet evel **EUKARISTIEZH**, nemet pa weler ar ger-se o terc'helda zidronañ ar gerioù all evel **SAKRIFIS**, pe **ABERZH** e c'heller en em c'houlenn hag-eñ ez eo hepken evit ober brav ez eo bet dilenet ar ger-se ken alies.

Met e-giz m'hon eus skrivet a-us, ez eo an Tad RENIE ur Biblour, un eksegetour da gentañ-penn, ha dre-se e c'hell lavarout e soñj diwar-benn troidigezhioù 'zo ha n'o deus ket kalz a dra d'ober gant an destenn-orin (cf. paj. 15) : «*C'hwï en em ziskouez evel just*» (Mzh. XXIII, 28), tra ma lavar ar gresianeg : «*C'hwï a seblant bezañ tud just (dirak daoulagad) an dud*». Estreget arliv a zo evelkent etre an div troidigezh.

Tamall a ra dezho bezañ lezet da gouezhañ ar ger **MAIESTAS** evit lakaat «**klod, gloar**» en e lec'h. Boutin a-walc'h ez eo memes tra ar ger-se o galleg, daoust ma n'eus mui na roue (ofisiel) na rouanez (ofisiel). N'eo ket seurt-se a vank koulskoude zoken er parrezioù bihan, met se 'zo ur gont all... Bezet a vezo, kavet ez eus bet e oa gwelloc'h disteurel ar ger ; an dra-se a sell ouzh gallerien. E brezhoneg ivez, na petra 'ta, ez eus bet kilët dirak ar ger «**Meurdeuz**», evit lakaat «**Gloar**» en e blas, ar pezh a c'heller kompren, rak ur ger divoaz a-walc'h ez eo genou ar bobl. Met alato ! *bravoc'h e kavan « kanomp meleudi d'ho KLOAR*» eget ar galleg difetis «*Nous chantons l'hymne de ta gloire*».

Kaout a ra an T. RENIE abeg ivez er stumm m'eo bet skarzhet kuit al latin «**Dignari**» *teurvezout, prizout*. Evel pa vefe c'hoant da izelaat ar yezh, evel ma oa c'hoant bremañ d'he demokratelaat dre raskañ ar «**Meurdeziou**».

Ur mestaol a c'hellfe bezañ aze koulskoude a-enep kenad al Liderezh... Traoùgoù ? Ya, met ur bern traoùgoù evel-se a c'hell lakaat ken plat an ofisoù-sakr ma teufent da vezañ ken koant ha delwennoù sulpisiat. Arabat krediñ evelkent ez eo «babet» (2) ar bobl kristen, teuc'h o spered, ha tamm kizidigezh ebet en o c'hreiz...

Un droidigezh vat graet evit ar bobl, da vezañ lennet, klevet pe ganet, a zlefe bezañ graet en kanlabour, rak gallout a ra pep den kaout e zoare da gompren an destenn ha d'he zrañ gouda, ar pezh a zo an hent surañ d'ober fazioù !

Peogwir e kaver e levr RENIE (paj. 30) lod eus troidigezh 4-e Prefas an Anaon, e lakomp amañ div droidigezh vrezhonek (3). Unan tennet eus al LEVR-OFERENN EVIT GOUELIOU AR SENT (Barr-Heol, Gwengolo 1973, paj. 98) hag eben tennet eus AN OFERENN INTERAMANT hag OFERENN AN ANAON (Studi Hag Ober, niv. 18-19, 1973, paj. 90) (4).

Barr-Heol :

Dre ho kalloud e vezomp ganet er bed-mañ, dre ho polontez e vezomp renet, ha dre ho kourc'hemenn, hervez lezenn ar pec'hed e tistroomp (tezomp) en douar ez omp bet tennet anezhañ.

STUDI HAG OBER

Rak c'hwi eo Mestr hor ganedigezh ha rener hor buhez, ha c'hwi a ro dimp an urzh, en abeg d'ar pec'hed da zistreiñ d'an douar ez omp bet tennet dioutañ.

An div droidigezh-se hag a c'helle bezañ kendeuzet d'ober unan hepken, a seblant bezañ sklaer ; tonkadur an den an hini a weler enno : genel, bevañ ha mervel (mervel, da lavarout eo «distreiñ en douar», «addont da vezañ douar evel ma'z omp bet tennet anezhañ (dioutañ)»). Hervez komz ar C'henelezh III.19 «Rak pri ez out ha d'ar pri e tistroñ». Ha kement-se en abeg da bec'hed hon tud kentañ.

Nag an Tad RENIE na trouerien ar MISALLE n'eo deus intentet an traoù evel-se. Daoust m'hon eus un tamm diegi ouzh hen ober, dav lakaat ur bommig latin amañ :

«Cuius praecepto in terra, de qua sumpti sumus, peccati lege absolvimur».

Troomp da gentañ ger-ha-ger, e kement ha ma'z eus tu, hep studiañ a re-dost an darn-frazenn-se :

Dre Hoc'h urzh en douar ez omp bet tennet anezhañ, e vezomp dieubet eus lezenn ar pec'hed.

Da lavarout eo : e rankomp tremen dre an douar evit paeañ hon die d'ar pec'hed. Tu ebet da arguiñ e-keñver ar gerioù : INTERRA = En douar, e-diabarzh an douar. Arabat kenveriañ ar GLORIA IN EXCELSIS e-lec'h ma kaver «et in terra» a zo un droidigezh fall eus ar gresianeg Epi Ges (war an douar)

O vezañ ma vefe re hir burutellat pep rann eus ar frazennig, ha borroddus hep mar evit an darnvuiañ eus lennerien Barr-Heol, 36

lavaromp neuze ne ro AL LEVR-OFERENN ha STUDI HAG OBER, d'hor meno, nemet un hanter eus ar menoz. (Ar brezhoneg amañ gant ar verb «e vezomp» a zo dreist da yezh all ebet. Eus ar resisañ.)

Gwelomp bremañ petra a lavar ar c'hallegerien hag e savimp 'm eus zonn ar pezh gad, unan da vianañ diwar d'heñ ar MISAL ROMAN, evel ma'z it da weler.

Troomp e brezhoneg «troidigezh RENIE» : «e vezomp dieubet eus lezenn ar pec'hed ADALEK an douar-mañ». Hervez ne glot ket gant al latin IN TERRA ma'z vefe c'hoant da zerc'hel kont eus GENEZIK (vide supra).

Petra a gaver neuze er MISAL ROMAN : «fellout a ra dit (penaos) ... diak AR VUHEZ-MAN, ni hag a zo bet tennet eus an douar, a vefe dieubet eus GALLOUD AN DROUG».

Setu dichezet hor gad, ha zoken, div marteze. Disebiant, hep lavarout ger ebet, setu rasket ar pec'hed orijinel, ha war un dro feiz an Iliz Katolik en Adsav ar C'horoù marv d'ar vuhez (daoust d'ar pezh a zeb war-lerc'h en eil rann eus ar Prefas : Ni hag a zo bet prenet gant marv ho Mab, a vezo galvet da adsevel, h.a.).

Perak, evit gwir, dre un taol-sigoterezh treiñ Lege Peccati dre ur «Galloud ar Marv» hag a seblant bezañ reizh ha dinoaz-kaer ? Ha komz eus «ADALEK ar VUHEZ-mañ ? Kement-se ne deo nemet nac'h dre guzh al lezenn c'harv douget adalek ar penn-kentañ eus ar bed : Mervel a ri, tremen a ri dre an douar, dre galon an douar, dre gof an douar evit bezañ disammet, dieubet eus da gorf-a-bec'hed, ha kaout pezh e frankiz bugale Doue. Evit hon trouerien : liamm ebet etre pec'hed, marv, an distreiñ en douar hag an dasorc'hiñ. Forzh pegen diaes e seblant al latin bezañ emaint sur-mat e-kichen ar biakenn, evit ober gant un dro-lavar nevez. A-ratozh-kaer ? N'ouzomp ket, met hervez tezennoù 'zo, n'eus adsav ebet d'ar vuhez : dre un taol-sigoterezh, evit adober gant an hevelep tro-lavar ha bremañ, e rofe Doue d'ar re a varv (lakomp e stad vat !) gras «un» adsav, (un) dasorc'h bennak kerent goude o marv. Kit da welout pehini ha pehini ! (5).

Re hir e vefe kenderc'hel da zibluskañ tamalloù an Tad RENIE. Merkomp evelkent ar pezh hoc'h eus merzet, diwar-benn an EUKARISTIEZH. Diabegus hag ortodoksel-rik ez eo ar ger, pa ne deo nemet unan eus

an anvioù a vez roet da Sakramant ar Mil-Anv, da Vister ar Feiz, hag a zo eta ar re-mañ ar re bennañ anezho :

EUKARISTIEZH, DONEZON, MAGADUR, EVAJ, KOMUNION, SAKRIFIS (aberzh), SAKRAMANT.

E brezhoneg ez eo kalz eeunoc'h an traoù : Sakramant an AOTER, pa'z eo heñvezh, evel pa lavarfen, an anv «ofisiel» ! Eukaristiezh a dalvez : gras-kaer, aneoudegezh, ar rentiñ-grasoù, an trugarekaat. Gwelout a rit, evitañ da vezañ un anv eus ar c'haerañ hag o tereout ouzh SAKRAMANT AN AOTER, ne lavar ket «revalc'h a-wechoù».

Rasklañ ken lies gwech ha ma c'heller an anv a «Sakrifis» a laka an nen da grediñ n'eo ket bet en em gavet kement-se dre degouezh hepken, met a-fetepañs, a-ratozh-kaer. A-barzh ar fin : Sakramant an Aoter ne vefe mui nemet un akt a relijion a vefe implijet ennañ BARA HA GWIN, e memor eus Koan hon Aotrou, da drugarekaat Doue. Setu da vianañ ar pezh a wel an Tad RENIE ha ne vefe ket souezhus e vefe bet aet a-sil-kaer ar menozioù nevez-se en droidigezh c'hallek. Diaes eo prouiñ, evel m'eo diaes dislavarout.

Diwar-benn ar Werc'hez Vari, e kav din e c'heller bezañ a-du ganec'h. En amzerioù-mañ pa'z eus kement a silioù o klask en em silañ didrouz e pep framm eus an Iliz Katolik ez eo dav kaout traoù sklaer, komzoù sklaer. Dav bezañ war-vezh.

Er bloaz 1974, war unan eus kazetennoù ofisiel eskibien Breizh, e oa bet ur pennad diwar-benn Dasorc'h Hor Salver Jezuz-Krist hag e tislerie ar skrivagner n'en devoa ar «Bez Goullo» ster ebet e gwirionez, rak ar pezh a gonte evidomp n'eo ket an Istor an hini 'oa, met Feiz an Diskibien hag o stumm da vezañ ha da gompren an darvoud dreist-ordinal-se. War ziv dachenn disheñvel edo an Istor hag ar Feiz.

Traoù evel-se a zo bet lennet dija, ha dre-se n'eo ket digouizet na diamzeriet, siwazh, Lizher brudet ar Pab Pius X «Pascendi» diwar-benn ar vodernistiezh. (6).

Bremañ avat, petra da respont diwar-benn soñj hag emzalc'h ar veleien e-keñver ar Misal Nevez ? Ar veleien, daoust d'ar pezh a gred darn marteze a zo tud a volontez vat, hag a zegemer hep chipotal (nag e-keñver reolennoù-al-liderez, nag

e-keñver ar paeañ !) ar pezh a vez roet dezho, ha kalz anezho ne dint ket gouest, nag amzer n'eo deus ket ivez, da studiañ a-dost gant sikour al latin al levrioù a vez pdurchaset dezho. Sur-mat ne welont droug ebet, pa'z eo reizh hag ortodoksel, d'ar c'hentañ sell, ar skridoù a vez lakaet en o servij evit al Liderez. Tamm-ha-tamm avat, hep gouzout dezho, e vezint stummet d'ober gant ur geriadur nevez ha da haul ar gerioù-se e vo savet ur gredenn nevez ha na vo mui ar gredenn gatolik. Ha n'eo ket hep abeg kennebeut ma klasker teurel brud fall ha disfiz war Roma, da ziskar galloud ar Pab.

Re hir ha re verr war un dro ez eo va respont, kenvroad ha kenel ker. Met evelkent trugarez deoc'h da vezañ roet tu din da glask, en ur respont deoc'h, sklerijennañ lennerien BARR-HEOL, hervez va gouiziegezh dister ha va bolontez vat.


A galon.

KLERG

NOTENNOU DIWAR-BENN LIDEREZH HA MENNOZIOU NEVEZ

- 1 - Missale Romanum et Missal Roman, étude critique des traductions françaises du Missal et des Lictionnaires, par R.P. J. Renié, s.m. Editions du Cèdre, 13, rue Mazarine, Paris 1975.
- 2 - Distagañ bazet gant ar bouez-mouezh war ar silabenn diwezhañ.
- 3 - Testenn latin an arrouad-se : Cuius imperio nascimur, cuius arbitrio regimur, cuius praecepto in terra, de qua sumpti sumus peccati lege absolvimur...
- 4 - Setu amañ testenn eskopti Kemper : «C'hwi ho peus graet deomp dont er bed, c'hwi a ren ar vuhez, c'hwi a fell ganec'h e vefemp, ar bed-mañ dija, diwret diouzh galloud an droug, ni hag a zo bet tennet eus an douar». An at eo e heulh an destenn-se an droidigezh c'hallek. Despetus ez eo gwelout brezhonegerien o tizeal al latin gant ar riski da vezañ paket gant gwidreoù tud 'zo.
- 5 - Evit al latinegourien : Troidigezhioù STUDI HAG OBER hag LEVR-OFERENN a laka ar verb ABSOLVERE da dalvezout disaoberere : distagañ, diapenn, teuzh, evel pa lever St. Paol : «Cupio dissolvi et esse cum Christo». An droidigezh a roomp a gлот srvt gant al latin klasiel, rak konnatret e vez ar verb ABSOLVERE, kount lavarout atav, hag an aragunnoù A, DE, pe E. Latin an Iliz avat, a re gant A : Absolvere, A peccato, h.a. Amañ o vezañ n'eo stag lege peccati ouzh absolvimur ez eo kalz gwel loc'h, d'hor meno, darc'bel kont hepken eus ar ster klasiel.

6 - Cf. De falsis doctrinis modernistarum (Ex. Encycl. «Pascendi dominici gregis, 8 sept. 1907). Denzinger, Enchiridion Symbolorum, paj. 570 sq.
Ken mat ha nevez ez eo bepred ar gelennadurezh, eus ar resisañ, a zo er C'helic'hizher-Meur se.



Lizheroù

7/4/76. Kastell-Paol

Aotrou Klerg,

Kalz a blijadur am bevez atav o lenn **BARR-HEOL** dreist-holl ar pezh a sell ouzh ar vuhez a vremañ. Da kouer «*Rakvarnioù*», muioc'h c'hoazh «*An hini a son e gloc'h*», se a zegas d'am soñj an amzer ma oan klasket gant ar «*Gestapo*». Un dristidigezh eo evit ar «batrioted», ar vrogarourien, gwelet emañ adarre kouezhet hor bro dindan pav hon enebourien, gwaskerien hor yezh, o tigeriñ an toull-bac'h gant ar ger «*Liberté*» en o genoù.

Nerzh-kalon deoc'h da genderc'hel, stourmit ha dalc'hit «mort» atav evit ma chomo hor yezh bev...

Y.D.

20/4/76

... **BARR-HEOL** diwezhañ (88). Matre e vije bet ma ne vije ket chomet e pajennadoù 'zo kement a faziou-moulañ. Mat eo e-keñver danvez hag e-keñver moulañ (nemet ar faziou). Sklaer eo. Hor mignon Bruneau a zo o vont da vezañ ur skrivagner mat. Plijet en deus din kalz e zanevellig a anavezen dija an danvez anezhi. Hini J.Konan a zo mat ivez ha kemend-all a lavarfen diwar-benni an hini ho poa savet hoc'h-unan dwb. «*An hini a son e gloc'h*».

Ar paperou-brudañ kaset d'am skolidi wellañ o deus degaset koumananterien nevez, paogwir em eus gouezet o doa J.J. ha Silvia G. kemeret pep a goumanant...

L.A.

12/4/76. Jeruzalem, Israël.

(A-berzh an Aotrou P.Gall, person Eviaz aet da studiañ hebreeg da Israël, evit ur bloavezh)

N'am eus ket skrivet dit c'hoazh, met ken buan e tremen amzer ! Koulskoude e ran ur bern labour, ha n'em eus ket keuz da vezañ deuet...

Kaset em boa -evuruzamant- ma zroidigezh brezhonek ganin, hag em eus en em lakaet da adlenn gante (aezet !) ar **BIBL HEBREEK** a echuan evit ar sizhun... Goude ec'h adlennin buan an **EMGLEV NEVEZ** hebreek... Ma zroidigezhioù n'int ket fall -pell alese- met a-wechoù ez eo peñs ar brezhoneg evit klotañ gant urzh ar **Hebrek** hag a-wechoù e tremenan tamtruz ar fazienn gustum d'ar skribed).

Lenn a ran kalz eus ar yezh a vezañ evel just ; homañ a lak evidon ar **BIBL** aezetoc'h da lenn ha bevoc'h. Tevel astamm e «ran ma skouarn» diouzh ar **Hebrek** met gorrek. Pan an d'ar sinagog a-raok dudi kanañ gant an dud.

Dec'h hon eus graet prosiñs ar **Sul** ar **Beuz** eus **Bettage** da **Jehon** en e-pad tremen div eur : eus 14 eur betek 17 eur.. hiroc'h eget hini Sant **Eviaz**... muioc'h a dud. An devezh-mañ a ra ar **Pardon Bras**... An all eo an hini a-raok **Neddeleg**, e **Bethlehem** : prosiñs bras ivez...

Unan eus an teñzorioù am bo kavet emañ eo ar **SEFER-HEAGADA**, da lavarout eo «*Danevell Sulaouret*» (*Legenda aurea*), moarvat ar muiañ poblek emañ. Un dastumadeg eus prederiadennoù ar furien -ar rabbined- war ar **Bibl**. Tevoc'h eo al lev-mañ eget ar **Bibl** hag ar yezh a zo un tammig disheñvel diouzh hini lennegel ar **Bibl**, met bremañ hel lennan aezet a-walc'h goude ar c'hentelioù kentañ bet digant ar c'helenner a gelenn er **Skol Viblek**, war an **Talmud**. Met n'on ket aet e studioù donoc'h en **Talmud** : n'em eus nemet ur bloavezh hag ur vuhez ! An div bajenn a roan dit a c'hellez implijout gant pep frankiz d'o adstummañ evel ma kari... pe goulenn re all diganin.

Kalonek dit ha d'ar vignoned. Shalom!

1 - «... Er bloaz ma teuas **Israël** eus an **Ejipt**, ouzh **petra** e oant heñvel ? Ouzh ur goull a dec'h dirak ar **sparfell** hag a ya e faoutenn ar **roc'h**, hag a gav un naer war he neizh... **Ma'z a e-barzh**... e c'hwitello hag e flemmo an naer anezhi (ur ger hepken en hebreeg)... **Mar deu en-dro**... emañ ar **sparfell** er-maez prest d'he zapout... **Petra a ra ar goull** ? **Kregiñ a ra da grial** ha da skeiñ war he c'hostezioù evit ma klevo mestr ar c'houldri hag e tevio hemañ d'he saveteiñ.

*Evel-se e voe **Israël** e-tal ar mor... Diskenn er mor ne c'hellent ket... ne oa ket c'hoazh faoutet ar mor evite. Dont en-dro ne c'hellent ket rak emedo **Faraon** o tostaat.*

*Petra 'rejoint ? Aon bras enno e skrijas **Israël** war-zu an Aotrou... ha diouzhtu an Aotrou o savetas en deiz-se.*

2 - *Stad e voe en Ejiptianed pan eas kuit an **Hebrek** (eme ar Skritur). Heñvel ez eo kevrenn-mañ ouzh un den a-gig hag a-wad a-raok c'haoliad war un azen. An azen o c'hoazh pegoulz e tiskennje diwarnañ, hag heñvel o c'hortoz pegoulz e tiskennje diwar an azen. Kerkent ha ma tiskennas diwar an azen e voe stad an den, ha stad en azen, ha heñvelomp ket e pehini anezhe e voe stad ar **Hebrek**...*

*Evel-se gant **Israël** en Ejipt. Dont a ra ar **Hebrek** war an Ejiptianed hag edo an **Hebrek** o c'hortoz pegoulz e teuje d'o kevrennañ ar «**Sant-Benniget-ra-Vezou**» (Henne), hag a-dal ma'z ejont kuit ha ma oant dasprenet (dieubet) e voe stad enne... Hag e voe stad er re all... ha ne gouzomp ket e pehini e voe stad ar **Hebrek** en Ejiptianed pan ejont kuit.*

Lizherennou all, re hir avat, d'o lakaat emañ digant P.H., 94400 Vitry. Hemañ ur muziker anezhañ, a laka e dibenn e lizher :

«*Meuleudi, a galon vat, da Soazig Noblet evit an ton savet ganti war gomzoù A. Duval*».

Ul lizher all digant G. Bruneau gant ur pennad-skrid da heul.

LIZHER A-BERZH RADIO BREIZH

A-berzh Radio Breizh (Brest)

Degas a reomp da soñj e vez klevet bemdeiz, nemet d'ar sul hag en deizioù-gouel, ar c'heleier war **Radio KIMERC'H** (214 m) ha war M.F. (93 mghz) da 7 eur 20 diouzh ar beure ha da 12 eur 20. Da sul etre 11 eur ha 12 eur e c'heller klevet **LIV AN AMZER** ha **SPERED AN DUD** war an M.F. ha neuze etre 13 eur ha 14 eur war **Roazhon** ha **Kimerc'h**.

Evit **Breizh o Vevañ**, er skinwel : bep pemzek deiz, d'ar sadorn d'abardeas da 6 eur 15 ha d'al lun war-lerc'h da 1 eur 5.

Kenstrivadeg **Per Trepoz** anvet **Priz Per Trepoz** : e memor eus **Per TREPOZ**, displeger er **Radio**, mervet 10 vloaz 'zo. An

oberenn a ranko bezañ skrivet war-eun e brezhoneg, bezañ savet en doare ma c'helle bezañ c'hoariet da c'houde er **Radio**. Un dra diembann o padout d'an hirañ 20 munud. Bez'e c'hello meur a hin kenlabourat a-gevret da sevel an oberenn. Ar skridoù skrivet gant ar mekanik a ranko bezañ kaset a-raok ar 15 a viz **Gwengolo 1976** :

Abadennoù Brezhonek - FR 3,

Studio BREST - er P.A.C.,

Bali Clemenceau - 29200 BREST

Roet e vo ar przi, war-dro miz **Du 1976**, gant ur juri bodet evit-se.

Daou briz e c'hello bezañ roet : ur priz kentañ a 1 000 lur, hag un eilvet priz a 500 lur.

Evit kaout reolennoù ar genstrivadeg, skrivañ d'ar chomlec'h a-us.

EMBANNADURIOU AL LIAMM

FRANSEZ KERVELLA

**YEZHADUR BRAS
AR BREZHONEG**

503 pajenn

Eil mouladur reizhet

Priz : 50,00 lur

Da rakprenañ betek an 30 a viz **Meabeven**
Alexandr SOLJENTZYN

Ti Vatriona

lakaet e brezhoneg
gant **Ereost** ar **Barzhig**

War baper betenn : 10 lur hag mizad-kes a-lerc'h 13 lur
War baper keser niverennet, hag mizad : 17 lur

511e J. GUILLE, 47, rue Notre-Dame, Guingamp

— C.C.P. 1136 82 Rennes —

Bro va C'havell

Diskan $\text{♩} = 90$

Ero va c'havell, douar santel, Selaou mouezh da vibien fe-

-al! Ni a zougo sonn da vanniel: En hon dorn e chomo di-

-vrall. Gant an hent hon eus dibabet, Penn-da-benn ni'zalc'ho di-

-nec'h. Na pa vefe hir ha kalet, Rak hor Bro, sur-mat, a vo

trec'h! Evit mirout he frankizoù d'ar vro gaer a zo anvet

Breizh, Hon tud kozh, hor yaouankizoù A stourmas gant kalon ha

feiz. Warnomp ive eo dirollet An avel fallakr a bep tu, Hag hon

herezh vo peurgollet Mar ne ziwallomp ket diouzhtu : Bro va...

Diskan §

Pep gwir miret strizh